



TONKAD

63

**YOUENN OLIER ABENNEZ KERVORC'H JIL
EWAN JORD PENNAOD GWELTAZ BODMAEN
ABANNA ALAN TORAVEL ERWAN GWEGEN
BREC'HED KERNE RIGAKOS KREIZENN
IMBOURC'H STURYEZHOURIEZH S.A.D.E.D.**

PREDER
Kaier 53-54
Du-Kerzu 1963

TONKAD

63

An trede kaier o tont dindan an talbenn "Tonkad" a zo gouestlet d'ar yezh. Tonkad ar yezh. Daouzek aozer, - unnek skrivagner hag ur greizenn studi, - o deus fiziet e Preder o frederiadennoù war tonkad ar brezhoneg.

YOUENN OLIER a daolenn stad ar brezhoneg er mare-mañ a-benn tresañ linennoù bras Leviadur ar Yezh pa vo Breizhiz levierion o bro. ABENNEZ a zizarbenn un nebeut sorc'henoù hir o zremenven hag a ro alioù d'e genyaouerion. KERVORC'H a zegas da goun unded sevenadur Keltia hag ar gonid a zo da dennañ eus studi ar yezhoù keltiek all. Kemenn a ra JIL EWAN savidigezh Akademiezh Vreizh, o kinnig ur raktres reoliadur evit Kevrann ar Geriadur. GOULVEN PENNAOD a gornzigor deomp arc'had vurzhdus an henvrezhoneg, tra ma tiskouez GWELTAZ BODMAEN dreistelezh ar brezhoneg evel yezh arnevez, evel yezh-Stad hor Riez da zont. ABANNA a gas ur geñveriadenn etre yezh al Lennegezh ha yezh ar ouiziegezh. Prederiet eo ALAN TORAVEL gant stad an emsav sevenadurel. ERWAN GWEGEN ivez a sell ouzh doareoù ar stourm politikel evit bevaat ar yezh. BREC'HED KERNE, ar plac'h nemeti eus strollad kenskriv-erion Tonkad 63, a ra prosez renerion ar MOB, pa n'int ket bet evit meizañ Breizh en he c'hlokted. RIGAKOS a c'hell keñveriañ tonkad meur a yezh e meur a gantved, hag anataat penaos en em gav bepred ereet haelled an dud ha haelled ar yezh. Klozañ a ra an dastumadenn war ur studienn-skouer a sturyezhouriezh aozet evit Preder gant KREIZENN IMBOURC'H STURIEZHOURIEZH S.A.D.E.D.

YOUENN OLIER

DAZONT AR BREZHONEG

I

Peseurt dazont a zo d'ar brezhoneg ? Petra 'vo e donkadur ? Koazhedigezh ha marvedigezh pe advuhez hag emled ? Gwell zisklaer eo c'hoazh amzer da zont hor yezh divizet ha maz eo gant darvoudoù politikel ha n'eo ket sur c'hoazh e c'hoarvezint. Doue hepken a oar petra a zo tonket dezhañ.

Evit ar poent eo teñval an dremmwel dirak hor yezh. Emeur bepred o komz eus ar "milion a vrezhonegerion". Hogen kement a zamanavezomp eus gwir stad ar yezh a ziskouezfe awalc'h n'eus ket 600.000 a dud a rafe bamdez Doue gantañ. Ar pezh a zo peuz-sur eo ne zesker ket mui brezhoneg d'ar vugale e nep lec'h e Goueled ar vro nemet en un nebeut pastelloù-bro, e Treger dreist-holl⁽¹⁾ war a seblant. Hañval awalc'h eo e c'hoarvezo gant ar brezhoneg a-benn 20 pe 30 vloaz ar pezh a zo c'hoarvezet gant an iwerzhoneg er c'hantved tremenet : koll ar rannyezhoù a vo enlec'hiet gant ar

(1) Hervez Alan al Louarn e vefe re wellaour seurt gwel eus an traoù. E neb lec'h ne zeskfed ar yezh d'ar vugale. O klevout ar re gozh e tapont un tamm bennak anezhi, setu holl.

galleg lennek. Adal bremañ ne oar ket mui kouerion yaouank Vreizh-Izel kement a vrezhoneg ha ma ouzont a c'hallag hag aesoc'h eo dezho displegaf o menozioù dre ar galleg eget dre ar brezhoneg. Heverk awalc'h eo er c'hefver-se anavadenn ar Gourvenneg - hemañ a zo paotr-araok ar gouerion e Breizh, e-giz ma ouzer, ul Leonad a-hend-all - hag a zisklerie e-kerzh ur brezegenn distaget gentañ dirak studierion ar MOB e Rnzhon e miz Meurzh diwezhañ ne oa ket gouest hag eñ brezhoneger a-vihanik da zezrevell mat e soñj diwar-benn kudenn al labour-douar e Breizh dre ar brezhoneg. Ar re eus ar Vretoned a oar c'hoazh o yezh etre 35 ha 40 vloaz her goar fall tre peurliesañ ha n'int ket evit hel legadif d'o bugale.

II

Ar yezh poblek skrivet n'eo ket kalz gwell he stad. Abaoe 1947 e c'heller lavarout ne embanner mui netra evit ar bobl, da lavarout eo abaoe m'o deus Kabusined Rosko dilezet o mouladurioù brezhonek. Krez-Breizh hag ar Bleun-Brug n'int ket bet lennet gant ar bobl koulz lavaret. A-hend-all, ar gelaouenn "Bleun-Brug" a zo bet gallekaet.

Un nabeudig tud desket, kêrzi an darn-vuiañ anezho, tud ha n'int ket kouerion a zo barrek da lenn ar yezh un tamm bennak, un tamm mat zoken a-wechoù. Pet a zo anezho ? Diaus eo reif un niver : etre 500 ha 1.000 emichañs (1.000 den a zo bet koumanantot d'"Al Liamm" tro pe dro).

Lod muiañ ar re-se o deus desket ar yezh el levrioù, drezo o-unan, gant harp ur c'halenner pe got. Hogen a-mesk ar mil-se n'eus nemet 500 a lenn brezhoneg ingal ma ne brenont kement skrid brezhonek a zeu ar-maez; e-touez ar 500-se n'eus nemet 150 pe 200, marteze 250 a zo gouest da lenn n'eus forzh petra, ekridoù skiantel h.a. Etre 30 hag 50 a zo evit skrivañ ar yezh klok-se.

Setu stad ar brezhoneg evit an empoent. E-tal ur yezh poblek diz-unvan ha peuz-varv, ur yezh lennek nevez ganet, war var da verval "d'an disterañ mouchig avel".

Ne gav ket din e talv ar bean dic'hoanagif. Abaoe ar brezel en deus graet ar brezhoneg lennek ul lamm-gresk sebezus : kollet o deus an nevez-vrezhonegerion an emskoulm a warded hag a gablusted o seize betek-hen hag emaint oc'h aloubif gant reizh an dachenn a zo digor direzo diwar dremenven ar rannyezhoù el ledenez-mañ.

III

Anv a zo bet er bloavezhioù tremenet eus kenlabour stre an nevez-vrezhonegerion ha dalc'harion an emsav kozh rannvroelour o labourat war dachenn Vreizh abaoe deroù ar c'hantved-mañ. Araok respont e vefe dav gwelout ha bez e c'hell ar re-mañ gonit un dra bennak d'ar yezh.

Ha da gentañ er skolioù kontrollet gant ar gouarnamant gall, e-touez ar bobl, war ar maez hag e kêr. Diouzh an tu-se, evit ar poent, n'eus netra da c'hortoz. Biken ne notreo ar gouarnamant gall ur gelaouenn-durezh efedus eus ar yezh.

Bez e c'hellfe an emsav rannvroel oher un dra bennak marteze hogen ne gred ket goulenn netra a-zevri peogwir e anavez aheurtterezh ar burevioù gall e-enep d'ar yezh.

Duzhpenn-se, ar renerion anezhañ ne ouzont ket mat petra a fall dezho, a gav din. Ar re diouto ha n'int ket broadelourion dre guzh ne spiont nemet dreistvuhez ur yezh hangounal desket - damzesket, pa lavaran mat - a nevez da bup rummad skolidi⁽¹⁾. Seurt yezh forzh penaos ne vefe ket mui bev e-touez ar bobl.

Rak-se, dreist-holl, e kredan ez eo dic'hallus kenlabourat gant ar rannvroelourion. Ne dalv ket ar bean en em gevredif ganto keit ha ma nac'ho ar re-mañ embann e fell dezho kemer digant ar galleg endro ar pezh an deus aloubet er vro-mañ a-enep d'ar gwir, keit ha ma nac'hint ivez degemer ez eo an emrenerezh hag ar stad vroadel kentañ divizoù silvidigezh ar yezh.

Ma vije rost o goulennoù taezañ zoken d'ar rannvroelourion ne c'hellfe ket ar brezhoneg dont da vesañ endro yezh pemdeziak an holl Vretoned gwitibunan, ar pezh a fell deomp-ni broadelourion. Mar karfemp kenlabourat ganto e rankfemp mont en o renk-int ha difenn goulennoù dispirus ha displetus a-grenn, da lavarout eo dilezel hon uhalvennad. Ar c'hontrol eo a fell deomp: d'ar rannvroelourion degemer hor mennadoù a-c'houez d'an holl ha dont an hor renk-ni.

Me 'oar e soñj ar rannvroelourion ez eo gwell forzh penaos kelenn un

(1) Setu pezh a gredan kompron. Mut avat e chom ar rannvroelourion diwar-benn o menozioù hag o goanagoù. Kredif a rafen a-walc'h n'o deus menoz ebet pe ne gredont ket anavez o dic'hoanag - nemet ne vefe o c'harantez evit ar brezhoneg netra nemet un albac'henn dibouez a-walc'h en o buhez goude holl. A-wechoù e lakaont ac'hanon da soñjal en amprevaned a vez serrret an ur voutailh hag a re hep skuizhañ an dro anezhi o kredif a kavint digor a-benn ar fin.

tammig ar yezh eget tamm ebet, ez eo gwella ivez un anaoudegezh diwar-c'horra eget an ankounac'h a-grenn, gant ma ve ledet an anaoudegezh-se e-touez un niver bras a dud. Amañ eo avat n'on ket a-du gant ar rannvroelourion, ma komprenañ mat o soñj. Hetusoc'h kalz eo evit ar yezh ur graonellad dir a vrezhonegourion e penn un emsav broadel a ray berzh warc'hozh hag a savo ur stad broadel eget un tropellad a vrezhonegerion damzesket a ranko dilezel ar yezh a-barzh pell forzh penaos : ur voullad vras a ere'h a deuzo dindan an heol.

Hep kontañ palioù all diforc'h mat etre ar rannvroelourion hag ar vroadelourion hag a vir outo avit ar poent a genlabourat en ur strollad unvan ez eo awalc'h ar c'hemm-mañ er moizadur o deus an daou rumm eus ar stoum evit ar yezh d'o derc'hel a-gostez an eil diouzh egile. Rak anat eo ne c'heller ket tizhout war un dro an daou bal am eus merket. Ret eo d'an emsaverion dibab ur brezelekaerzh bennak ha n'eo ket difretañ evel tud dall. Ma vijemp diskiant awalc'h evit anzav ez eo talvoudus obererezh ar rannvroelourion ezefe an holl re yaouank da vauzif er paludoù maz eo sanket enno stourmerion ar rummadoù kent. (1)

IV

Darn hag a vez marc'heted gant merfetiou didalvez o deus tamallet deomp bezañ miret ouzh ar gouarnamant gall aotren ar brezhoneg er skolioù dre ma nac'hemp "unvaniñ" ar yezh. Farsus e kavan an tamall-se. Daoust ha n'eus ket ur skritur vrezhonek ofisiel gall a zo anvet ar skolveuriag ? Gwall doull eo an digarez-se.

A-hend-all n'on ket a-enep d'an unvaniszh nemet ez eo ret, d'am soñj, a-zisrak, lakaat da glotañ mennadoù ha politikerezh an daou emsav. A-du e vefen gant un emglev ma kinnigfe "Kendalc'h" hag "Emglev Breizh" ar program-mañ, da skouer :

- 1) Sevel skolioù normal brezhonek
- 2) Kelenn bugale ar Goueled e brezhoneg nemetken betek 11 vloaz; e brezhoneg hag e galleg adal neuze betek fin o studioù; kelenn brezhoneg adal 11 vloaz e Gorre ar vro.
- 3) Reiñ ul lodenn d'ar brezhoneg evel banveg kelenn er skolioù-meur.

(1) A-du eo ar rannvroelourion gant ur yezh uhel hogen lennegel rik, da lavarout eo ne c'hellfe ket kemer er vuhez kevredigezhel ar c'hargoù sammet end-seun gant ar galleg. Deuet eo ar galleg da vezañ yezh voutin ha yezh velestradurel ar Vretoned. Dizistroùs eo kement-se, war o meno.

Mar deo an emsav rannvroel a-du evit harpañ ar mennadoù-se, o c'hinnig d'ar bobl ha d'ar gouarnamant gall war un dro, sevel ur raktrae d'o seveniñ e Breizh, neuze e talv ar boan hen harpañ ha prest on d'en em glevout gantañ. A-hend-all e vin atav a-enep. Spi am eus ez eo sklaer ar pezh am eus skrivet amañ.

Hinienoù a zaelo : perak goulen kemend-all peogwir eo sur ne vo biken roet deomp. Respont a ran. Ar pezh a zo a-bouez n'eo ket diframmañ ar pezh na vo aotreet biken dindan ar gouarnerezh gall, kredapl eo, hogen prientiñ sperezh ha menoz an dud da zegemer advrezhonekadur hag adkeltiek-adur ar vro en deiz ma vo diazezet ur gouarnerezh breizhat e Breizh. Bez e c'hell an emsav rannvroel kas an trevall-se da vat peogwir a vez selacuet gant an dud e Breizh, hervez a lavar da vihanañ.

V

Setu pezh a zlefad klask ober adal bremañ war dachenn ar gelennadurezh c'hall a-berzh-stad. Sellomp bremañ pezh a c'hellomp kas da benn war dachenn ar gelennadurezh prevez e Breizh dindan ar gouarnerezh gall. E gwirionez ne gredan ket e c'heller goanagiñ kalz tra. An abegoù o deus kaset "Skol Sant Erwan" d'an traoñ a gendalc'h da oberiañ : n'eus forzh peseurt skol vrezhonek prevez a savimp a chomo starniet er fram gall ha ne vo ket dishual; derc'hel kont a ranko eus reoliadurioù hag arnodennoù ar mererezh gall. Ne vo ket tu eta da sevel ur skol holl vrezhonek : ho pezet koun penaos eo heskinet Abanna dre m'en deus kredet sevel ur skol holl vrezhonek er gêr. Ha ret mat eo lavarout : ma ne saver ket skolioù holl vrezhonek ne dalv ket ar boan kregiñ gant al labour.

VI

Ar pezh a c'hellomp ober aes a-walc'h war dachenn ar stourm evit ar yezh eo hepken prientiñ binvioù ha diazezoù ur gelennadurezh vrezhonek. Kroget eo bet gant "Skol Sant Erwan" hep dornlevr ebet. Kentañ tra a vefe da ober eta, ma karfed stagañ endro gant deskadurezh ar c'hentañ derez, e vefe sevel an dornlevrioù-se. Mat e oa levr an ao. Kalvez, "Kontadennoù kozh ha nevez" hogen graet eo bet prim a-walc'h ha d'am soñj e vefe da adwelout. Un tamm fetis e oa a-hend-all; marteze e vefe mat skañvaat ha divarzañ anezhañ un nebeut. Diskouezadur al levr a vefe da gemm emc'hañs ivez.

Ret mat eo an zav n'hon eus doarnlevr ebet, estregret hennezh, evit ar vrezh-
onegerion yaouank : na jedoniezh, na yezhadur brezhonek diouzh o ead, nag
istor Breizh graet evita, nag istor Europa, na douaroniezh klok a-walc'h
eus Breizh, ar broioù keltiek hag Europa.

Moarvat hon eus un istor eus al lennegezh, hini Abeozen, hogen ne
zere ket kalz ouzh ar skolioù elfennel; aesoc'h e vefe implijout an teskad
nozot gant ar memes skrivagner.

Un dra a ranker soñjal : n'eo ket dav sevel ur skol holl vrezhonek
arazek bezaf kompennet an holl doarnlevrioù-se. Dre ma raent diouer eo, evit
darn, n'he deus ket gallet "Skol Sant Erwan" bezaf ur skol holl vrezhonek.

Souezhus a-walc'h eo ez eur krog da ziskoulmañ kalz gwell kudennoù
deskadurezh an eil derez. E gwirionez, hen adlavarout a ran, diboell eo
goulenn brezhonkaat deskadurezh an eil derez kent bezaf diskouezet e c'heller
e fed reiñ d'ur skoliad bannak un deskadurezh eus an eil derez-se e brezhoneg.

E sell da zeskadurezh an eil derez ez omp pourvezet gwelloc'h eget e
sell d'ar c'hentañ derez, daoust ma vank un toullad mat a levrioù c'hoazh
eveljust. Evelato hon eus en hor c'herz meur a levz mat a c'hell bezaf implijet
en eil derez : an hini gwellañ eo amichafs hini Arzel Even "Bevoniezh, savet
mat, skeudennet brav ha skrivet en un doare plijus.

Ar c'hammed brasaf war-raek hon eus graet eo diazevidigezh "S.A.D.E.D."
er bloaz-mañ. Krog mat eo "S.A.D.E.D." da bourchas an doarnlevrioù hon eus
ezhomm : fizik, douaroniezh, istor, yezhadur h.a. A zo gwelloc'h : staget
eo "S.A.D.E.D." ivez da gelenn ha da c'hourdoniañ studierion, d'o barrekaat
war ar brezhoneg skiantel ha teknek. Pouezus dreist eo an intrudu-se.

Evel dres, kalz a chom da ober c'hoazh. Studi meur a skiant n'eo ket
bet bouc'het en hor yezh. Oberannoù a yezhoniezh hon eus e brezhoneg hogen
diglok int alias; n'hon eus na yezhadur iwerzhonek klok, na geriadur kembre-
aek-brezhonek; dre vras, a-boan divrazet eo en hor yezh studi an div yezh
keltiek tramor pennañ. N'hon eus ket kennebeut all levrioù da zeskiañ yezhoù
bev estregret ar re geltiek : saozneg hag alamaneg dreist-holl. Managiñ a
rin ivez an hen yezhoù : latin ha gresianeg; diaes eo deomp dic'houzout a-
grenn yezhoù o deus stummet speredegezh voutin Kornogiz, na vern pezh a arguor
a-hend-all.

Ar programm-se n'eo ket stultennek rak bez e c'hell un nebeut tud empart
ha mennet start her c'has da benn hep re a boan. Bez ez eo al labour-se unan
efodus rak talvezout a ray da vrezhonekaat ar gelennadurezh ar stad breizhat.
Rak-se e tle an holl re a zo gouest d'hen ober gouestlañ o holl strivoù dezhi.

VI

Na gomzin ket eus doareoù all ar stourm evit ar yezh. Reoù zo evel
ar "Gendrav" a chomo aroueziel ma vez kaset da wir ur wech bannak. Arabat
e vefe ober anezhi un doare minic'hi a virfe ouzh ar stourmerion a welout
e tleont labourat da gentañ e sell d'ar stad vroadel. Evit pezh a zo eus
ar beilhadegoù hag ar festoù-noz ez eus bet graet kement a drouz en-dro
dezho e vefe difur reiñ ur pouez dreist dezho : n'o devo levezon ebet war
donkadur ar yezh; n'o deus nemet un dalvoudegezh a vruderezh. Ret holl
eo d'ar Vretoned parañ o selloù bepred war ar pal pennañ nemetañ a zo da
dizhout : ar stad vroadel.

VII

E gwirionez ne gradan ket nemeur e c'hellimp tizhout ar gelennad-
urezh e brezhoneg nag en eil nag ar c'hentañ derez dindan ar gouarnerezh
gall. N'hor bo ur chafs da dapout kement-se nemet pa vo bet savet ur stad
vroadel breizhat diwar intrudu ar re a zo bromañ e penn an emsav sevenad-
urel broadel. Pegoulz avat e c'hoarvezo kement-se ? A-benn 10, 15 pe 20
vloaz ? Deus hepken a oaz.

Ne vern penaos en devo ar gouarnamant breizhat kudennoù spontus da
ziskoulmañ a-barzh kas da wir uhelvennad an emsav broadel. Unan eus ar re
washaf e vo stad ar brezhoneg d'ar c'houlz ma klaskor a-zevri adsevel
anezhañ.

Gwirheñval a-walc'h eo ne vo mui komzet ar brezhoneg e neb lec'h
gant ar vugale neuze. Lavaret em eus ne gaver ket mui kerent e Goueled
ar vro o defe feiz a-walc'h e dezont ar yezh evit hen deskiñ d'o bugalo
- nemet un doarnedig a vroadelourion. Evelato, hiziv an deiz e oar ar
vugale un tamm mat a vrezhoneg c'hoazh ha darn anezho a zo gouest da gomz
a-wechoù dre ma vevont en ur aergelc'h brezhonek ha ma tapont ar yezh o
klevout ar re gozh o komz anezhi kenetrezo. Penaos e vo an traoù en deiz
- hag a zeuy emberr - ma savo ar vugale-se tiagezhioù d'o zro, da lavar-
out eo a-benn 15 pe 20 vloaz bannak ? Grevus tre eo ar gudenn-mañ rak
a-benn hantèr-kant vloaz e vo marv mik ar yezh ha n'eo ket sur zoken e
ouezo ar re yaouank e vo bet komzet ur yezh estregret ar galleg al ledenez-
mañ; n'eus nemet mont e kornioù 'zo bet digeltiekast e deroù ar c'hantved-
mañ e-giz Damgan nepell diouzh genoù ar Willan; eno ne oar ket mui an dud
ez eus bet komzet brezhoneg biskoazh en o zaolead. Hag an ankounac'h-se
a zo spontus rak diaesnat a ray al labour da adsevel ar spered bro e Breizh.

Ne vern penaos en devo ar gouarnamant breizhat kentaf da zremmañ ouzh un emgav start tre pa glasko adsevel ar brezhoneg, d'ar c'hilc'h anezhañ pa lavaran mat. Damheñvel e vo an emgav-se ouzh hini ar gouarnamant gall o tiazazañ skolioù gallek e Breizh-Izel e 1872 pe ouzh hini ar gouarnamant israelat o rankout skoliañ en hebraeg un engroez a enbroerion liesgouenn ha liesyezh.

VIII

Evel ar gouarnamantoù-se e ranko ar gouarnamant breizhat brezhonekaat ar skolioù en derou, ha da gentañ ar skolioù-meur hag ar skolioù-uhel.

Ret eo d'am soñj ober un diforc'h etre ar skolioù-meur a zo gouestlet d'ar studi ha d'ar c'hlaskezh hag ar skolioù-uhel kevredigezhel o deus ur roll a bouez da c'honri e buhez ar stad. Dishual e tle chom ar skolioù-meur studi evito da gaout ezhomm aus ar stad evit kas da benn o c'hefridi. Ne gredan ket ete e vo tu d'o brezhonekaat a-raok ma vo brezhonekaat ar vro hec'h-unan. A-hand-all e tle tutaerezh ar skolioù-meur-se bezañ diaz-zet war an emgavdibab.

N'eus ket heñvel gont, a adlavarn, gant ar skolioù-uhel o deus da bledañ gant buhez kevredigezhel ar vro. Tri rumm a rin anezho : ar skolioù-uhel a zle gourdoniñ diorourion, skolaerion ha kelennerion; ar re a zle stummañ ar velestrourion hor bo ezhomm anezho; ar re a zle pourchas stern-ataerion an arboellerezh e Breizh.

Sevel skolioù-mistri a vo an trevelli gentañ da seveniñ. Moarvat e vo rat lakaat ar skolaerion gozh abred a-walc'h war o leve ha lakaat ar re all dre rummoù da heuliañ kentelioù ar skolioù-mistri a vo da sevel diouzh-tu. Hep mar ebet e vo skolioù-mistri ar c'hentañ derez ar re bouezusañ hag o-touez ar re-mañ e roin ur plas ispisial d'ar skolioù o devo da brientañ an diorourion o devo da ober war-dro ar c'hrouadurioù etre 4 ha 6 vloaz. Roll an diorourion e vo deskiñ ar yezh d'an avrelodet dre zoareoù-ober "Montessori" da skouer. Evel just ne vo tu da sevel hevelep skolioù nemet ar c'hêrioù da gentañ. Hogen pouezus e vo ar c'hammed-se avelato rak mont a ray al lañs en dekedoù da zont gant ar c'hêrioù ha doustus a-walc'h eo e vevo an tri-c'hard eus an dud e Breizh a-benn pemp bloaz warn-ugent er c'hêrioù, pe da vihanaf en un amved kêrel.

Skolioù-mistri ar c'hentañ derez etre 6 ha 12 vloaz a vo ken pouezus all. Dav e vo d'an ensavadurioù-se reñf war un dro gant un deskadurezh uhel

e brezhoneg ur spered brogar ha broadel rik. Moarvat e vo meur a gudenn da ziskoulmañ e-keñver ar skolioù-mistri-se a vo meret gant ar stad, en abeg da zaourannadur an deskadurezh ar vro-mañ dindan ar gouarnerezh gall. Ret e vo klask un emglev etre an iliz hag ar stad evit diskoulmañ ar c'hud-annoù-se. Dre vras, a-hand-all, e ranko holl gudennoù ar gelennadurezh e Breizh bezañ adstudiet hag adsellet a-zevri gant ar Stad Vreizhat.

Damheñvel e vo kudenn an ensavadur evit an danvezioù kelennerion. Tutaet e vo ar re-mañ diwar genstrivañ; ar skolaerion a vo gouest a c'hello tremen eus ensavadur ar skolaerion da hini ar gelennerion diouzh ar memes divizoù hag ar re a yelo war-eeun er skol-se. Pal ar skol-se a vo barrekaat ar studierion da gelenn n'eus forzh peseurt danvez skiantel pe lennegel dre ar brezhoneg. Duzhpenn kas da benn o studioù skiantel rik e ranko ar gelennerion da zont deskiñ da vat o micher kelenner brezhonek ha breizhat.

Ar re na vint ket donezonet evit ar vicher gelenner a vezo heñchet war-du ar skolioù-meur studi hag ar c'hlaskezh. Int eo a roy tamm ha tamm ur framm brezhonek d'ar skolioù-meur studi.

Un dra a zo da verkañ mat amañ. An holl skolaerion hag an holl gelennerion o devo da dremen dre an ensavadurioù-se. Kement-se evit reñf d'an holl ur spered breizhat rik; ivez evit mirout na savfe gwarizi hag evez e korforiezh ar skolaerion hag ar gelennerion diwar tutaerezhioù diforc'h ha goproù dizingal.

IX

Moarvat ne vo ket ken aes sevel skol ar mererezh brezhonek rak da betra e talv deskiñ d'ar gargidi ur yezh ha n'o devo ket da implijout en o darempredoù gant an dud, a zealo reoù 'zo. Ne lavaran ket ez eo didalvez ar c'hraf-se hogen ne gredan ket e c'heller reñf re a bouez dezhañ. An dalc'h, war va men, eo lakaat kargidi hag implijidi da ober o labour ken-etrezo e brezhoneg hag an dra-se a vo gallus adal ma vint bet boazet ha gourdonet d'han ober er yezh-se a-pad o bloavezhioù-studi. Goude ma rank-fent mont da jubennourion gant an dud a zeufe d'o c'havout - ret holl e vo embann e brezhoneg nemetken ar paperennoù mererezh an abretañ ar gwellañ - e kustumfent ar poblerzh d'ar brezhoneg evel yezh ar velestradurezh hag an dra-se, hepmaiken, a vefe talvoudus dreist.

Un doare ispisial eus ar mererezh e vo en amzer-da-zont an hini e vo kefridiet er c'hudennoù armerzhel ken al labour-douar ken an ijinerzh. Seul retoc'h e vo kacout melestrourion o plediñ gant ar c'hudennoù-se ma

vo kenurzhiet an arboellerezh muic'h-mui. Dav e vo eta diwall na vije diorroet ar rumm kargidi-se e galleg; o stummañ dre ar brezhoneg a rankor. Kerkent ha ma vo tu e tleor diazezañ ar skol-veur ispisial a ray war-dro kudennoù armerzhel ar vro.

X

Eveljust ne c'hello ket ar skolioù-uhel-se e-fedif diouzhtu hag e-pad ur pennad amzer ne vimp ket evit argas a-grenn ar galleg en ur vro a vo bet gonezet dezhañ penn-da-benn koulz lavaret, pa ne ve, er penn kentañ, nemet en abeg d'an diouer a gelenneriek akuit, dreist-holl war an danvezioù teknek. War an dra-mañ avat e fell din pouezañ : pep tra a ranko bezañ prientet adal an deroù a-benn krouiñ en hor bro ur gelennadurezh vroadel par da hini an Izelvroioù pe ar broioù skandinavek. Eretant e rankimp, emichañs, reiñ ul lodenn bennak d'ar yezhoù etrevroadel en hor skolioù, ar galleg en o zouez. Dav e vo neuze klask diogelid ar c'hempouez hag ar c'hempouez a vo graet emichañs gant harp ar saozneg kentoc'h eget gant hini an alamaneg da skouer. Mat e vo eta kas hor studierion wellañ ar muiañ ma vo tu da gendec'hel gant o studioù e-barzh skolioù-meur dic'hall, er broioù keltiek, Bro-Saoz, Bro-Alamagn, ar broioù skandinavek pe zoken ar Stadoù-Unanet. War un dro e vo fur ivez padif studierion eus ar broioù keltiek da zont da gelenn pe da dremen marevezhioù-studi en hor bro : un eskemm a ranko bezañ ensavet. An dra-se eo n'he deus ket graet a-walc'h Bro-Iwerzhon a zo chomet en un amved saoz-amerikan. Evel maz eo kredoapl avat e vo genet Europa vras a-benn ar fin e c'hellimp ober hor mad eus ar framm nevez a zo o kemer stumm bramañ evit kas da benn ar raktres-se. Moarvat e tleimp diwall diouzh an diegi, al laoskentez, an digalon - diouzh an diskoulmoù sesañ : klask evel gwechall pep sklerijenn e Paris h.a. Hogen mard eo pennek a-walc'h gouarnamant Breizh neuze, sklerijennet a-walc'h kargidi ministrerezh ar yezh hag ar sevenadurezh, e c'hellint, sur mat, sevenañ o mennad.

XI

Estregat skolioù ez eus dober da adsevel ur yezh. Gant ar yaouankiz dre vras e ranko ministrerezh an deskadurezh lakat e holl breder ma fell dezhañ tizhout ar pal advrezhonekaat ar vro. Anet eo n'eo ket a-walc'h ar skol evit tizhout ar pal-se rak ned eo mui ar skol nemet darn eus buhez ur bugel pe ur c'hrennard a hiziv. Dav e vo eta d'ar stad breizhat kontrollañ a-dost an holl emsavioù yaouankiz e-keñvez ar yezh ha diwall e vent un hent da vrezhonekaat ar Vrezhoneg yaouank; argas a ranko an holl embregad-

urioù ha kenurzhadurioù o devo da bal pe da heuliad o obererezh d'ar hel yaouankiz Vreizh dindan gaez-ge ar galleg.

Hep emellout en o buhez spereidel e tleo ar stad breizhat goulenn digant an emsavioù yaouankiz hen harpañ en un doare e-fedus el labour advrezhonekaat ar vro, nac'hañ pep sikour ouzh ar re a chomfa disant, o divodañ zoken diouzh ret.

Evit ar c'helaouennoù bugale ne vo aotrest gwerzhaf e Breizh nemet ar re a roy ul lodenn d'ar yezh, adal ar penn-kentañ, a vo e brezhoneg hepken a-benn ur pennad amzer. Ar c'helaouennoù embannet e Paris eta a ranko moulañ doareoù brezhonek eus o c'helaouennoù ma fell dezho o gwerzhaf e Breizh.

Ar c'helaouennoù ordinal a ranko kaout o zalbenn e brezhoneg, da gentañ. Ar pajennoù gouestlet d'ar sportoù pe d'en danvezioù a c'hell dudiañ ar yaouankiz a ranko bezañ savet e brezhoneg adal pemp bloaz war-larc'h savidigezh ar stad; kemend-all evit ar "c'hemikoù". Divizet e vo gant ministrerezh ar yezh ur program brezhonekaat ar wask a-hed ur rumm bloavezhioù da dremenñ hervez an degouezhioù.

XII

Ar binvioù brudañ dre gomz-ha-skeudenn eo, avat, o devo pouez an amzer-da-zont evit kelenn ha kelaouiñ ar re yaouank. Ne gav ket din eta e c'hello ar binvioù-se bezañ lezet etre daouarn kompagnunezhioù prevez diuhelvennad ha na vint bleniet nemet gant skiant o gonid. Bez e tleo eta ar skingomzerezh-skinwelezezh bezañ ambilhet gant ministrerezh ar yezh, deskadurezh ha sevenadurezh. Ha dever hemañ e vo reiñ d'ar brezhoneg adal ar penn kentañ kement tachenn a c'hello d'ar hel hep damant re vras ouzh ar poblerezh. Da lavarout eo e tleo an holl abadennoù evit ar vugale hag ar yaouankizoù bezañ roet e yezh ar vro a-c'houde ur prantad amzer etre dek ha pemzek vloaz.

XIII

Dont a ran endro da gudenn ar mererezh. Evit ar valastradurezh e vo mat dremmañ ouzh ur program brezhonekaat resis. Daoust d'ar mizoù e vo dav moulañ an holl baperennoù a-bez-had-stad en div yezh. Ha kentoc'h eget reiñ paperezh vrezhonek pe c'hallek da nab a garo, reiñ d'an holl e-pad ur pennad amzer paperezhioù divyezhek e-lec'h e vo ar brezhoneg penn-yezh, ar galleg o vezañ moulet dindan e lizherennoù munut. A-benn 50 vloaz goude diazeziadigezh ar stad broadel ne vo mui aotrest nemet ar paperezhioù brezhonek.

A-walc'h a vrezhonegerion ampart a vo neuze er vro avit skoazellaf ar c'hall-egerion na vijent ket gouest c'hoazh da intent ar yezh. Biskozh n'en deus ar gouarnement gall dalc'het kont eus unvrezhonegezh Vreizh-Izel d'ar c'houlz ma da ar mestr e Breizh.

XIV

Ur mererezh all n'em eus ket meneget : hini al lu. Her menegif a ran bremañ peogwir ne veizan stad breizhat ebet hep lu broadel, bout ma ve en-fremmet al lu-se en ur c'hengroll soudardel etrevroadel, europat ha norzh-atlantek. O vezaf maz eo bet diazezet er vro-mañ hengoun ar servij-soudard e vo ret darc'hul dezhañ, goude ma ve en ur stumm dishefvel a-walc'h a sellfe dreist-holl ouzh difenn an douar e unan hag a rafe ivez eus ar servij-se ur servij keodedour kerkoulz all war un dro. Kement-se a dalvez e tleo ar servij-se kaout da bal startaat emskiant vroadel ar Vrezhonez yaouank. Se a dalvez ivez e vo brezhonek korforiezh an ofisourion hag ar mererezh a blede gantaf, anez bezañ didalvez pe zoken noazus ouzh ar vro.

XV

En deroù e anvor e-tal pep ministrerezh brezhonegerion dileuriet gant ministrerezh ar yezh. Karget e vint da vrezhonekaat ar skridoù a-gefridi hag ar skridoù teknek. Padout a ray o roll keit ha n'he devo ket Skol-Uhel ar mererezh ar gargidi vrezhonek a gemero tamm ha tamm lec'h ar c'hallegerion.

E sigur kement-se a lavarín ne daoler ket evezh a-walc'h en hon touez ouzh kudennoù yezh ar mererezh hag a denn da hini ar wirouriezh. Pa ouzer avat pebez plas en deus kemeret hag a gemer ar mererezh en ur gevredigezh rouestletoc'h-rouestletaf, dre hent an arboallerezh dreist-holl, ar C'hansikour h.a. ez on mantret o verzout pegen dibreded eo ar Vretoned er c'hefver-se. Anv a zo geneomp eus brezhonekaat yezh ar skiant; hogen yezh ar mererezh, yezh ar wirouriezh, an hini a sell ar muiaf ouzh buhez bamdez an dud, a lezomp a-grenn a-gostez. War va meno n'eo ket fur tamm ebet. Un arnod a zo bet kaset da benn gant Jil Ewan; n'oan ket a-du gant an holl c'herioù govaliet gantaf hogen da vihanañ en deus gwalet pebezh pouez ha deus ar gudenn-se. Mallus e vefe krouif ur greizenn a studi war al lezannouriezh hag an arboallouriezh.

XVI

Ur reolenn strizh a ranko bezañ endalc'hus a-benn 25 bloaz d'ar muiaf war-lerc'h diazeziged ar stad vroadel : nikun ne c'halle bezañ kannad er Breudoù anez bezañ brezhoneger. A-benn ur pennad amzer a vo da zivizout ivez e tleo an daeladegoù bezañ kaset an-dro e brezhoneg ha "kel-ouenn ar stad" bezañ skrivet e brezhoneg nemetken. Doust hag e Bro-C'hall e vefe degemeret ur c'hannad ha na oufe ket displegañ e soñj er yezh vroadel ?

o o o

KLOZADUR

Kement am eus nevez displeget a ziskouez a-walc'h e vo gwall gallet an hent da adsevel ar c'heltieg el ledenez-mañ hag hor bo-ni hag o devo hor mibion e-leizh a gudennoù da zilizaf ha skoilhoù a-yoc'h da drec'hia. Ar gudenn washaf e vo moarvat diseblanted ha diagi an dud hag ur gouarnement dileuriet gant ur bobl ha ne ve ket avz mat hec'h emskiant vroadel, digasted ha berboell ur c'henvenez dihefchet ha disturiet. Krafv e chomo ar rekvarnioù e Breizh e-pad ur prantad amzer emichañs.

Setu an arc'henebourion hor bo da faezhañ. Na vo gallus an dra-se avat nemet ma kresk an emsavioù savanadurel prevez a harpo labour ar stad hag a vroad anezhañ diouz ret, a levezono dre o bruderezh ar c'henvenez dallet.

Moarvat e vo c'hoeriet dazont ar brezhoneg e deroù buhez ar stad breizhat. Dav e vo d'ar re a vo kiriak anezhañ lakaat da zegemer gant ar gouarnement kentaf ur vonreizh, ul lezenn-diazez, ur c'henreizhadur, a vo war un dro ul lezenn-stur hag a linenna ar resisañ ar gwellañ ar program adsevel ar yezh hag a vo ivez peurendalc'hus. Da lavarout eo e tleo ar stad breizhat bezañ kaballet gant ur poellger a vrogerourion arvet evit o buhez, evel gargidi, hag o devo da gefridi diogelif keltiegezh ar stad : un doare kuzul-stad, ma karer, a zleo divizout pezh a zo a-du pe a-enep bonreizh ar riez vreizhat. Se a c'houlenn e ve peurdrec'h an emsav broadel d'ar mare ma vo savet ar stad vreizhat. Kement am eus dezrevallat n'eo gollus nemet ma teu an emsav broadel a-benn da gemer ar galloud e Breizh didabut karer.

An disoc'h eus kement-se holl e tle bezañ kreskadur ur vroad nevez a 8 pe 10 milion a dud o komz brezhoneg el ledenez-mañ. Moarvat diwar an niver-

se e oezzo un toullad mat yezhoù all estreget ar brezhoneg, mat pe fall, hogen dre vras e vo broad Vreizh ur vroad a vrezhonegerion unyezhek. Evel-se hepken e c'hellou degas un dra bennak talvoudus a-benn ar fin da gumuniezh kenvroadel Europa.

Deus d'hor skoazellañ da seveniñ hor mennad.

S.T.A.G.A.D.E.N.N

N'em eus ket ensellet kudenn an iliz hag ar yezh. Evit ar poent ez eo an iliz e Breizh un eztaoladur eus ar framme gall; ur c'henurzhadur gall ha gallek ez eo deuet da vezañ, un is-vererezh gall : diouzh maz eo ar gargidi anezhi anvet dindan levezon ar stad c'hall na reont nemet kreskiñ del-anvad ar stad, ar yezh hag ar sevenadur gall en hor bro. Kiriek eo d'an dra-se dallentez, berrwelerezh ha berrboellegezh eus kalz a bennadurezhioù an iliz katolik e Bro-C'hall ha n'int ket evit merzout ez eo reizh un uhelvenez nemet pa vez trec'h pe dost da drec'hiñ - hag a asant a galon skañv d'an holl zireizhderioù na ziaezont ket war-eeun o melestradurezh. Netra souezhus e kement-se : kemend-all a zo c'hoarvezet en Iwerzhon.

Evelato ne gav ket din hor bo dinesterioù ispisial a-berzh an iliz e Breizh pa vo bet savet ar stad vroadel : a-walc'h e gristenion a zo en emsav evit kemer buan lec'h ar sternoù gall e rankimp en em zizober diouto e stumm pe stumm. A-hend-all, diskouezet em eus a lec'h all na c'helle ket ar stad vreizhat bezañ enep-relijiel ha na vije ket eta a stoum etre an iliz hag ar stad el ledenez-mañ. Evel just ne vo diskoulmet da vat kudenn an iliz nemet pa vo zenet houmañ en hor bro gant broadelourion, da lavarout eo tud oc'h anvaz ez int Breizhiz ha n'o deus bro all ebet estreget Breizh. Da c'hortoz e vo ret eozañ un emglev etre an iliz hag ar stad, ur marc'had evit komz fraezh, a ziogelo d'ar stad vreizhat na implijo ket an dud a iliz o levezon e Breizh evit kendarc'hel da ober Gallacoued eus ar Vretoned, e implijint anezhañ er c'hontrol evit advroadelañ Breizh. Dreist-holl e tiefe ar stad vreizhat kaout digant an iliz e teskefe ar gelennadurezh kristen e brezhoneg adal ma vo gouest ar vugale pe an dud en oad da gompren anezhi ar yezh-se, e vije sevenet al lidoù ivez e brezhoneg hervez ar memes divizoù.

Darn a soñj ne c'hellou ket ar stad vreizhat kas da wir hevelep rak-tresoù anez krennañ a-walc'h frankizioù an hinienn. Tamall a reont dezhañ zoken bezañ taer ha mac'hon, enep-gwerinel en ur ger.

Elgeriañ a c'hellan e vo ur stad a stoum ar stad a savimp, ur stad dispac'hel; hon eus ur brezel da c'honit, hini buhez pe varv hor broadelezh hag hor yezh ha ne c'hellomp lezel c'hañs ebet d'an enebourion anezho. Poan a-walc'h hor bo da c'honit ar stad; diskianted e vefemp ma esantfemp da vezañ faszhet goude bezañ gonezet lodenn gentañ hon emgann.

Koment-se a zlaen lavarout. Bremañ e pedin al lenner da evezhiañ penaos ar reoliadurioù hag ar raktresadurioù a ginnigan a zo bet lakaet da dalvezout gant ar C'hallaoued en o stad o-unan.

A-hend-all e vo dieub pep menoz e Breizh gant ma vo displeget e brezhoneg.

Diwar-benn gwerinerezh e levarin e tle hemañ bezañ diazozet war dachenn ar gumun hag an embregadur arboellerezhel. Bez e tle ar wir warin-elouriezh reiñ da bep hini e lodenn giriegezh e melestradur an oferioù boutin ha peurgetket en arboellerezh. Ne c'hell ket an dra-se avat kaout da heulind lakaat war vordo bapred an talvoudoù m'eo fontet ar stad warno - anez kas ar stad d'an traon ha distrujañ anezhi diouzhtu.

Kement-se avat n'en deus mui ster ebet adal m'eo bet savet ar stad.

ABENNEZ

KUDENNOU AR YEZH GANT AR YAOUAERION

Nevez 'zo ez eus bet savet ur gelaouenn Tarzh hec'h anv. Evit meur a abeg e oa ret d'ar re yaouank kaout o c'helaouenn dezhe. N'on ket e soñj amañ heuliaf war gudennoù hor c'helaouenn. Hogen mar digoran va zamm pennañ gant ar c'hoarvoud-mañ ez eo pendeogwir e ranker ober fonn diwarnañ.

UR SORC'HENN - D'ar c'houlz-mañ e weler o rezal reoù 'zo e-touesk hor c'hileion. Ar sorc'henn gentañ a gaver gante eo heni an Unvaniezh e sigur an doareoù da skrivañ. Ret eo gouzout ar stek ! Hag amañ e vennan dazlavarout a-ouez d'an holl : kudenn an doare-skrivañ n'eus ket anezhi ! Hon araog-idi o deus bet tro da ziavaezañ o mennozioù er c'heñver-se. Dav eo deomp-ni ivez lavarout ar pezh a soñjomp. Ya, daou zoare da skrivañ a zo bremañ. Hogen diuz n'hon eus ket da ober diouzh ar yezh, diouzh Breizh ne lavaran ket.

Va lezit da lavarout em eus me Gwenedour desket pezh a oa evidon ar yezh lennek gant ar "fahuneg" e-giz e lavarer, d'ar c'houlz n'anavezen ket ar brezhoneg peurunvan. Mar em eus stlapet ar skritur-se d'ar blotoù ez eo peogwir on deuet a-benn, ha me yaouank, da veizañ ar sotonioù a

zo enañ e pep keñver. Hogen an abeg pennañ henhen an heni eo : ar skritur-se a zo bet lakaet deomp gant gouarnamant Bro-C'hall a-benn distrujañ hor yezh. Ra glevo neb en deus divskouarn !

Skrivañ a ran hag a rin en doare diazezet e 1941, o vezañ m'eo heni an Emsav, heni ar Vroadelourion. N'eo ket hepken pendeogwir ez on gwenedour : va c'heneiled a bep rannvro a soñj evel don. Ha war an dachenn-mañ - heni ar Vroadelezh - hepken e c'hell bout ur gudenn evit tud 'zo. En anv Breizh, ec'h aspedan ar re yaouank da selaou ouzhin : ma'z eus broadelourion anezhe e rankomp derec'hel da zoare-skrivañ ar vroadelourion. Da vrizh-vroadelourion pe da vevelion Bro-C'hall ne dalvez ken ar "fahuneg".

O vezañ m'on gwenedour ez eus un dra all a vennan menegiñ amañ. Ar skritur peurunvan a zo bet diazezet evit Bro-Ereg ivez. Derec'hel da ziv rannyezh skrivet ne c'hell ket Breizh. Gant keleennadurezh ar yezh e rank kaout un doare skrivañ nemetken. Hag amañ e tiogelan deoc'h eo bet tizhet pal an Unvaniezh gant ar "zh". Un anatadur a roan deoc'h : va mamm hag hi dic'houzvez war ar brezhoneg lennek a zo gouest da veizout lizheroù skrivet e brezhoneg peurunvan gant va c'heneiled, tra ma ne gompren ket ar "falhuneg K.L.T.". Ar perag ? Ar brezhoneg peurunvan a zo ken-koulz K.L.T. ha Gwenedeg, pe evit gwir nend eo nag an eil nag egile : an daou eo : ar Yezh !

AR WERIN - Abaoe rummadoù e tiouganer marv ar brezhoneg ha n'eo ket marv c'hoazh !

Hogen mui-ouzh-mui emañ ar yezh o vervel gant ar werin. Dre vras, e Breizh, an dud dindan 20 vloaz ne ouzont ket brezhoneg. Ha mar her gouzont, nend eo nemet un tref-cadach spontus diouzh heni o zud hag ouzhpenn-se levezonet mui-ouzh-mui gant ar galleg. Pa vo dimezet ar re-se e c'heller krediñ ne zeskont ket brezhoneg d'o bugale. Ha ganto e vo marvet ar yezh gant ar werin. Monel a raio ar brezhoneg lennek a vo desket dezhe, mar plij gant Doue.

Evidomp-ni daoust hag ez eo a-bouez-bras monet d'ar bobl ? A-bouez-bras, nann ! N'on ket evit rebechiñ da reoù 'zo mont d'ar bobl, a-benn deskiñ o yezh, dastum kanaouennoù, h.a. Hogen n'eus ket nemet an dra-se da ober. Bremañ pergen hon eus da ziawelout an Dazoned. Ha dazoned ar yezh ne vo ket gwraet gant an trefodachoù a-vremañ. Mar mennomp monet d'ar bobl, ra vezo evit dastum an eliennoù diwezhañ a van

gante. Amañ avat e kred ganin e ve pouezusoc'h al labour. Moarvat-sur, ez eus tud yaouank, ken war ar maez, ken er bourc'hioù, brezhonegerion pe get, a zo broadelourion hep gouzout dezhe pe broadelourion n'anavezont ket an Emsav. Deomp-ni da gavout anezhe. Ha zoken mar kavfemp bep a unan en o mesk ne vefe ket amzer gollet.

AN ILIZ - N'eus ket pell ez eus bet lennet war "Ar Vro" ur pennad gant Abanna : "An Iliz hag an Emsav". A-du-krenn ez on gant hor c'heneil. Sevel a ra d'am c'halon lavarout deoc'h un dra bennak a-zivout an Iliz.

Katolik on hag evidon-me ivez "Ar Feiz hag ar Yezh a zo breur ha c'hoar e Breizh". Setu perak e kredan ez eo un dlead din komz d'am c'hileion war ar c'hraf-mañ.

Diwar diwez ar brezel e weler ar veleion o tilez hor yezh en iliz. N'it ket da grediñ ez eo peogwir eo marv ar yezh pe e oar gwelloc'h an dud galleg eget brezhoneg. E dibenn ar brezel ac'hoel e oa bov-bevidik ar yezh. Hogen an abeg bras - hag evel katolik e vennan hel lavarout a-ouez d'an holl - a zo ar re a bolitikerezh gwraet gant beleion, eskibion 'zo. M'hel lavar deoc'h n'en deus ur beleg nemet prezeg a-enep d'ar gouarnamant gall e tra pe dra hag e vezo "diblasat". Arabat dezhe lavarout gwirioneziou a yafe a-enep da gelenn pe oberoù ar gouarnamant gall !

Evit hor yezh an hevelep kudenn eo ha doujañs e ranker da gaout - hag e rankfe zoken an nann-broadelourion - d'ar veleion a gred prezeg e brezhoneg en iliz.

Deomp-ni, broadelourion yaouank, un dlead eo e-keñver Breizh da vihanañ, - ha gwelloc'h e karantez ar C'hrist - skoazellañ ar veleion o devez kalon da ober gant ar brezhoneg.

N'eo ket d'ar Gristenion hepken e komzan, met d'an holl vroadelourion. Un taol bazh-eskob a c'hell monet gant ur beleg - skouerioù em eus - zoken mar nend eo ket emskiantek da labourat evit brasañ vad Breizh.

Ha "TARZH" ? - Donet a ran dezhi. Mennoz kentañ diazezerion ar gelaouenn-mañ a oa lakaat ar re yaouank da skrivañ e brezhoneg. Ar mennoz-mañ n'eo ket fall tamm ebet, a gredan.

A-benn dek vloaz hor bo kelaouennoù da leuniañ gant pennadoù brezhonek, ar re a zeuy d'hon heul da arhentiñ⁽¹⁾. Hag evit bout barrek da ober kement-se eo ret deomp der-aoiñ hiziv. Ret eo deomp deskiñ ar vicher skrivañ adalek bremañ a-barzh bout micherourion ampart a-benn dek vloaz. D'an holl re yaouank e c'houlennomp skrivañ pennadoù berr, danevelloù, pep heni hervez e zeskamant, e amzer, e vennoziou. "Tarzh" a zo digor dezhe.

D'ar re ampart war ar brezhoneg, d'ar re a ra war-dro kelaouennoù an Emsav, d'ar re o deus desket ar yezh war varlenn o mamm, d'ar re-se e c'houlennomp skoazell. Pazioù a vo en hor pennadoù, dreist-holl gant ar re a zo krog da skrivañ. Arabat kaout aon d'en lavarout deomp, da reizhañ anezhe. A-vremañ e lavaromp bennozh Doue dezhe. Hag e trug-arekaimp o skoazell o labourat war o lerc'h pa vo deuet ar c'houlz.

Hogen "Tarzh" ne zle ket bout ur gelaouenn deskarded peurgetket. Ar yezh a zo ivez ur benveg-stourm. Ha gant ar yezh e rankomp peuzeskiñ hor broadelouriezh, peuzeskiñ hol labour breizhek war gement tachenn.

Meur a zlead hon eus da seveniñ e-keñver Breizh. Ra vezimp gwirion, felan ha kalonek mar mennomp e teuy an trec'h ganeomp.

23 Eost 1963

× × ×

×

(1) arhentiñ (gwenedeg) : lakaat war an hent.
arhent : arouez a gaver war an hent.

KERVORC'H

KEVELEREZH PREDENEK

Ar menoz degemeret e dibenn Kendalc'h Etrekeltiek Kernev-Veur ha war intrudu an Doktor Paol Leorafs eus Gwened da sevel ur gevrenn a-ratozh gant kefridi da studiañ ar yezhoù keltiek keñver-ouzh-keñver en em ziskouez a-bouez bras dreist-holl e sigur amzer da zont hag endro ar sevenaduruzh vreizhek.

Labour gentañ ar strollad-mañ, a gav din, a zlefe bezañ sevel rolloù gerioù kembraek, dezho gwizioù a vez kavet ivez e brezhoneg ha peurgetket ar re o tennañ d'al lennegezh ha d'ar reizh.

Ar pennstur a zlefe hentañ diwar vremañ ar skrivagnerion vrezhonek en o dibab, ken groñs ha marteze dispac'hel a c'hell en em ziskouez, a vefe a c'hell bezañ implijet ar gerioù-se (dezho gwizioù hafvel ouzh re ar brezhoneg) evel her re-ni, ha zoken a-wezhioù kentoc'h eget ur gar govalist gant Meven Mordiern hag Abherve, re bonner pe re artifikel pe o tiouer a gened evel e tegouez.

Mar deo aes a-walc'h, en un doare, krouiñ gerioù, kalz diassoc'h eo rañ dezho un ene ne zeuont da berc'henn dezhañ alies nemet war-lerc'h un hir a vuhez ha meur a avatarioù.

Perak ne sellfamp ket ouzh ar gerioù kembraek ken leun a vez evel ouzh madoù dimp ?

Ouzhpenn an dellid da binvidikaat c'hoazh hor yezh o tegas dezhi ur

geriadur ac'hon, an doare-ober-mañ a zo dezhañ perzhioù all n'int ket bihan-oc'h : Lakaat aesoc'h ha war-hed diraez al lennerion vroizhat "etre", studi an testennoù kembraek ha digeriñ an hent da henlizhiri breizhek an amzer-dazont.

Se a zo a-bouez-bras. Aesaat en e vrasañ d'ar vrezhonegerion digor ar yezh kembraek, rak, m'en em astenn un deiz en Armorika ur sevenadurezh keltiek wirion, ne c'hell bezaf nemet emboudet war ar sevenadurezh kembraek.

Evel-just, pep tra hon doug da dennañ diouzh an andon-se ken tost ouzh hon hini hag, a-hend-all, n'eo ket bet roet deomp da zibab e doare abet, na muioc'h eget n'hon eus bet da zibab hor gouenn hag hor gwad.

Nu vez ket ganet ur sevenadurezh eus he fenn hac'h-unan; an degouez eo eus un hir a hent.

Neuze, darvoudoù kriz hon istor hag, e penn kentañ argadadennoù an Normaned, hag ar pezh a zo daoust da heul, o deus hon diberc'hennet eus danvez lennegel hon tadoù, o deus troc'het ac'hanomp eus hor gwirizioù. War an dachenn se ez omp ur bobl hep amzer-dremenet, a-drañv deomp ez eus ar goull pe ... emañ hon amzer-dremenet o chom en tu all eus ar mor

E-keit ha ma strewa an Normaned d'ar seizh avel ludu hor sevenadurezh en Arvorig ha ma skrabe ar c'hloer latinekaet parchoù diwezhañ danevelloù kozh Keltia, en tu all eus ar mor, en ur Vreizh all, an henterenn all eus hor boud a zalc'he da vevañ, da greskiñ ha da vleuniañ.

Bez' e c'hellomp sellout ouzh lennegezh vreizhek vour Kembre ar Grenn-Amzer evel melezeour felan ar pezh a zo bet pe a c'hellfe bezañ bet hol lennegezh vrezhonek-ni eus Arvorig.

Hor c'hañs ez eo. Degas a re deomp an douar-bev don a chomfemp heptañ difrouezh.

Gwened, 25 a viz Eost 1963

*

JIL EWAN

A K A D E M I E Z H V R E I Z H

K E V R A N N A R G E R I A D U R

Moarvat o deus dalc'het koun al lennerion eus ar pennad bet embannet ganin war niverenn 93 "AL LIAMM" diwar-benn an Akademiezh.

Bez' e c'hellomp bremañ diskleriañ ez eo savet AKADEMIEZH VREIZH.

E lec'h all e vo kavet doareoù dre-vras an Ensavadur nevez. Amañ e kinnigin hepken ur raktres-labour evit unan eus ar pouezusañ kevrennoù a vo en Akademiezh, Kevrann ar Geriadur.

Dirak fonn an termenioù nevez liesseurt hag en abeg d'an dizurzh a hañval mont war washaat evit pezh a sell ouzh geriadurezh ar brezhoneg arnevez, n'hall ket un Emsav sevenadurel ha broadel evel hon hini chom pelloc'h ken hep parraat ouzh ur stad ken fall.

Setu perak e pedan start an dañvouesherion, pe mar kerer, an dud a blijjo ganto dastum ar gerioù nevez strewiet dre ar c'helaouennoù bet embannet abaoe ar bloaz 1940, da gregiñ gant o labour raktal pe neuze d'hen peurober ma'z int krog gantañ endeo, ha da gas timat roll ar gerioù

dastumet d'an Akademiezh.

Ar c'hoveliourion, pe, mar kerer, ar grouerion-
c'herioù a c'hell ivez kinnig o labour d'an Ensavadur
nevez, adalek hiziv an deiz.

Pep kasadenn a zo da vezañ graet d'ar chomlec'h da
heul :

P. Calvez, Bréhec, Plouha (C. du N.)

Degemeret e vo hepken ar gerioù nevez, ken boutin,
ken divoutin. Allet eo pep govelour, - nemet hag anv a
vefe eus geriadurioù skiantel rik, - da ginnig gerioù 'zo
e stern lavarennoù displeget e korf al lizher a ranko mont
ataf da heul pep kasadenn.

An danvouesherion e vo a-walc'h dezho kinnig o gerioù
war-bouez menegiñ pajenn ha niverenn ar gelaouenn pe, diouzh
ma vo, ar skrid ma vint bet dastumet diwarnañ, gant degas
resisadurioù koulskoude ar muiañ ar gwellañ, pa vo ret.

o

RAKTRES REOLIADUR
E V I T
KEVRANN AR GERIADUR

AKADEMIEZH VREIZH, gwir hêrez da "vBREURIEZH VEUR
AR BREZHONEG", bet leviet gant Emil ERNOD ha VALLÉE, ha,
d'an diwezhañ gant Roparz HEMON, a zo he menn bale war
roudoù ar Vrezhoneg Veur, o deus, tost da hanter-kant
vloaz 'zo, poaniet da adsevel ar yezh vrezhonek gant ur
spered broadel digemmesk.

Gant asant Roparz HEMON, warlerc'hiad kret reizh-
erion ar Brezhoneg, emañ enta brouderion an Akademiezh
yacouank o vont da strivañ da gas da bennvat an erv manet
boulec'het abaoe bloavezhioù.

N'anzavo an Ensavadur nevez, war dachenn an Diorre-
idigezh Vrezhonek, menoziadeg ebet estreget an hini m'eo
bet sturiet ganti d'an 8 Gouere 1941, diazezerion reizh-
skrivadur broadel ar Brezhoneg Unvan.

PENNAD I - KEFRIDI FRAMATA

MELLAD I - Savet eo "AKADEMIEZH VREIZH" dindan baeron-
iezh ur strollad kelaouennoù⁽¹⁾. Displeget
eo ar reoliadurezh anezhi gant ar melladoù
da heul.

MELLAD 2 - AKADEMIEZH VREIZH a vo un Ensavadur o pledif
gant geriadurezh voutin hag uhel ar yezh
vrezhoneg arnevez.

Tri c'horf a vo ouzh hec'h ober :

- a) - ur poellgor
- b) - ur gwazva
- k) - korf an akademourion

(1) ar roll anezho da vezañ embannet diwezhatoc'h.

- MELLAD 3 - Gant ar poellgor e vo galloud-lezenniñ ha seveniñ, galloud-barn war labourioù kalvezel korf an akademourion, hag ivez galloud da velestrañ gerva ar Brezhoneg arnevez; Sevenet e vo koulskoude al labour-melestrañ gant ar gwazva.
Poellgor ha gwazva e vo savet evito ur reoliadurezh distag diouzh honmañ hag a zo graet, dreist pep tra, da dalvout da lezenn d'an Ensavadur dre vras.
- MELLAD 4 - Izili an Akademiezh a vo reoù an tri c'horf rakveneged.
- MELLAD 5 - Izili ar Poellgor a vo anezho ar C'hadoriad ha tud dibabet gantañ.
- MELLAD 6 - Izili ar Gwazva a vo dindan renerezh ar Gourmer, hemañ o vezañ dibabet hag anvet gant ar poellgor war ginnig ar C'hadoriad;
Gant ar Gourmer e vo dibabet Skrivour ar Gwazva, an Teñzorer ha pep gwazoniour all oc'h ober war-dro dihelloù ha teuliadoù an Akademiezh.
Ar Gourmer a ranko ivez kavout tanvouesherion skridoù o kenskrivañ gantañ.
- MELLAD 7 - Izili korf an akademourion a vo anezho aozourion ar gerioù nevez;
Pep ezel da gorf an akademourion a vo degemeret gant ar poellgor, war-lerc'h disentez diwar c'hourmiver groñs, hag anvet raktal goude dre ul lizher sinet gant ar C'hadoriad.
- MELLAD 8 - Pennsez an Akademiezh a vo ar Gwazva.
- MELLAD 9 - Dalc'het e vo gant ar Gwazva kement marilh ha savet kement dihell a vo ret.

PENNAD II - KEFRIDI GALVEZEL

- MELLAD 10 - Kement ger nevez, ha pa vefe kavet zoken un termen kenster gantañ endeo e brezhoneg, a vo douget war ur fichenn-embreger evit bezañ miret gant ar gwazva.

- MELLAD 11 - Seurt renablerezh a ranko tizhout neket hepken ar gerioù nevez a vo krouet en dazoned ha kinniget gant izili korf an akademourion, met ivez an holl nevezc'herioù a gavor e kement skrid a zo, da vihanañ abaoe 1940;
Diouzh c'hoant ar poellgor, aozadur-barn kalvezel, e c'hallfe neuze an hevelep nevezc'herioù kevezata ouzh ar re a vefe kinniget d'an ampoent gant izili korf an akademourion.
- MELLAD 12 - Arabat e vo kinnig ouzhpenn ugent ger dre gasadenn, nemet ha keal a vefe eus geriadurioù spisplederiet war un dachenn bennak boutin pe uhel.
- MELLAD 13 - Ne vo anzavet evel geriadur nemet ur rollad-goveliadurioù o vriata ar c'hlokañ ar gwellañ un dachenn bennak pe zoken ur rann eus hevelep tachenn.
- MELLAD 14 - Pep kasavenn-c'herioù a vo graet diwarbouez ul lizher lec'hiet, deiziadet hag o tougen fraezh anv, kentav, oad, micher ha chomlec'h e yezh ar Post an aozour, hag ivez ar meneg "akademour", pa vo eus ar c'haser unan bet anvet e gwirionez;
Ar rollad-gerioù kinniget a ranko bezañ skrivet-fraezh hag hervez urzh al lizherenneg;
Da Skrivour ar Gwazva e vo kaset al lizher-kinnig-gerioù;
Ne vo respontet d'ar ginnigerion-c'herioù nemet evit degemer o lizher kentañ pe un eil lizher hepken kaset ganto, dindan ur miz war-lerc'h an hini kentañ e-sell da gemmañ ur ger bennak, pe da astenn ar rollad pe c'hoazh da reizhañ tra pe dra.
- MELLAD 15 - An nevezc'herluniadurioù, henn eo : ijinadurioù o tizhout ar yezhadurezh vrezhonek en abeg d'o stumm nevez hag estren marteze e-keñver gerluniadurezh, n'hallint bezañ kinniget nemet e stern lavarennoù pe frazennoù, tonket ma vint da gaout ul levezon hollidik war ar frazennerezh.

- MELLAD 16 - Barnet e vo gant an Akademiezh, a-raok pep ger-all, ar goveliadurioù o tennañ d'an Desk-adurezh.
- MELLAD 17 - Embannet e vo ar gerioù grataet ha dic'hrataet gant an Akademiezh war unan pe lies hini eus ar c'helaouennoù-paeroniañ.
Kement ger bet kinniget a ranko bezañ barnet dindan pemp bloaz d'ar muiañ adalek deziad o donedigezh dirak an Akademiezh.
- MELLAD 18 - Bez' e c'hello koulskoude an Akademiezh embann war armod, kentizh ha kinniget dezhi, lod gerioù nevez na viat barnet nemet e dibenn un dale pemp bloaz, rak an implij gwirion hepken, e-pad ur pennad a c'hell merkañ ha mat e vez ur ger pe get;
Gwirionder an implij, avat, a vo prizet hervez niver ar skrivagnerion o devo degemeret en o skridoù, e-doug an hevelep dale pemp bloaz, ar goveliadurioù meneget gant an dilinennad di-araok;
Forzh penaos e vo grataet ar seurt gerioù e dibenn an dale pemp bloaz, mar bezont kavet gwelloc'h gant an Akademiezh eget reoù-all, ha pa ne c'hallfed ket prizout na diazezañ gwirionder an implij anezho, dre ziouer a skridoù diwar bluenn skrivagnerion pe destennourion liesseurt ouzh o lakaat da dalvezout.
- MELLAD 19 - Pedet eo kement skrivagner, yezhoniour pe vrezhonegour bet savet gantañ gerioù nevez, da renabliñ e c'hoveliadurioù hervez urzh al lizherenneg evit o c'hinnig an abretañ ar gwellañ d'an Akademiezh, war-bouez mirout an divizoù merket gant ar Recliadur-mañ;
Sklaer eo na labouro Akademiezh Vreizh ar Brezhoneg gant berzh nemet seul vui na tiskouezo ar skrivagnerion da gentañ youl vat a-walc'h d'he skoazellañ gant kenurzh ha brogar-antez.
- MELLAD 20 - Ar Recliadur-mañ e vo sinet ur skouerenn anezhañ gant ar C'hadoriad evit bezañ miret gant ar Gourmer.

o

L I Z H E R O U - S K O U E R P E N N A D U R E L

Nⁿⁿ 1

(Lec'h ha deziad)

Lizher-kinnig-gerioù

Kentanvioù :
ANV :
Oad :
Micher ... :
Chomlec'h .. :
(e yezh ar Post)

Da Ao. Gourmer-Skrivour AKADEMIEZH VREIZH

Aotrou Gourmer-Skrivour,

Kas a ran deoc'h da vezañ paeroniet gant an Akademiezh ar gerioù da heul, renket hervez urzh al lizherenneg :

1° -
2° -
3° -

(pe neuze)

..... lizherenn A va geriadur-atomouriezh

(pe c'hoazh pa vo keal eus gerioù bet dastumet diwar skridoù ha chomet dianavez, divoaz ha dreistholl dizimplij)

..... ar gerioù da heul, renket hervez urzh al lizherenneg :

1° -..... "Arvor" Nⁿⁿ X, 1942, p.2 bann 3.
2° -..... "Al Liamm" Nⁿⁿ X, p. X.
3° -..... "Ar Bed Keltiek" Nⁿⁿ X, Here 1958.

X

JORD PENNAOD

STAGADENN GANT AN EMBANNER

Stensilet e oa pennad JIL EWAN pa voe embannet savidigezh AKADEMIEZH VREIZH. Gourc'hemennaouomp JIL EWAN pa welomp o tont da benn-vat ar mennad ma sternias a-hirstriv outañ. Kinnig a reomp enta ez-laouen pennad hor c'henlabourer da Izili da zont AKADEMIEZH VREIZH evel diazez d'o labour.

Amañ dindan e kaver temadoù eus Pennaennoù Akademiezh Vreizh :

"Mellad kentañ".- Savet ez eus dindan an anv AKADEMIEZH VREIZH ur Gevredigezh o vodañ lennegourion Vreizh ha dre vras neb a gemer preder oberiant gant ar sevenadur keltiek.

- "Mellad 2.- Pal an Akademiezh a zo :
- a) startaat an darempredoù etre lennegourion Vreizh;
 - b) harpañ an obererezh diorren ar yezh;
 - k) lakaat anavezout al lennegezh vrezhonek.

- "Mellad 3.- An Akademiezh a c'hoarvez en Izili hag Izili a Enor.
- a) an Izili a gemer perzh en oberiadegezh an Akademiezh;
 - b) an Izili a enor a zo kret o personelezh evit bri an Akademiezh.
- Ar Genskriverion, hep bezañ Izili, a genlabour en-dizalc'h gant Ensavadurioù an Akademiezh.

"Mellad 4.- En ur Poellgor e vez fiziet ar gefridi da ren dre an hentoù gwellañ an Akademiezh war-du ar palioù he deus kemeret.

.....

"Mellad 6.- Da Ezel a Enor e c'hell bezañ degemeret kement den a ro sked dre e vuhez pe e oberennoù d'ar sevenadur breizhek ha keltiek."

.....

Sekretour ar Poellgor kentañ, da c'hortoz ar Vodadeg-Vloaz kentañ, a zo : M.P. CALVEZ, Bréhec, PLOUHA (C. du N.)

GERIOU KOZH EVIT EZHOMMOU NEVEZ

Dilezet eo bet hor yezh evel yezh a sevenadur a-pad tri c'hantved da nebeutañ : gant dibenn al lennegezh krennvrezhonek diazezet war ur werzaouriezh strizh ez eas da get preder ur yezh unvan gouest da zisplegañ mennozioù mab-den direk an natur o trañf. Skornet e voe al lavar ha strizhet d'an ezhommoù elfennel a zo re an dud a labour kalet a-hed an devezh war ar maez. Betek dessorc'hidigezh hor c'hantved, hag hi o vont war-raok a-unvan gant dessorc'hidigezh ur spered broadalour, ne gaver el "lennegezh" vrezhonek nemet sorc'hennoù pobl, "barzhonegoù" o tiskouez muic'h a youl vat eget a awen, levrioù devot, pezhioù-c'hoari didalvoud paurliasañ troet pe ezotet diwar ar galleg. A-du e vefen a-walc'h gant hor c'heneil A. Raude a lavare din ur wazh ez echuas marevezh ar c'hrennvrezhoneg bagol gant reizid ar vro e 1532 : re strizh eo e varn, marteze, met dre vras e heller bezañ a-du gantañ.

Ne voen ket souzhet enta pa lavarns din L. Fleuriot pegen lennek, kalvezel, uhel e hañvala dezhañ bout bet ar yezh hanvrezhonek : yezh ur genel aloubar, kadarn, didruet evit hac'h enebourion, a rae "rustici", lese "plouked" e latin an amzer-hont, eus ar geizh a arvere tro-dro dezhi ur parlant romanek. A-benn nemeur a vo gallus deomp tañva gwelloc'h ar yezhe, pa vo bet embannet levr hirc'hortozet Fleuriot, Dictionnaire des Gloses en vieux-breton. Betek amañ e rankomp ober gant levr koshaet Loth, Vocabu-

laire vieux-breton (Paris, 1884), ul levr touellus e anv hemañ peogwir e talv "breton" kement ha brezhoneg + kerneveg + kembraeg.

An neb a skriv pennadoù uhel a-walc'h hiziv a chom nec'het-bras a-wezhioù dirak gerioù pe eskerioù kalvezel na oar ket penaos o displegañ e brezhoneg. Daou hent a chom dirazañ : pe adaozañ dindan ur stumm brezh-onekaat ur ger "etrebroadel", da lavarout eo gallek, peurliesañ; pe amprestañ hag adaozañ ur ger "keltiek", lese ur ger kembraek peurliesañ, pe c'hoazh ur ger kernevek. Disofijet eo re alies ez eus e tafzor ar c'hrenn-vrezhoneg ur ger hag a glotfe dreist gant ar pezh a venner displegañ. Mar deo ret deomp ober gant ur ger dianav d'an dud dizesk a gomz c'hoazh an trefoedachoù brezhonek, furoc'h eo adkemer unan a harvoe er yezh-mañ gwech-all hag a voe ankounac'haat, dre leziregezh pe evit marmouzañ an dudjentil a gomze gallek. E-barzh geriadur Vallée, da skouer, a kaver meur a hini anezhe a venege evel "ancien" (kozh). Ur vammenn espar e vo Geriadur Istorol R. Hemon pa vo echu, dre ma kaver ennañ an holl c'herioù krenn-vrezhonek : o tont en-dro davet andonioù hor yezh e c'hellimp sevel evidomp hag evit hor bugale ar banveg nevez hon eus ezhom anezhañ. Muic'h c'hoazh. Evel m'e ziskouez an Ao. Kel. Leo Weisgerber en e levr Sprachenrest und europä-ische Einheit, Köln, 1959, mar deo gwir en em stummas yezh ur genel bennak hervez amdio ar genel-mañ, ez eo ken gwir all lavarout ez eus ur gwored don eus ar yezh war an etnotipenn. N'eo ket ar wezh kentañ e kaver hevelep mennozioù gant an Ao. Kel. Weisgerber, un den hemañ anavezet mat e Breizh ma chomas pevar bloaz evit brasañ mad ar brezhoneg hag an embannadurioù brezhonek, mat ivez unan eus gwellañ yezhencourion hon amzer. Da skouer, e kaver en e levr Die Sprache unter den Kräften des menschlichen Daseins, Düsseldorf, 1949, p. 13, dieze e zankeniezh : "Evel domani bredoniell etrelekaat eo ar yezh diforc'h splann diouzh leuriad ar "steregezh rakvoudel"; er ster-se dreist-holl n'eus ket anezhi un distaol eeun eus bed ar rakvoudel, met kentoc'h ez ankoñ degouezhadenn un adstummadur speredel eus ar bed". Ur meizad heñvel a gaver c'hoazh en oberoù an amerindianegour Benjamin Whorf, en e Collected Papers on Metalinguistics, Washington, 1952, p. 21 : "We cut up and organize the spread and flow of events as we do largely because through our mother tongue, we are parties to an agreement to do so, not because nature itself is segmented in exactly that way for all to see. Languages differ not only in how they build their sentences but in how they break down nature to secure the elements to put in those sentences".

An Ao. Hemon, siwazh, ne voe ket evit lakaat e-barzh e c'hGeriadur Istorol ar pezh a ouzomp eus an henvrezhoneg ha re galvezel e vo marteze levr an Ao. Fleuriot evit ma talvezo d'ar "Yezhkadourion". Pa vo bet embannet e vo ret, d'am men, tennañ dioutañ ar pezh a hell bezañ talvoudus evidomp, lese, lakaat dindan ar stumm o dije gwisket er yezh a vremañ ar gerioù aet da get. Amañ da heul e fellfe din reiñ ur skouerioù bennak eus

er pezh a hellfe bezañ graet.

Ret eo din, avat, lavarout d'al lennerion n'eo ar skrid-mañ nemet un esao ha neket un oberenn dififiv : koshaat eo levr Loth evel am eus lavaret hag e meur a bajenn en e levr e tiskouezo an Ao. Fleuriot lennadennoù nevez gwelloc'h eget re Loth. Prederiet en deus kalz ivez war orin ar gerioù ha spisast o ster. Ul labour engorto eo neuze ar pezh a gavfer amañ na vo ket diases e glokaat hag e reizhañ pa vo bet embannet Geriadur Fleuriot.

*

baran b. -ioù "linenn-argad" : hBr. baranee sp. linea; eus *baran "konnar", s. Kb. baran "konnar"; kKt. *riketa, s. Hor Yezh, 39, 16.

bezaez b. "konnar, follentez" : hBr. bicoled sp. uacordia; s. Kb. byavlu "gourdrouz".

bidiat "skejañ, diskoultrañ" : hBr. bitat sp. resicarüt; Gr. bidiaz "gavr", Kb. bidie "diskoultrañ".

bezin b. -où "strollad, lu" : hBr. bodin sp. manus; Kb. byddin, hW. buiden eus kKt. *bodin. Graet eo bet bezen (gourel) eus ar ger-se e br. dindan levezon Kb. byddin moarvat pe c'hoazh bezenn : ken fall put an sil hag e-gile e keñver soniadouriezh hor yezh pe e ve ret deomp lavarout *kegen pe *koqenn e-lec'h kegin (eus La. coquina)! S. Pedersen, VKG. I, 363.

bun b. "plac'h" : hBr. bun sp. uiraginis; Kb. bun "plac'h".

kehuzik "droukprezager" : hBr. cohudic "maledicus"; Kb. cyhudded "tamall".

kesouenañ "anavezout" : hBr. cosoin sp. consignatum; Kb. cyswyno "anavezout" eus ila. *consignō eus La. consignō.

kevazhe "kenvreur, kenozal" : hBr. comairde sp. collegam; Kb. cyfarddu "arat a-unvan gant".

kevzas "dereat, reizh" : hBr. comadae sp. habilis; Kb. cyfaddas.

kevfeillach b. -où "kennfeillach" : hBr. comalia(chou) sp. soldalitates; Kb. cyfeillach.

kevouennou agw. "a unouenn" : hBr. coquennou sp. indigana; un anv-gwan eo amañ ha neket ul liester, s. an anvioù hBr. en -pa.

kez b. "kasoni" : hBr. quod-ces sp. hodie habentes; eus *kad-ti, s. kas, kasaat.

klod b. "gloar" : hBr. clot sp. rumoris; anavezet eo ar ger-mañ bremañ abaoe Kalloc'h en doa e gemeret diwar an hBr.

kludaf "berniañ, despugn" : hBr. clutam sp. struo; Kb. cludo; krBr. cludenn.
kludvez b.? "tolp" : hBr. clutaqved sp. strues.
koelieg g. "diouganour dre ar bouzelloù" : hBr. coel(ioc) sp. aruspice.
kolled b. "tailhoù" : hBr. collet sp. tributario; Kb. gyllid "droukinnig"
 eus La. collita.
komen b.? "blonzdanevell" : hBr. comin sp. annales; kKt. *kom-men; hW. cuimnech sp. memor, s. Br. koun.
korvo "gonid, splet" : hBr. corvo sp. emulanti = emolumenti; proeectibus;
 krBr. coruo; s. BrE. korvo eo.
darouiz "divinour"; hBr. darouid sp. pithonicus; Kb. derwvdd "drouiz".
daeldi "breujoù, parlament" : hBr. dadlt(iq) sp. curia.
darqen g. -idi "divinour" : hBr. darqenneti sp. ariolis.
darleveriad g. -idi "diouganour" : hBr. darleber(iat) sp. phitonicus = pythonicus.
demzamouestlañ "en em liammañ dre ul ledoued" : hBr. diindamquas(tlot)
 sp. es iuramento contrixerit.
deoudif "fouzhañ" : hBr. dequat sp. connubierit; Kb. godineb "avoultriezh";
 hW. goithim sp. futuo.
derik "kafvaoués, kanned an ankoù" : hBr. deric sp. ditor mortis; Kb. dera
 "diaoulez".
dervantour g. -ion "rakweler" : hBr. doromantorian sp. auspicibus i. con-
 siderantibus.
 (Ar ger-mañ a glotfe mat hiziv gant meiziad ar galleg "prospective").
derveur "mell, pikol" : hBr. dermorion sp. enormis; Kb. dirfawr (evit
 *dyrfawr) "pikol".
doved "lid, boaz" : hBr. domot sp. ritum; Kb. defed "henvoaz, gwir-dreist".
dezioulleñ "c'hoantaat kreffiv" : hBr. didioulam sp. glisco.
dourvonnañ "goulenn, aspediñ" : hBr. dourbonniu sp. rogaverit.
droue "strollad, lu" : hBr. droan (= *droan) sp. c(o)etus; hW. drong
 "strollad".
dulas "glas-mor" : hBr. dualas sp. coruleus.
qwerzh g. -ioù "priz, talvoudegezh" : hBr. quix(th) sp. sedatium (pretium
 sepulchri); Kb. qwerth.
mac'h g. mac'h "surentez" : hBr. maic sp. ratas; s. hBr. machtiern.

merc'hesaat "dont a amout" : hBr. merqidaam sp. habesco; hW. mer "foll,
 amoat".
milin b. "gast" : hBr. milin sp. prostitutam.
mouez "enor, uhelder, meurded" : hBr. a mued sp. fastu; hW. miad.
nevid g. -ioù "foar" : hBr. nouitiou sp. nundinae; Kb. newid "kemmañ,
 eskemmañ".
perenneg g. "kroazhent" : hBr. petredec.
requez g. -où "mezvadeg" : hBr. in i rogedou sp. orgiis; Kb. rhewvdd.
rifv g. -où "niver" : hBr. rim sp. summa; Kb. rhif.
rot "merglet" : hBr. rod sp. (a)eruginem; Kb. rhwd, rhvdivd "merglet".
talia "pasañ" : hBr. tal sp. soluit; Kb. talv.
tirann "pastell-vro" : hBr. tegran sp. territorio.
trauz "mac'homerezh" : hBr. tros sp. tirannide; Kb. traws "mac'homerezh,
 renerezh".
tramm "ponnez" : hBr. trum sp. abrupta; inopportuna; Kb. trwm.

*

N'am eus ket klasket amañ treiñ e nevezvrezhoneg an holl c'herioù
 henvezhonek. Lod anezhe a chomo dizimplij, met fellout a reas din diskouez
 diunvander ar c'heriaoueg kozh. Ul labour a vo da ober un dez hag a vo
 talvoudusoc'h c'hoazh eget adkevout ar gerioù : reiñ da anaout d'an dud
 kevrendurezh kozh ar yezh a oa kalz gwevnoñh eget hini ar yezh a vremañ.

Tuet eur hiziv e-touez ar yezhkadourion da zeskiñ ar c'hembraeg hag
 an iwezhoneg. Mat eo ha ne fellfe ket din mont a-enep d'ar sc'fj-se. Met
 tostoc'h ouzhip eo hor yezh kreñn hag hor yezh kozh ha mechal ha ne vo
 ket spletus kregif ganti da gentañ. Dreist-holl a ranker kemenn d'ar re a
 zesk ar c'haltiegoù tremor arnevez ez eo bet ken breinet gant ar saozneg
 ar yezhoù-se hag hor brezhoneg gant ar galleg. Mar fall deomp lakaat da
 dalvezout amañ ar pezh a hellomp kavout enne e vo fur atav sellout ouzh ar
 stummoù kreñn ha kozh. Met arack pep tra e vo mat studiañ Gerindur Istorel
 R. Hemon.....

 x

GWELTAZ BODMAEN

P E R A K D I B A B A R B R E Z H O N E G
E V E L Y E Z H - S T A D ?



"Ha koulskoude ar vrezhonegerion o deus da zeskiñ an dra-mañ a denn da vras evit dazont ar Yezh : hejañ kuit levezon drastus ar galleg war o speredoù, divoaziañ o daoulagad diouzh doare-skrivañ ar galleg, en em zistagañ a-grenn diouzh ar stumm laketañ gant ar galleg d'an anvioù arallvro ha da anvioù meur an Istor. A-benn hen ober, ret eo dezho kemmañ tro-spered degemerus ha stouadennacuek an drec'hidi a zo ganto ouzh an dro-spered difrom, grañs ha diblegus a zo bet a-holl-viskoazh hini an drec'hourion hag an alouberion. N'eo ket d'ar vrezhonegerion ha d'o Yezh plegañ rak an Diavaez ha louc'hañ gantañ. D'an Diavaez eo da bukañ ganto war an holl linennad-emgann."

MEVEN MORDIERN, C'hwevrer 1938,
Gant Luoez an Doueed, Gwalarn 115-6


Muioc'h-mui emañ ar brezhoneg o kilañ er werin, hag ul lodenn vras eus an dud a stourm evit Breizh a ra o labour e galleg. Ne fell ket din barn an abegoù a zo da ober gant ar galleg evit traoù 'zo er mare-mañ, met ober div evezhiadenn a-du gant ar brezhoneg evel yezh-Stad pa vo adsavet ur gouarnamant evit Breizh. War zigarez studiañ krefen zo eus ar geriadur skiantel e lavarin eo trec'h ar brezhoneg d'ar galleg evel benveg-meizañ. Ouzhpenn e kredan eo ar brezhoneg ar yezh nemeti a c'hell aotren da Vreizhiz en em frammañ hag en em zisplegañ evel broad diforc'h.

Ur skouer hon lakaio da gompren talvoudegezh ar brezhoneg evel yezh skiantel, ha braster an distruj degaset en ur spered breizhat dre implij ur benveg yezhel ken diazas hag ar galleg.




Ar c'heal fizikel aroueziet dre an atalad a ventoù M a vez termenet e galleg dre ar ger masse hag e brezhoneg dre ar ger tolz. An daou c'her gallek ha brezhonek a dro kenkoulz an eil hag egile ar c'heal fizikel M. Abeg zo da bouezañ n'eo ket hepken war gensteriegezh skiantel klok an daou c'her, met ivez war o gwirionded, ha da varn res-isted ar ger gallek kenkoulz hag an hini brezhonek. Ez-anat eo diforc'h bras a-hend-all endalc'had trivialdel ha sevenadurel an daou c'her, pezh zo reizh, hevelep endalc'had o tleout gant gwir abeg bezañ lezet a-gostez er yezh skiantel. Emaomp en degouezh-se amañ. Met mar trem-enomp bremañ d'an eilgealioù deveret diwar ar c'heal a dolz M, ec'h anataomp e heuilh ar poellata brezhonek hag an hini gallek hentadurioù disheñvel ha marteze enebek pa seller a-dost : ar galleg a dremen eus displegadur ar c'heal M gant ar ger masse da zisplegadur ar c'healioù ML^{-1} , ML^{-2} , ha ML^{-3} en ur stagañ hepken ouzh an anv-kadarn masse an anvioù-gwan-doareañ linéique, surfacique pe vol-umique. En degouezh ma arouezia an ataladoù-se ur c'heñver etre an tolz hag un egor un- pe liesventek e ra ar galleg da grediñ n'eo ket kealioù nevez e-gwirionez ar c'healioù deveret diwar ar c'heal a dolz, met an hevelep keal doareet diforc'h. Dizereat a-walc'h eo an doare-ober-se. Ar c'heñver etre un tolz hag un ec'honenn da skouer a zo en un doare anat ur c'heal nevez diforc'h mat diouzh ar c'heal a dolz. Displegañ ur c'heal hag ar c'heal a zo anezhañ ar c'heñver etre ar c'heal-se hag ur c'heal all dre an hevelep ger na c'hell degas nemet rouestladur, evel ma welomp dre ar skeudennoù 1 ha 2.



Sk.1.- Skouer ur reizhiad meizframmoù mentawouriezhel.



Sk.2.- Meizframm deveret an tolzder ec'honel hervez ar galleg. Merzhet ez eo forc'hellek an dec'heriad "masse" ha dre-se ne c'hell ket mont ar meizframm deveret d'e stumm-disoc'h.




Sk.3.- Meizframm deveret an tolzder ec'honel hervez ar brezhoneg. Merzhet n'eus a forc'hellegezh e nep prantad eus an deveridigezh; mont a ra ar meizframm deveret d'e stumm disoc'h, eleze d'ur stumm heñvel ouzh stumm e elfennoù.

Notenn.- Ur meizframm a zo ul lun oc'h aroueziañ ur meizad, an doareoù framadurel anezhañ oc'h aroueziañ doareoù 'zo eus ar meizad. Da skouer, er ventawouriezh, e reer gant ul lun o c'hoarvezout eus daou gelc'h a-spin lakaet an eil a-uc'h d'egile (Sk.4). Ar c'helc'h bras a zo ennañ anv ar ventenn pe ar ventad, ar c'helc'h bihan a zalc'h an atalad mentawouriezhel keñverek. Divizet eo bet reiñ ar galloud 1 d'ar c'hementad dalc'het er c'helc'h bihan pa vez a-uc'h d'an hini bras, hag ar galloud -1 d'ar c'hementad-se pa vez ar c'helc'h bihan a-is d'an hini bras. Dre-se, e c'heller luniañ dre zaou zoare kevatal an hevelep mentenn (Sk.5); ar meizframmoù 1 ha 2 a lugh an hevelep mentenn a.



(Gant aotre Kreizenn Imbourc'h Sturvezhouriezh S.A.D.E.D.)



Gant ar reizhiad vrezhonek e vez gwarantet diwanidigezh ur stumm nevez bewezh ma tiwan ur c'heal nevez (sk.3). Ouzhpenn-se e vez merket bewezh ar c'heñver a zo etre an daou geal-elfenn. Un termen k displeget a-der b-el a ezgerio ur c'heal $K = \frac{1}{4}$. Ar reizhiad c'hallek er c'hontrol a zoug testeni eus ur Bizframmidigezh distabiloc'h (sk.2). Un troc'h re vras a zo bet etre al latin hag ar galleg strivoc'h Descartes hag ar galleg a-vremañ. Lavarout eo ar galleg ur yezh sklaer anezhi hec'h-unan n'eo lavarout netra. Ar galleg, evel forzh pe yezh, na c'hell bezañ barnet nemet e krog gant ar gwirvoud. Marteze eo sklaer ar galleg, hogen ne sklaera ket. N'omp ket avañsetoc'h.

Ar brezhoneg avat a zisplego ar c'healioc'h ML⁻¹, ML⁻² ha ML⁻³ o stummañ ar ger tolzder hag o c'hervel war un dro, evel ar galleg, anvioù-gwan-doareañ evit fetisaat niverenn-emlies an egor, eleze regel, korrecl hag ec'honel. Gervel un anv-kadarn nevez deveret dre c'hourfengeriañ da zisplegañ ur c'heal nevez a zo unan eus hentenoù diazev ar geriaoua brezhonek.

Lavaromp ouzhpenn e ro tu ar gerioù tolzder egorel da zisplegañ ar c'heñver ML^{-x} etre an tolz hag an egor gant ur ger eeun, tolzder, deveret diwar tolz, en ur lezel gant arouez an egor un niverenn-emlies nann-terminet, displeget gant an anv-gwan egorel. An doare-ober heverk-se, implijet ken eeun e geriadur skiantel reizhiakaet Strollad an Deskadurezh Eil Dere (SADED), n'eus bet biskoazh klasket ober gantañ e galleg, zoken gant an Association Française de Normalisation AFNOR. An dekred a 28 C'hwevrer 1948, o reiñ termenadurioù an unanenoù pennañ hag eil miret er reizhiad MKSA ha meneget en norm AFNOR X 02-002, ne seblant ket bezañ meizet e vije tu da ober kement-all gant ar galleg a-vremañ.

Tud zo a lavaro : Met a-benn ar fin n'eus nemet ur c'hemm bihan etre ar stumm tolzder ec'honel hag ar stumm masse volumique, ha ken aes eo en em zibab gant an eil hag egile. Setu dres ar fazi : kredañ ez eo ar c'hemmoù bihan a nebeut a bouez er skiantoù. A-ratozh eo bet dibabet an tri geal M, L³ ha ML⁻³ a zo ken aes da veizañ dre ar gerioù brezhonek tolz, ec'honel ha tolzder ec'honel.

Pa'z eus da ober avañ kealioù 'zo eus ar fizik ar-

nevez, ha n'eo ken ken anat an darempredoù etrezo hag ar c'healioc'h deveret diouto, en em gav buan ar galleg en ur strouezheg argollus. Soñjit da skouer er ventenn geñverek d'an atalad mentawouriezhel U^{-1IT}; e galleg hec'h anver capacité électrostatique, e saozneg, capacitance, pezh zo skeudennus; ar skeudennusted avat ne deo ket a-walc'h er ouiziegezh, rak pa vez ezhomm eus ur ventenn nevez keñverek d'an atalad U^{-1ITL}-1, e koezh-omp e galleg gant ur strewad a c'heriennoù luzietoc'h an eil eget eben : pouvoir inductif spécifique, capacité inductive spécifique, constante diélectrique absolue, pe c'hoazh gant an termennoù permittivité hag inductivité, pep hini eus ar geriennoù-mañ oc'h ober dave er brasañ dizurzh dre o sterioù geriel da ventennoù all, e gaou peurliesañ. Ar brezhoneg a dremen gant an daou dermen FORZHOGI, e-keñver an atalad U^{-1IT}, ha FORZHOKTED, e-keñver an atalad U^{-1ITL}-1, termennoù a zo dezho an emsav da vezañ berr, diforc'hellek, kenglotus hag ouzhpenn-se da glotañ gant purrest ar mentennoù tredanel; da skouer ar mentennoù keñverek d'an ataladoù UI^{-1T}-1 ha UI^{-1T}-1L a zo HARZOZI ha HARZOKTED; heñvelara evit ar warall-egozh e kavomp HEUZOGI (UI^{-1T}) ha HEUZOKTED (UI^{-1L}-1T) diouzh un tu, SOUZOZI (U^{-1IT}-1) ha SOUZOKTED (U^{-1ITL}-1) diouzh an tu all. Bremañ, neb a gar ar folklor, ra gutuilho ar vostañ a c'herioù galleg o neradiñ en-dro d'an eizh mentenn emaoamp o paouez menegiñ. N'eo ket souezh e kollfe neuze ar skolidi kement a amzer o redek war-lerc'h kealioù ken kuzhet a-dreñv d'ur geriadur luziet, hag e chomfe warlerc'hiet an deskadurezh skiantel.

Koulskoude, an abeg pennañ hon eus da zibab ar brezhoneg evel yezh Breizh evit an amzer da zont n'eo ket dreist-holl peogwir eo trec'h d'ar galleg evel benveg-meizañ. Zoken ma vefe falloc'h ne vefe tu da zibab nemet ar brezhoneg.

Al laoskeion a hunvreo : pobloù zo a gemm yezh ha sevenadur, ha dont a reont a-benn da seveniñ un adframm kedvuhezal, meizel ha zoken sevenadurel. Ar pobloù a zo evel an dud, gant o fersonelezhioù hag o istor. Pep den a zo sterniet, pe frammet e bersonelezh en-dro d'e demz-korf, d'e berzhioù natur, d'e herezh, d'e istor, d'e zarvoudoù, d'e c'halvidigezh, d'e drec'hadennoù ha d'e c'hwitadennoù. Pep ger evitañ a zasson en un doare disheñvel

diouzh ma tesson evit tud all, bevet ma'z int bet gantañ en un doare dibar. An den-se a c'hell kemmañ kalz, ober arnodennoù diforc'h, dizoleiñ broioù nevez ha deskiñ yezhoù estren. Ne c'hell ket avat dianzav e amzer dremenet nag e bersonelezh. Ne c'hell ket ankounac'haat a-grenn zoken e dorfedoù. Ne c'hell nemet sammañ anezho, ha maz int anavezet gantañ evel tonfedoù, ne c'hell nemet hetifiñ ma vefont pardonet dezhañ gant unan all, pe e goskor e vije, pe ar gevredigezh, pe Doue. Skouerioù zo eus tud a zo deuet a-benn d'en em deuziñ en ur sevenadur nevez, evel an Tad Lebbe e Bro-Sina. Lavaromp diouzhtu e oa deuet an Tad Lebbe a-benn da c'houzout ar sinaeg kerkoulz, hag alies gwelloc'h eget kalz sinaiz desket, hogen, daoust d'e garantez vras evit ar sevenadur sinaek, morse n'en deus an Tad Lebbe dianzavet pe nac'het e vefe bet un Izelvroad. Ar c'hontrol, en e garantez evit e vro en doa kavet moarvat e oa reizh ivez o defe beleion Sina an hevelep karantez evit o bro int, ha diskouezet en doa dezho hent ar garantez-vro.

N'eus netra euzhusoc'h eget un drevezer pe un treitour, disprizet maz eo kenkoulz gant an eil tu hag egile. Ne c'hell eta un den ober berzh nemet o sammañ a-hed e vuhez e bersonelezh a-bezh. Ha ma kemm e vennozioù, ma wel zoken en deus faziet bras e-pad ur prantad hir, e tle koulskoude pe sellad a-ziabarzh, pep distro warnañ e-unan, adrenkañ bepred pep darvoudenn eus e hanez gant fealded.

Hevelep tra evit ar bobloù. Ne c'hellont kenderc'hel ha bleuniañ nemet o terc'hel d'o framm hengounel a zo anavezet en o yezh, en o sevenadur, en o fealded d'o zud meur ha d'o darvoudoù broadel. N'eo ket a-ziavaez, met a-ziabarzh eo framet ar bobloù, evel an dud, ha ma tistrujer ar stern a-ziabarzh ez a ar bobl da get, evel ma'z a an den da ziskiant.

Kement a ouzomp diwar emdroidigezh ar c'hevredigezhioù-tud a aotre ac'hanomp da respont ne ro nag an istor nag ar c'hentistor skouer ebet eus ur bobl pe ur vroad o kemmañ yezh pe sevenadur, eleze o tegemer framm yezhel pe sevenadurel ur bobl all hag o chom war un dro ur bobl pe ur vroad. Enepster eo ar mennoziou-se.

Un tamm re eunik e vefe koulskoude displegañ taerded ar stourm breizhek dirak an destuziañ gallek dre skorted ar geriadur-frammañ gallek. Ret eo kounaat n'o deus nag ar seven-

adur nag ar yezh vrezhonek gouzafvet troc'h don ebet a-hed ar c'hantvedoù, met un emdroadur gorrek adalek an hengeltiek hag ur gendalc'husted souezhus abaoe kentañ oadvezh an houarn (Hallstadt). Aze emaeomp dirak un anadem digenseurt a aotre ac'hanomp da gadarnaat en em vag meizframmerezh ur breizhad eus an XXvet kantved diwar hentadurioù yezhel, sevenadurel, istorel ha zoken trivliadel, a stlej d'o heul, a-dreuz milvedoù, ul lodenn vras eus ar c'hentistor. Kreñv eo ar meizframmañ-se, zoken pa n'eo ket emouez. Kement-mañ a zispleg emzifenn fery ar breizhad dirak pep striv d'e ziframmañ diouzh e hengoun. An destuziañ gall a c'hell lakaat ar Vrezhonek da ankounac'haat betek geriadur diazez o yezh, diarvar mat e vo dall ur benveg ken iskis hag ar galleg kent bezañ boulo'het da vat ar meizframmañ breizhat. Dija zoken e c'hellomp lavarout e kil ar galleg dirak an anadennoù skiantel.

An hentennou desavadurel implijet bremañ e Breizh a hegas meizframmerezh milvedel ar Vrezhonek o krouiñ en o diemouezvoud rannbarzhioù ramzel a feulster. Daoust hag e talvez ar boan neuze kenderc'hel da forañ milmilionoù a lurioù ha da zrastañ miliadoù a c'halvidigezhioù kelenn-erion en ur strivañ ken aheurtet da sankañ en ur bobl ur yezh hag ur sevenadur estren ? Ne gredomp ket.

Klozadur an evezhiadennoù-mañ a zo sklaer : ar Vrezhonek a zo ur bobl bet klasket he diframmañ a bep tu a-hed kantvedoù. Pa'z eo bet tennet diganto dre nerzh o yezh dezho o-unan a oa koulskoude ur benveg gwelloc'h dre vras eget hini o enebourion, e tleont en em brientiñ buan d'al labour hag adsevel ar brezhoneg a vo evit ar Stad Vreizhat ar gwellañ benveg da "zegas an urzh war engroez ar boudoù, amproiñ ar gweredoù hag ar gwirvoudoù, kaout evit pep tra an anv a zere" evel ma lakaas engravañ war e vaen-bez an Impalaer-hont a Sina.

ABANNA

EVEZHIA DENNOU WAR YEZH AR QUIZIEGEZH

da Jord PENNAOD

AR BREZHONEG
WAR ZOUAROU
AR
QUIZIEGEZH

Savidiqezh Hor Yezh dek vloaz 'zo, Preder c'hwec'h vloaz 'zo, Saded warlene o deus roet korf d'ul lusk hanterkantvloaziek: ober eus ar brezhoneg ur yezh a quiziegezh. Goude taolioù-argad digenvez, dibed, sellet en o mare evel kurioù, - ar gedern a oa graet Mordiern, Vallee, Karjean, Jestin, ar Mason, Maze, Glann-dour, Kervezioù anezha, - en deus ar brezhoneg hiviziken pennoù-pont divrall war zouar ar quiziegezh, ha krog mat emomp da entrevadif an Arvorig nevez. Strolledoù gwastadourion, kevrest met, e genlabour bemdez, ingal ha reizhiadek, da ziorren ar brezhoneg evel yezh kalvezel ar skiantoù hag ar preder, ha da spisaat war un dro kalvezerezh diorren al lavar kalvezel.

Mar bije eus Breizh ur vro reizh, en he rezid, e vije bet kavet an dud rekis evit c'hoalat-dic'hoalat betek an disteraf eskenn ar c'hudennoù stignet gant arreakat hor yezh. Nemet, daoust da youl start ha da galon al labourerion e rank ar re-mañ tremen gant sevenif ar pep mallusañ. Setu perak, kantoc'h eget stagañ gant ur studi hollek na ven ket evit kas da benn, e pleustrin war ur c'hraf bevannet strizh.

YEZH LENNEGEL
HA YEZH AR
OUIZIEGEZH

Gant lennegerion droist-holl e voe stummet ar brezhoneg a zagouezh geneomp. Diwar ar yezh lennegel da vamm hag ur skrid estren bennak da dad e voe ganet an darnvuiaf eus an testennoù gouiziek a gaver e brezhoneg. An evezhiadenn-mañ a gemerint da loc'hvan. Strivañ a rin da ziskouez penaos emañ dishefvel yezh lennegel ha yezh ar ouiziegezh. Ha moarvat, diwar vont, e teuimp da gemer sell war doareoù talvoudus evit an embregerezh a roneomp: lakaat dindan vrezhoneg kompezennoù ec'hon ar ouiziegezh.

Pa raomp maneg a Lennegezh, ne deo ket fall sklaerriañ un tammig ar ger. Petra eo al Lennegezh eta ? Amañ e kilan gant evezh. Neket hepken gant oon rak al lennegerion, hogen ivez pa n'eus ket daoubannusc'h eget hevelep goulenn. En tzoomp kentoc'h e : "Petra a ro deomp al Lennegezh ?" Aze, e c'hellan respont, dizafjer a-walc'h : "Diskouez a ra deomp pezh na vijemp ket ast da gaout a-hend-all, da nebeutañ en doare-se". Liessaurt evel ar vuhez eo ar pezh a laka ar skrivagnerion en o oberennoù, hag ar pezh a glask enno al lennerion, nemet un "diskouez" e vez bepred al Lennegezh. Istorioù, bodoù. Hentoù treme bodoù, setu al Lennegezh diwar ur c'hentañ gwal. Hogen evezh c'hoazh ! Petore hentoù ? Reoù forc'hellek hep mar, rak amañ emaoomp e domani ar forc'hellegezh, an daoubennusted : gerioù a lakaer dindan daoulagad al lenner, gerioù hepken; daoust da se, ne vez lavaret eo mat al Lennegezh nemet pa dremen al lenner hep eveshaat outo; nepred ne dle sell al lenner chom luget e nep ger, hogen bepred dilemmat en tu all, d'en em gavout gant ar bed-se, gant an istor-se ez eo kefridi ar gerioù bezañ alc'houez hag arouez dezho.

Hopala, a glevan dija Jord Pennaod o herpel, se zo Lennegezh a c'hiz kozh a lakaer e penn-kont aze, va faotr. Gwall bell diouzh da vedoù ha da istorioù eo ast al Lennegezh a-vremañ. Gwir eo. Disammet moarvat gant ar bannarvestoù diouzh he c'hefridi diskouez ar bed-mañ hag e istorioù, buntet ivez gant ul lusk diabarzh, al Lennegezh arnevez, evel fastet o c'hoari an azen liorz-h-kêr hag o pouzmen war galc'h, a venn ren embregerezhioù dispac'hel, - dispac'h ken kozh emichañs ha mab-den, met ne vern. Deuet eo preder al lennegerion d'en em skoulmañ en-dro d'ar galloud-se o devez ar gerioù da dennañ ar sell ha d'e gas a-dreuz dezho d'un tu-hont ma vezont an nor nemeti warnañ. "Lennegezh c'hlan", o kemer da sellad hec'h anien dezhi hec'h-unan. "Hor barzhoniezh zo barzhoniezh ar varzhoniezh" eme Jean Wahl. Met dres, hevelep Lennegezh,

AN HONTGER

o kemer d'he sellad he galloud troizhañ hont, n'he deus ket en dinac'het evit-se : er c'hontrol, pleustret n'he deus ken graet d'e episaf, d'e nerzhaf; he hufvre a zo e lakaat etre daouarn ar barzh evel ur galloud glan, ar galloud neket da chom e-kempouez war renkadennoù gerioù hep ster barniet evel kement-all a vuestoùigoù goull, hogen da gavout e kavrin kalet-mañ ar gerioù al lafa da dreizhañ en tu all d'ar bed, en tu all d'ar boud. E-se, emañ kefridi al Lennegezh a-vremañ, evel pep Lennegezh araosi, gant tu-hont ar gerioù, gant an hontger, - an diforc'h nemetañ etrezi hag he diaraogerezh eo e ra-hi eus he hontger un hontved war un dro, ha da heul, - ar ger o vezañ bed c'hoazh, - "divedif" a ra ar ger ouzh e lakaat di-ster a-grann e-kefver ezhommoù ar bed.

Distroiñ a ran war va respont d'ar goulenn : "Petra a ra deomp al Lennegezh ?" hag a oa : "Diskouez a ra deomp pezh na vijemp ket ast da gaout a-hend-all". O'ar pezh-se, hon eus didermenet ez-hollek e lec'h fuzmel oc'h ober anezhañ an hontger. Mar koromp bremañ savelañ e vouldelazh kefverel, e kouezhomp gant un dra bennak hefvel a-walc'h ouzh Mougev Platon : ar brasañ gwirvoud o vezañ gant an hontger, ar gerioù o vezañ ar skeud anezhañ hepmuken; pe c'hoazh, er c'hoariva margodennad, petra welomp mar n'eo ket tudennoù, Harlikin ha Volantin, o tifestal dirzomp, - an hontger, - ha tamm ebet tammoù koad, kartofis, mezher, - ar gerioù ? ... Padal, mar groomp tro ar c'hoarilec'h, mar dizoloomp e-touesk e sifelennoù ar margodennad a ro o anad-buhez da Harlikin ha Volantin ... ? Padal, al lennegar, ar barzh, pa skriv, eo dav dezhañ plodiñ gant gerioù, ha gant gerioù hepken, nann ? Ya ha nann. Sellout a ra ouzh e c'herioù, kiasañ a ra warno zoken, e "vicher" eo, nemet hevelep "sell ouzh ar gerioù" a-borzh ar skrivagner a zo anezhañ hepken un toullañ hent d'ar sell a bare al lennerion ouzh an hontger; ar raskoued anezhañ n'eo ken, kalvezerezh, kalvizierezh.

ADAMMEG
AR VOUGEV
HAG AR
MARGODENNED

AFER KENTAÑ
AL LENNEGEZH

Gwelout a raomp, forzh pe dre zoro ma kemerer ar gudenn, ne reer ken nemet krefavañ bep taol al lakadenn : afer kentañ al Lennegezh eo an hontger.

AN HONTGER
HANTEROUR

Dre-se e veizer pegen soutil, pegen brek ha milfiavus a vo er yezh lennegel ar c'hefrerioù etre ar gerioù, pa ouezer a vezont skoulmet dre hanterezh an hontger.

Ma, a vo taolet din, kaerat tra, gant ur ger nevez e rit, ho "hontger", e-lec'h ma ra an holl gant ar ger "ster". Ar gerioù o devez ster; o ster a gav al lenner warno, ha mat pell 'zo. Nann, emezon, keit a zo etre ar voullig spoue-rusk-mañ hag ar bed dramaek

HONTGER
HA STER

dilammet diouti pa vo-hi deuet da vezaf penn Harlikin, keit-all a zo etre ster pep ger eus un gberenn hag an hontger diorreet diouti gant al lenner. Ster ar ger ne doo nemet ar roud treset warnaf evit mil doare gallus d'ar sell da zilammat dioutañ; elf-ennelañ hontger a zo eo moarvat ster ar ger, padal ne deo ket hontger un oberenn par da sammad hontgeroù ar gerioù a ya d'hec'h ober. Ur bed ha muioc'h eget ur bed a zo en hontger un oberenn, pezh na vez e ster nep ger.

Lavarat e vo din c'hoazh : "ar c'hefverioù etre ar gerioù, emezoc'h, a vez skoulmet dre hantarezh an hontger. Hag ar yezhadur, an eradur, an deveradur neuze ?" Netra diogeloc'h. Nemet, e-kefver Lennegezh, kement-se n'eo nemet ar sifelennoù etre daouarn ar margodenner. N'eo ket int a chomo bev e spered al lenner. "War al lenn e c'hounij brumennoù kehelus..." Da viken e chomo erest ennon an tri ger "c'hounij", brumennoù, "kehelus", n'eo ket avat dre e ster gerioù, n'eo ket muioc'h dre berzh nep eradur yezhadur, hogen bennozh d'ar boem dibar, ar mor achanterezh ma neuan ennañ pa lavaran barzhonag kear Maodez Glannour, - dre an hontger diwarno. Rek e adlavarout a ran, afer al Lennegezh a zo an hontger. En tu-mañ emañ ar yezhadur; hag ar staradur a zo hepken alc'hovez an dorioc o skeif war an hontger. Al Lennegezh a zo lec'h ar c'hefverioù hontgerel, dibar, kenevedennus, pourgemmus avat ha peurlaosk; pelloc'h e welimp, gant yezh ar ouiziegezh, un doaread all a gefverioù, euan, berr, disked, hogen krañv ha felan, harpet startoc'h ouzh ar staradur.

Ster ar ger lennegel a zo kent pep tra disoc'h un istor, - na ankoueomp ket e tever ar gerioù ster hag istor eus an un latin historia; istor ar ger er yezh, er sevenadur, el lennegezh; ar ster lennegel a c'hoarvez eus anienoù liasek, gouezezennet war ar ger a-hed an oadvezhioù, seul stankoc'h, seul binvidikoc'h ma vez kozh ha birvidik ar sevenadur. Ur meni "personelezh" en devez enta ar ger lennegel, un "dramm", na vez morsk kaset da hask gant nep studi an eztaolusterioù anezhi. Havelap eztaolusterioù diniver a zo kement-all e zoarsoù evit ar sell da zilammat diwar ar ger d'an hontger. Deoust d'o meni personalezhioù, koulskoude, ne baouez ket sell al lenner war ar gerioù; en tu all dezho ez a da gaout e sellad, e vez al lenner gant ar gerioù a lenn, war-du an hontved a zifluk e penn e selloù. Arhentou e vez ar gerioù lennegel, evel ar pannelloù-arroudennañ a gaver war lez an hentoù, nemet arhentou dibar, rak ouzhpenn lakaat ar beajour war an hent, e lakaont anezhaf da c'heneal ar vro ma'z a dezhi.

UR MENI
PERSONELEZH

UR ARHENT
DIBAR

GOULENNOU
AL LENNEGER

Petra enta e c'houlenn al lennegel digant ar yezh ? Danvez hontger. Eleze gerioù ha stummoù yezhel dezho "personelezh" a-walc'h; dav eo dezhañ lakaat kamm etre ar stummoù yezhel a hanvoaz, anezho "personelezhioù" gourfaoterek, dasstrinksonennus, hag ar goveladennoù dizasson o neradif evel keball-tousegi e pep korn eus e bark. Digant an eradur hag an deveradur e c'houlennno bezaf kempenn ha stabil; evit ar stummoù a-unan e vo azhomm dezhañ eus ur statud heñvel a urzh hag a stabilder, moarvat da arboellañ pep chestre gant traoù a eil renk, dreist-holl evit ober eus ar gerioù un diazez divrall-roc'h da ziflukadurioù neuennus an hontger (1). Roud e vonedigezh a zo ar roud a-saezh, o treuzif linenn ar gerioù, o treuzhaf an tu-hont, ha n'emañ ket e breder nemeur gent astenn al linenn, gant govelañ stummoù nevez, - sellat an dibat a c'herioù nevez a stummas Roparz Hemon; o gwir, n'emañ ket e-kerz al lennegel ar binvioù-govel ret da seurt kefridi : gwall wan neudennoù kevrid ar c'hefverioù hontgerel e-skoaz loc'hennoù galloudus an dezavout prederouriezhel ha gouiziegezhel.

LENNEGEZH HA
NEVEZC'HERIOU

2

TU-HONT
HA TU-MAN

Mar deo al Lennegezh lec'h ar c'hefverioù dre an tu-hont etre ar gerioù, ez eus ul lec'h ivez d'ar c'hefverioù dre an tu-mañ, ar gouiziegezh an hini eo. Evel-just, un niver bras a c'herioù a gaver boutin etre al Lennegezh hag ar gouiziegezh, nemet ez eo an doare o devez da gaout o ster a laka an diforc'h etre an implij lennegel hag an implij gouiziegezhel anezho.

Mar bez kaset sell al lenner bapred an tu-hont d'an destenn lennegel, e c'houlenn er c'hontrol ar braderouriezh, ar skiantoù digantañ darc'hel pizh e selloù war ar gerioù. Ira ma vez ar ger lennegel evel skoud amsallat an hontger, ec'h an em zalc'h al lavar gouiziegezhel e legad an heol : avit kaout hanvoud, e rank en em ziarannañ diouz ar bed ha pep hontger, evel ar sklerijenn diouz an deñvalijenn da zeiz kentañ ar C'honneliezh. Mar menn al lavar

(1) N'eus dislavar ebet d'an dra-mañ gant skourroù "divedet" al Lennegezh kempredet a venegen uheloc'h. Diwanañ a reont diouz yezhoù stabilaat, an egor diogel un hengoun lennegel hirbleustret, hag int stummadurioù nevezyezhezh, - pe amyezhezh, - diwar hontgeroù hengounel (kv. an notenn gant Goulven Pennaod, en Ar Stourmer, nn. 7, p.4, genver 1964).

DREMM
BERC'HENNADUS
AR BED
MAOBEZ
GLANNDOUR,
EINSTEIN

lennegel broudaf en den e c'halloud da gaout ur bed, ec'h en em ro al lavar gouiziegezhel evel d'amm berc'hennadus ar bed. Al lavar gouiziegezhel a zo warnañ anienoù eus ar bed, lakaat war-wel gantañ, - arweloù e vez ar gerioù ennañ, ket arhentoù, - ha c'hoari a ra evel p'en dije skrapet da vat e gevren digant ar bed, evel pa na vije mui ezhomm eus ar bed ken. Ar bed ma vevomp a vez sklaeriet gant al Lennegzh, - pegen tenez din skleur ar glav aba Lennis "Komzoù bev", ha kevannzus glannoù an Aon abaoe Jakez Riou, - a vez tafvalaet gant ar ouiziegezh, - pegen pell diouzhip ha spour-onus tal du an hollved aba flammin etrezañ ha ni Atalad Einstein. Atalad Einstein zo deomp splannoc'h dremm d'ar bed eget an oabl stergannek; ennañ hag er ouiziegezh diwanet dioutañ emañ hiviziken lakaat war-wel anien ar bed-mañ.

E-se, ar ger gouiziegezhel, mar en devez nesaferioù, mar gra dave d'ur pezh all, ne deo ket d'un hontger, d'ar bed, hogen d'ar gerioù all a zoug e-gevret gantañ anien ar bed. Pa gomz ur fizikour eus gwask e laka kerkent e penn-kont un perzh hag ur gerread; pa lavar ar prederour noema, n'emañ ket pell an noeziz. Ouzhpenn taol-ennañ ar bed, e enkorfañ a ra ar ouiziegezh, ha dre-se en em lakaat a-stumm gantañ, en em frammañ d'ober un unvez eveltañ. Hag e-keuz hevelep loc'hadeg hollet eus an anienoù evit kejañ hag en em unanif, e rank ar gerioù o doug heuliañ, kejañ, lakaat war-wel dre gloadurioù yezhel ar c'hlotadurioù a zo etre an anienoù. E gerioù all, seul walloc'h e vo yezh ar ouiziegezh ma vo anni muioc'h a gefverioù-stumm oc'h arwelañ kefverioù-anien.

Tuet e vez enta yezh ar ouiziegezh d'en em glozañ warni hec'h-unan en un emframman men e klot kenetrezo ar stummoù yezhel en doare ma klot an anienoù a zougont. Moarvat ne vez morse peurgloz emframman gouiziegezhel ebet; bepred e chom goulioù warnañ, - lavarout a reer c'hoazh ez eo diqor, hag o reer zoken eus seurt digordad ur perzh bagol, - met dres, mar gra fouge ar broderourion eus o frederouriezh digor, ez eo peogwir e tenn pep prederouriezh dre ha natur, da serrif, da gleizhennañ ar goulioù a chom warni, ha da vezañ un emframman kevannstag evel ar bed a fell dezhi arwelañ.

Ha mar ne gloz nepred warni hec'h-unan peurglenk ar ouiziegezh, ez eo peogwir ne deu-hi morse da zivigañ anienelezh ar bed. An anienoù kinniget deomp ganti evel dremm ar bed ne vezont ket en he dezrevelloù evel mein-sked en o skrinou, met kentoc'h evel struzh-ennou manet gwizienmet e tafvalijenn ar bed, oc'h emdreif dizehan diwar ur sap nevez o sevel eus an donderioù. Dre-se o devez ivez gerioù ar ouiziegezh un istor, a zo istor an anienoù : ar ger gouiziegezhel n'en devez "personelezh" ebet e-giz ar ger lennegel, an

UR SAP NEVEZ

anienoù savelet bennozh dezhañ eo a zo evel personelezhioù fizikel, jedoniezhel, h.a., - sullet da skouer emdroadur keal an atom e-doug ar bloavezhioù diwezhañ.

Mer-komp e teu an anienoù eus an hontger d'ar gerioù, eus ar bed tafval d'al lavar splannaus. Sed aze dres ar moned a-c'hin da voned al Lennegzh. Kas (al lenner) eus ar gerioù d'an hontger a ra al Lennegzh; degas (anienoù) eus an hontger d'ar gerioù a ra ar ouiziegezh. Hag-ef n'hor bije ket aze monedone hollbad al Lavar ? An den bannet er-maez eus hentoù sklerijennet ar gerioù hag o tis-treif dezho, hemolc'het gantañ rinoù an islonk ?

Kompran a reer bremañ petore kemma a zo etre stuz al Lennegzh ha stuz ar ouiziegezh. Traizhañ hont eo reolenn al Lennegzh; kemer, en tu-hont d'al lavar, an digor, ar gwerc'h da hanvoud, ha hi lavar nemetken. Pakañ ar bed e roued al lavar eo reolenn ar ouiziegezh, eleze kemer ar c'hloz, an eren, ar c'hanglotadur da hanvoud.

Yezh ar mil kefver o kroazigellañ eo yezh ar ouiziegezh, yezh ar mil kavell d'ar stummoù yezhel nevez. Al Lennegzh n'emañ ket en he natur genel gerioù nevez, o vezañ ma ne baouez ket ganti an evezh war ar gerioù. Ar ouiziegezh avat n'he devez biken stummoù a-walc'h da zougen an anienoù nevez a sav dezhi eus an tachennoù lakaat dindan c'honidigezh gant ar vuhez, - ha gant al Lennegzh.

Dre-se emañ ar ouiziegezh bepred o skeif ouzh dor ar yezh-ouriezh. Skoazel a c'houlenn diganti evit dizoleif hag anataat ar c'hlotadurioù yezhel he deus ezhomm da startaat hec'h emframman anienel. Amañ avat e ranker anzav e vezont pell a en em glavout bemdez; e gwir, ne van ket seizhdalest ar ouiziegezh pa chom boud he zitourerezh : ober a ra laouen gant ar c'hlotadurioù anavezet ha gwiriet gant ar yezhouriezh, hogen ne ra ket marv mil den a stigmañ reoù all er-maez eus terras cognitae ar yezhourion. Heidegger, evel gwazhall Platon, an holl broderourion hag an holl ouizieion, a gemer harp war hentoù ar gerdarzhadur; pa steuz ar re-mañ avat, ne vezont ket chalet muioc'h eget Platon evit terrif pezh a vije lezennou furnezh ar yezhourion. Diwar o c'hendael e tiwan ur c'halvezerezh nevez, ar sturyezhouriezh, o lakaat hec'h hentennou tamm ha tamm da gemer lec'h damreolennou ar mare ma emdree ar yezh hep rat d'he yezherion.

MONEDONE
HOLLBAD
AL LAVAR

AR GWERC'H
HAG AR ROUED

MIL KENVER,
MIL KAVELL

O SKEIF OUZH
DOR AR
YEZHOURIEZH

STURYEZHOURIEZH

Notenn e-ser klozañ.

Arabat e vije avat, an ur yezh c'hoazh gouezel evel hon hini, ez aje skrivagnerion ar ouiziegezh da eilpennañ urzh an talvoudoù ha lakaat an arvar un unvaniezh prenet a boan vras. Mat e vez lakaat hol lavar da glotañ ouzh plegoù donañ ar gwirvoud. Nemet n'eus ket aze abeg e-walc'h evit terriñ ar reolennoù difaret gant unvanourion ar yezh, pergen Emglevioù 1907 ha 1941. N'ouzon ket hag-ef e c'hell sevel arguz bras etre ezhommoù ar yezh skiantel ha reolennoù-Stad ar yezh, pezh a ouzon avat eo e tle chom an dia-
-rentez bepred gant ar reolennoù-Stad.

GOUIZIEGEZH
HA STADBLEZH

Maen ar Ya, mourzh 1964

*

ALAN TORAVEL

M E S K A J

Ar stourm evit Breizh hol laka da vont e-barzh ur rouestlad kudennoù, hini ar yezh en o zouez. Goude ma anavezomp well-wazh ar pal da zisoc'hañ gantañ, e c'hoarvez ganeomp errucout gwech an amzer e-tal ur c'hroazhent. Da zivizout hon eus neuze pe dre hent eo ret derc'hel da strivañ. An hentoù dibabet gant an emsav evit ar yezh o deus degaset ac'hanomp betek ar poent m'emaomp bremañ, e plij ganeomp pe get. Anat eo n'eus ket tu da vont war-gil. Da vezañ trec'h e Breizh 'a-ziwar an dibaboù-se ez omp tonket divarteze.

Tizhet hon eus mont diboan kaer pe dost hebiou d'ar gripedoù antellet dindan hon treid. Un nebeut anadennoù a zo bet degaset e-giz se d'ar gouloù, ha da Vretoned 'zo da nac'h sellout outo bremañ c'hoazh. Berr ha berr o laka-an amañ da heul :

- Unvan e rank bezañ ur yezh ma fell dezhi derc'hel penn ouzh an nerzhoù dreist he muzul o tagañ anezhi. Pep tra a zo bet lavaret e gwir pe e gaou diwar-benn emglev an 8 a viz Gouere 41. N'eo ket disi moarvat. Ul lezenn eo

memestra, a ranker sentiñ outi evel ouzh pep lezenn.

- Emañ tonkadur ur yezh e dalc'h tud kêr, ganto ar veli arboellerezhel. Buanoc'h buanañ ez emdro ar yezh da vont da heul seurt froudoù an deiz a hiziv.

- Gant ar brezhoneg eo deut ar brouenn e c'heller embreger gantañ holl vennoziou ar vuhez vremañ, al lennegezh pe ar skiant e vefe.

- Evit un hevelep abeg, ne c'hell ket hor yezh bezañ ur pezh dilhad a wisker e degouezhioù 'zo. Drezi ha diouti e rank sevel an holl anaoudegezhioù a ya da vouetañ hor spered, a se mennoz ar rak-sternata stadel.

- Daoust d'hon huñvreoù kaer e chomo yezh ar bobl disheñvel diouzh ar yezh lennegel, hag houmañ ken disheñvel all diouzh ar yezh skiantel, evit abegoù na dennont ket hepken d'ar geriaoua. Dibaot a wech ez eus bet astennet pontoù etrezo e kement kevredigezh a vez.

Bez ez eus avat un "no man's land" oc'h en em ledañ etrezo, yezh ar c'helaouennerezh an hini eo. N'eo ket ur pont e gwirionez. Reishoc'h e vefe komz eus un doare hiron kentoc'h, gantañ arouezioù dezhañ e-unan.

Mar deo ret ret diforc'hañ ar c'hevrennoù se, se ne dalv ket e c'hellomp ober fae war unan bennak anezho. Gant an holl dachennoù se war un dro ez eus da bledif a-zevri.

- Divyezhegezh ur bobl, hag hi o vevañ dindan lev-ezoniou-enep daou stern kevredigezhel, n'eus anezhi nemet ur stad-etre, o kas abred pe ziwezhat da unveli yezh ar stern kreñvañ.

- En diwezh, ne c'heller ket distagañ ar stourm evit ar yezh diouzh an hini evit ar vro.

Sed eta amañ ar skiant hon eus prenet abaoe Ar Gonideg. Eveljust ni hon eus an emskiant na vo ket saveteet ur vro nag he yezh gant un deorienn, forzh pegen kaer e c'hellfe bezañ. Da benn vat hon eus kaset ul lod anezhi dre hon ober. Tamm ha tamm eo deut ar brezhoneg da vezañ ur benveg dreist evit hor spered, tra ma troe kein muioc'h mui ar gevredigezh vreizhat outañ. Hervez an dro-lavar vrudet, ez eus bet toullet ur foz etrezi ha ni. N'emañ ket aze an dalc'h. Chomet eo e

gwirionez tud ar bobl war o zachenn-int, en o mennozva-int, tra m'hon eus trevadennet mennozvaou all na vezont ket diouto.

Siwazh deomp omp bet dispartiet gant an darvoudoù digant ar vrezhonegerion ampart war ar werin ha tostoc'h d'he frederi egedomp. E-giz ma veze kont tamm pe damm gant an emsav a-raok ar brezel, e vije bet ezhomm eus hor c'henlabour da vroudañ ha da heñchañ an ober a renont e-touez ar bobl. O enebiezh, ha n'eo ket o digasted en hor c'heñver hepken, a sparle da vat hent ur seurt kenlabour. Gwell eo bet ganto en em dreñf war du ar stern a oa mennet groñs da ziskar hor sevenadur, ha gortoz digantañ ar silvidigezh. Kenkoulz en em deurel etre divrec'h e grouger ! A-benn ar fin eo bet dibikouzet o daoulagad da reoù 'zo, a veze ar skoliata o c'harg. Hag int en em dreñf neuze war-du un achapadenn all, an amouestl politikel, ha tabut o sevel e-touez o renkoù abalamour da se. Heverk eo ur seurt emroadur, zoken ma'z eo chomet difrouezh betek hen : n'hell ket diueriñ ar striv sevenadurel eus ar stourm politikel. Da grediñ ez eus evelato na gemero ket talbenn kleizet an enebiezh c'hall lec'h ar pezh a vije dleet dezho kas da benn, kelenn ar brezhoneg, n'int ket bet evit seveniñ.

Nec'hetoc'h e c'heller bezañ gant an emroadur a zo c'hoarvezet nevez 'zo e-touez ar werinelourien dre hirvevañ en o bed kloz. A-bouez e vo evit an amzer da zont. Tro wenn o deus graet o klask lakaat ar bobl da lenn o skridoù (pe adembannadurioù pa vanke an awen), ganto avat c'hwezhat vat ar c'hraou hag al laezh ribotet. D'ur seurt ratozh e voe savet koulskoude o doare-skrivañ "skiantel", en ur veskañ darempredoù ar soniadouriezh hag an hengoun yezhoniel gant ar yezh skrivet. Ur c'hwitadenn a voe ivez o c'helaouenn "Brud", mesket ganto tachenn ar bobl hag hini al lennegezh rik. War a hañval, emaint o tiskregiñ hogos da vat diouzh ar striv da lakaat ar werin da vezañ desket pe da lenn en he yezh. Dizoloet trumm eo bet ganto e vez ar Vretoned tud "visuels" ha yao d'ar gomz ! Ur gevredigezh a zo bet savet "Al leur nevez" a zo he fal "reiñ muioc'h mui a vrud d'ar brezhoneg komzet". Berzh a ra ar beilhadegoù ha brezhoneg ez eus bet evit ar wech kentañ eus e istor er pellwell. N'hellomp nemet stlakai hon daouarn d'an holl strivoù-se anez e vefemp pilpouserien.

Evit an hevelep abeg, n'hellomp nemet keuziañ d'an tach-
 ennoù fraost, ar c'helenn hag ar skrivañ, a zo bet dilezet
 ganto, pa soñj deomp ez eo ar gomz stad diwezhañ ur yezh
 kent dezhi mont da get. N'eo ket ur souezh ur seurt dilez,
 a gas d'an traoñ an holl strivoù a voe sevenet evit reol-
 iañ ar yezh skrivet. Er-maez eus ar jeu omp bet argaset,
 hag aesoc'h a se e voe ankounac'haat labour ur remziad
 a-bezh. Hag eñ e vimp evit dont e-barzh adarre ? Ur gudenn
 a dalvezfe ar boan da vezañ arnodet, kuit a vartezeañ dfin.

Un eil disparti a zo bet oc'h ober e reuz. Abaoe ar
 brezel diwezhañ eo chomet an emsav sac'het e fankigell ar
 rannvroelerezh dereat hag ar gallegañ aheurtet. Er-maez
 anezhañ ez omp chomet ivez, troc'het diganeomp an divaskell
 a zouge an emsav sevenadurel gwechall, ar vroadelourien
 hag ar werinelourien. Ar goulenñ enkreuzus a sav eo gouzout
 an tu a denno ac'hanomp eus ur seurt enkadenn. Sachet eo
 bet war ar c'hloc'h e lec'h all n'eus ket pell. Deiz pe
 zeiz e vo ret distankañ ar presnestroù a chom serret war
 ar gambr dall m'emaomp o treuzvevañ, bodet en-dro da skleur-
 ig ar wirionez, ha pa vefe houmañ e-kreiz menezioù Kerne.
 Ne vo ket saveteet ar yezh hervez doare ar werinelourien,
 pe hervez hini ar bolitikourien, pe hervez hon doare-ni,
 anat an dra-se. Hervez an holl zoareoù-se war un dro ne
 lavaran ket. Anat ivez ne c'hellomp ket sammañ war hor
 choug an holl gefridioù-se, anez' e vefe lies den ac'hanomp.
 Penaos en em gemer a-hend-all ? Bete vremañ ne weler ket
 fraezh peseurt burzhud a rofe an tu deomp da genlabourat
 gant tud all an emsav a chom re vouzhet ouzhimp. Pa vo aet
 ar re yaouank war an oad, daoust hag e vo heñvel ar stal
 ganto ? N'hellomp ket kontañ bepred avat ma teufe an amzer
 da zont da blaenaat hor skoilhoù. Ur fazi e vefe tremen
 hep kemer preder ouzh ar re yaouank adal vremañ ken na vo
 re ziwzhat. Emañ en o c'herz an armoù efedus a zo bet
 goveliet evito gant o re henañ. Troomp, eilpennomp ar gud-
 enn evel mar karomp, e stoker bepred ouzh an hevelep di-
 soc'hoù. Unan a bevar :

- pe e chomomp el lec'h m'emaomp o c'hortoz ur maread
 spletusoc'h,
- pe e klaskomp un digoradur war-du ar "re all",
- pe ez eomp tre er c'hoari politikel oberiant,
- pe e tougomp dorn d'ar re yaouank ma savfent drezo
 o-unan ur roll-labour da vont diwar o c'hilud.

Poent eo en em soñjal diwar-benn an holl zoareoù-
 se. Kreñv a-walc'h eo deut da vezañ hor spered evit ma
 c'hellfemp prederiañ dizaon en ober emañ ouzh hor gortoz.

18.3.1964

ERWAN GWEGEN

AR STOURM POLITIKEL HAG AR YEZH

Pa vez kel a stourm politikel e Breizh e vez dav distreiñ da bezh a zo bet skrivet gant hor gwellañ skrivagner war an divout : Youenn Olier. Digudennet eo bet gantañ al lezennoù sour a zo da vzañ sturiennoù ar stourm. Bez' e c'heller o lakaat evel-henn : bout yezhkarour a zo bout brogarour; ar vrogarouriezh en he c'hlok a gas detri d'ar vroadelouriezh, rag, pe euj pe zieub e ve ur vroad, kentañ pal ar vroadelouriezh eo darc'hel ha difenn kement a ra an diforc'h etre ar vroad hag ar broadoù arall, ha peurgetket, he yezh dezhi. Dre se e c'heller dastum e rank pep yezhkarour emskiantek dont da vout broadelour evit difenn ar brezhoneg, pennaouezinti ar vroadelozh. Ar stourm evit ar yezh n'eo nemet ur stumm d'ar stourm evit ar vro.

Evit bezañ stourm e rank bezañ enebourion ha ret mat eo gouzout piv a zo enebour evit termenañ neuz ar stourm, dreist-holl pa vezer difenner.

Pennañ enebour ar brezhoneg e Breizh ar Stad en hini eo, ha goude-se **disablanted** an teoyezherion. Daou dalbenn ez eus eta d'ar stourm : unan troet ouzh hor c'henvroiz hag unan troet ouzh an estren. N'aus ket ezhomm da ziskleriañ n'eo heñvel nag ar pal nag an hentennoù a zo da arverañ en eil plegenn pe en eben.

Baz' ez eus e-touesk hor c'henvroiz un toullad mat hag a c'heller sellout outo evel gwashañ enebourion ar yezh hag ar c'heal broadelour;

skolaer, prezaget e brezhoneg gant an Aotrou person, "spiket" e brezhoneg gant ar skingomz; den ne ray van ha kenderc'hel a ray an Aotrou skolaer da gelenn galleg, an Aotrou person da brezeg e galleg, an Aotrou "spiker" da "epikañ" e galleg. N'o deus nemet youc'h'al ez int brezhoned, paour kaezh brezhoned, mac'homet gant ar C'hallaoued, ha ne deus netra da c'hortoz digant ar mac'homerezh nemet gwaskerezh, laeroñsi ha dienez.

Youc'h'al : eno emañ an dalc'h. Pezh a anver stourm politikel n'eo nemet ur gevezadeg a safar. Ar safar eo perzh dreist an niver bras, ha war ar brasañ niver eo diazezet ar werinrenouriezh. Ar werinrenouriezh, her lavar he c'helennadur, gant he dilennadegoù, gant he bodadegoù kannaded, gant he lezennoù divizet gant ar re-mañ en anv ar bobl, a dremen da vuzañ ur c'hendarempred etre ar gouarnamant hag e sujidi. Meur a dra avat e c'hell fed abegif en doare ma vez kaset an traoù en-dro. Ur gwerinrenerezh eo, sañset, Bro-C'hall. Bez ez eus ganti dilennadegoù alies, kannaded a-leizh, lezennoù a-vil-vern, an holl anezhe ken pouezus e gwirionezh hag ur bern delioù sac'h en avel c'hoañv; ar gwirvoud eo n'eus er vro-se met ur veli, dizamant he dalc'h, hag emsavioù krañv pe grañvoc'h o stourm evit kefridiou a-zevri.

Gourc'houlennerion eo an emsaviou-se; stourm a reont ouzh ar Stad, diouzh he lezennoù dezhi, n'eo ket avat d'he dispenn, met da ziframmañ diganti gounidoù evit rann pe rann eus ar boblañs. Bez' e c'hellont klask he diskar, e sell da lakat unan all, heñvel a-walc'h he galloudezhioù moarvat, nemet e vefe renet gant hemañ pe henhont, a-du gant ar re-mañ pe ar re-hont diouzh ur c'helennadur bennak war boent pe boent.

Diwar ar c'hentañ gweled, hag hervez an darvoudoù e hafvalfe bout splotus d'an emsaverion vreizhat stagañ o stourm ouzh hini ar c'hostezennoù politikel gall a zo an taerzañ anebour d'ar gouarnamant, an hini gouestaf d'han diskar, ne vern pe kelennadur a ve dezhi he barr-ti. Re diwar-drumm eo ar savboent-se. Ur blijadur eo atav diskar ur gouarnamant n'eus netra da c'hortoz digantañ, evel just, met pezh a zo da c'hounit gant ar c'hemm, setu ar gudenn.

Pezh a zo he liv da speredegzh hon amzer, an holl-zanvezouriezh an hini eo. N'eo ket evit anv un doue, n'eo ket evit o bro, n'eo ket evit o rezid eo ec'h emsav an dud; emsevel a reont evit an emann war o bara, evit goprou, ehanou-labour, priz ar gwinn pe hini ar patatez. Ha marteze n'eo ket ken dismagadus-se, pegwir en graont gant gred ha feiz. Daoust da eo e c'heller o c'hendrec'hif ez eus ganto ezhommoù arall, pezh a vez anvet gant ar gevredadourion an ezhommoù speredel; asantif a raint a-walc'h ez eo da v. ivez o sev- enif, gant ma vo bet sevenet da gentañ ar re all, ar re arboellerezhel; n'int ket dibouez tamm ebet e Bro-C'hall, ha n'eus ket ur gotezenn na lakafe ket e roll he goulennoù ur meneg bennak eus ar skolioù; nemet skolioù gall eo a c'houlennont, ha ne ve ket dezast o lakeat da anzav ez eus ganto tud a fell dezhe kaout skolioù dic'hallek. Bez' e c'hall kevrennoù breizhat ar c'hostezennoù gall (MRP, UNR, SFIO, PC, hag all) diskouez emaint a-du gant ar brezh-

oneg; da gredif eo ne vez nemet da flipañ mouz ar re a domm c'hoazh ouzh doareoù o bro. N'o deus avat c'hoant gwirion ebet da welout yezh ar stad dizarbennet gant ur yezh arall.

Ret eo sellet outo evel kannaded ar Stad c'hall, avel enebourion d'an emsav breizhat, o dizarbenn e pep lec'h hag e pep keñver, en ur anat-aat n'eus enno netra breizhat ha miret an harp a c'hell degas an emsav da skorañ ar strolladoù a zifenn, daoust war un dachenn re strizh, gwir ar Vrezhoned da vevañ evel tud : ar sindikadoù.

Gant ar sindikadoù eo emañ gwir gannadur ar bobl, ganto emañ an nerzh. Bez' ez eus bet ur mare ma stourme ar sindikadoù ouzh an implijerion; bremañ eo ouzh ar Stad emañ ganto ar stourm. Ewel n'eo bet aloubet gant homañ dre al lozennerezh gourverkadur feur ar goprou war varc'hallac'h al labour, o deus aloubet ourzhañ difennererezh ar gopr, diwallerezh al live-buhez, hini an dezont hag hini ar bremañ. En o c'herz emañ ar galloudegezhioù arboellerezhel pegwir ne heller ober netra hep o asant; barrek int da strobañ ha zoken da herzel buhez pemdezic ar vroad. Diwar emglev e c'hellont lakat skoilh da bep labour, dichafrañt an henterezh, troc'haf an tredan, an aezh, an dour zoken er c'harioù, ha lakeat an dud e nebaut amzer er stad o em gavent e koulz an naon bras.

Ar sindikadoù galloudekañ avat, re ar vicherourion int. Bihan eo niver ar vicherourion kenstrollet e Breizh er sindikadoù, hag evel ar c'hostezennoù politikel renet int a-zieball gant ar C'hallaoued; gall, hag edan darn ar gouarnamant gall emaint; ar poellgorioù "broadel" n'eo ket ouzh ezhommoù ar vicherourion vreizhat eo e vez talet pled, nemet ouzh an trouz a reont en o c'horn-bro. An trouz-se avat e vez tennet splot outañ neket evit mad ar Vrezhoned, met evit mad ar vicherourion eus an holl haks-agon; ma ne vez ket splot ar Vrezhoned kenglotaus gant hini ar vicherourion all n'eus ket da dermal : dizarbennet e vezint.

Ar sindikadoù gounidoù douar Vrezhon a c'hoarvez kemend-all ganto, dre ma'z int kevredet gant sindikadoù kourerion Vro-C'hall; a penn arak ar stourm emaint, nemet plegañ a ra an Ao. G.... eus Montroulez, da c'hoarvez emennont an Ao. L.... eus Bro-Arvern hag a zo edan kraban ar gouarnamant dre berzh an arc'hant deskoret dezhañ evit denc'hel e nevidoù arvarnat da vont en-dro; n'eus ket aon da gout e ve derost o gwir da Vreizh diwar goust an Arverned.

Krog eo renarion hor sindikadoù da veizout n'o deus gounid ebet da c'hortoz digant emsaviou m'emañ ar renerezh anezhe e daouarn tud estren. Derenet int hag e vezint da gas da bann taolioù tachennel en ur c'hronnañ war ul lec'h divizet poblañs holl al lec'h-se, ken kourerion, ken micherourion da zifenn ar re-mañ koulz hag ar re-se.

En talpadoù-se, daoust ha darnoc'h o fal, emañ egin an emsaviou broadel rik. O renarion eo e rankomp kennerzhañ, diskouez emaint war an hent derost o kemer o nerzh digant o fobl ha neket digant aotro an estren.

E-pad ur prentad mat e talc'hint da grediñ n'eo ket estrenion dezhe tud ar c'haz micher; ar skiant prentad dre ret avat o lako da veizout n'eo ket a-ere splet o buhez ouzh hini ar C'hallaoued, hag ez eo splatus zoken tremen hep bezañ Gallaoued. Dont a raint buan da asantif d'ar sturienn aour :

"Breizh da Vreizhiz", ha da zegas ar stoum war an dachenn-se.

Diasoc'h avat e vezo goude-se ha lakat anat e spored ar C'hallaoued. Degemeret da wir n'eus ket tu da dennañ tra diganto na dre gaer na dre heg, petra ober nemet tastornat, poulzañ war an eil tu ha bountañ war egile ?

Daoust ha gouidus e vefe sevel ur strollad broadel breizhat ? A dra sur, mat e ve reif d'ar stoum ur bersonelezh taeroc'h eget an hini a ziskouez, a-ratozh ha neket diwar aon moarvat, ar CELIB ha zoken ar MOB. Deut mat e ve, dion, gant an dud yaouank virvidik; ezhomm o deus obererezh, embr-egerezh, aberzherezh, arverañ o nerzh hag o c'hred. Pet int avat ?

Arabat ankounac'haat ez eo an niver alfenn bouezusaf ar gwerinrenerezh. Daoust hag ur strollad broadel a rafe berzh a-walc'h da gendolpaf un niver izili ha ne vefe ket fentus ober meneg anezhañ pa vefe kel a gannadurif ur rann merzhadus eus ar c'hedveno ? Lent eo an dud; aon o devo marteze emezelaf en ur strollad a vo maoc'h a daolioù da dapout ennañ eget a "legionoù d'honneur". Na brav e ve d'an enepbroadelourion diskleriañ n'eus ar strollad broadel met un toullad istrogalled ha farouelled, divarrek a-grenn da gannadurif youl ar bobl.

Ha penaos dedennañ tud dishefvel o menozioù, pa vez meneg a bolitikezezh, pa vez meneg a gommaf kerzhed ar bod, mar n'eus ket da ginnig dezhe ur gelennadurezh klok war genreizhadur ar bod ? Ha ma'z eus unan da ginnig dezhe gant piv, gant pet o vezo degemeret ? Gant pet all e vezo diarbennet ? N'eo ket dav lakat dizunvaniezh etre an dud war zigarez menozioù. Dav eo o strollañ en-dro d'ur mennad eun ha sklaer : BREIZH da Vreizhiz", hag o lakaat war an erv.

Moarvat ivez e vefe klasket semañ war choug ar strollad broadel c'hwitadennou an emsavioù sevenadurel. Aes e ve lakaat en e giriogezh, o kiriogezh un emzalc'h re daer ha diseven a-keñver ar vistri, an nac'hadennoù o devo bet, ha pedat lakaat e vezo war drugarez an douj o devo diskouezet hag o "emzalc'h azac'hañ" ar bruzunou a vo bet deskoret dezhe gant madelezh ar Stad C'hall.

Duzhpenn-se arabat ankounac'haat pegen garv ha ganas e sko ar bolis ouzh enebzerion ar gouarnamant; prim e vefe drastet ar pep gwellañ ois an emsav, arak bezañ graet labour efedus. Arak mont d'an abadenn eo dav sall-out pizh hag evezhiak ouzh an emgav.

Dav eo ivez gouzout mat petra skoazell a c'hell ar yezhkarourion, ar vroadelourion, degas da ne vevn pe emsav arall en emgann politikel.

Nag ar c'hostezennoù politikel, nag ar sindikadoù, na zoken an emsavioù sevenadurel, na blegint da anzav pouez kudenn ar vroadelezh nemet gant ma vo diskouezetnat eun ha groñs o youl gant ar vroadelourion.

Ha pa eveshaer mat pezh a ra diouer d'an Emsav eo ar benveg bruderezh. Un dreez eo ne dalvez ket nemeur ar yezh skrivet da venveg da skignañ menozioù, dre zicour a dud desket war al lenn brezhoneg. Ne c'heller ket gortoz e lakafe ar gouarnamant gall etre hon daouarn ur benveg galloudus evel ar skingomz pe ar skinwel. Skinerezed broadel ez eus e Bro-Gembre, an Iwerzhon, hag unan guzh e Bro-Alba; unan guzh e Breizh a rafe sur mat ul labour dreist. Da c'hortoz ez eus ar c'helaouennoù, an Avenir, ar Bretagne Réelle, Ar Vro, o kas endro ar stoum politikel. Dre zicour a arc'hant ez int ra hir-vareadus, re dileuret ivez marteze d'ar c'helaouennif dre veng-iadoù. A-bouez bras eo reif keloù war an tomm, komz diwar-benn an dud, diskouez pezh a ra ar renerion hag ar re all, mont da welout Etienne ha Pêr Denez, Gourvenneg hag ar Bihan, kemenn disparti ar rotarianed ha krouidigezh Breuriez ar pennadurezhioù breizhat gant an so. ar Gellig, sevel enklaskoù ha breutadegoù war arver ar yezh voutin en iliz her vez gourc'hemennou ar sened-iliz meur, sevel danevelloù. N'ouzer ket a-walc'h pegen frouezhus eo al labour sevennet gant an danevellourion ampert pa ouezont soubañ o fluenn el liv deraet.

N'eo ket din lavarout penaos e c'hellfe bout kresket gwared ar c'helaouennerezh er stoum politikel; diouiziek a-grenn on war meur a boent, ha gouzout a ran mat e reer pezh a c'hell bezañ graet pezh o oberadus.

Pezh a ra diouer, marteze eo an arc'hant, marteze an dud, marteze ur c'henreizhadur. Kaout a ra din, mar n'eo ket c'hoazh ar c'houlz da sevel ur strollad broadel, ez eo mall sevel ur poellgor kenurzhiañ, e gefridi kannadurif an holl vrezhonegerion dirak galloudezhioù ar Stad, dirak ked-veno an estren, dirak hini Breizhiz. Ret e vefe, ha marzout a ran pegen diaes e vo seveniñ seurt manoz, ret a vefe kannadurif ennañ kemant skourr eus an Emsav, ken broadelourion, ken rannvroelourion, ken sevenadurel, ha dreist-holl ar re yaouank. Er re yaouank e rad sapr, nerzh ha birvilh ar vro; ganto ha drezo eo e vo sevennet an dezo meur.

Breizh da Vreizhiz.

x

BREC'HED KERNE

A N E M S A V H A G A R Y E Z H

Ur mare zo bet, ur mare acour, hini Gwalarn, ma veze staget ar stourm evit saveteiñ ar brezhoneg ouzh ar stourm evit gwiriñ ar vro. Er mare-se, kazetennoù ar stourm politikel a grede er yezh evel sin hentoù ar vroadelouriezh. Echu eo siwazh ha distrujet a-youl-gaer an aergelc'h burzhudus a rae d'ar stourmerien wellañ war an tachenoù politikel selaou, ha skoazellañ dizehan stourmerien ar yezh. Echu. Echu.

Torret eo bet gant tud ar MOB ar chadenn hir, al liamm kreñv. An dud-se dianav dezho ar brezhoneg o deus douget d'ar vered un tamm eus ar spered broadel. Kiriek e vint dirak hor pobl. Tamall a ran anezho evit bezañ disprizet hor yezh ha lakaet anezhi er-maez eus an danv-cziou stourm.

Morse, avat, n'eo bet an Emsav brezhon en ur seurt stad truezus. Morse. Hag arabat eo dont da livañ deomp-ni, brogarourien, brezhonegerien, arguzennoù faos. Bcvet hon eus an dek pe daouzek bloavezhañ e Breizh-Izel a-youl-gaer pa vije bet asec'h mil gwech mont da n'eus forzh peseurt bro estren da vevañ disoursi kuit a gud-ennoù.

Rebechet 'z eus bet deomp bezañ chomet er gêr e-lec'h mont da heul an engroez biniaouus war ar straedoù da huchal "ar brezhoneg er skol". Sur, an dibunadeg-se zo bet un dra vat, met peseurt efed en deus bet ? Hag e-touez an dud veur-se, salverien-sul ar brezhoneg, pet anezho a vev bemdez-se, c'houlou e yezh e gavell ? Pet ? Peseurt yezh a gomz an dud-mañ ouzh o bugale ? Lennet hon eus zoken ur pennad e "La Bretagne à Paris" sinet gant un den brudet-tre evit ar mare e Breizh. Displegañ a rae e oa echu gant hor yezh e Breizh-Izel ha, na trist, kia ! ret oa bremañ evit klevout brezhoneg mont pell-tre e foñs ar maezioù don Ma! aes oa dezhañ peogwir n'eo ket eus an hailhoned vil-se desket ganto ar yezh en o oad gour, met er c'hontrol ur brezhoneg-er a-vihanik, aes oa dezhañ neketa kavout e yezh tost-tre outañ : en-dro d'an daol en e familh !! Kuit dezhañ redek war al laezhoù d'he c'hlevout c'hoazh.

Lennet hon eus kunujennoù ivez war an "Avenir". Eus hor yezh hag an dud a gred c'hoazh emni e veze graet goap. Piv 'ta en deus disoñjet istor ar bPloukistaned ? Hag ar paour kaerzh den lorc'hus ha dizek-se, kasoni divent ennañ ouzh pep tra brezhon, zo, sañset, "unan eus renerien vrasañ an Emsav" ! Ha trist neuze eo stad an emsav bleniet gant seurt tud. Pa glevan, emezañ, tud o komz brezhoneg pe o c'hwezhañ en ur biniou pe o tougen ur barv, e kavan an holl draoù-se mat da ziskar. Folklorajoù da skubañ kuit didruez. Ar yezh hag ar barv. Setu aze sur tamalloù resis !

Ar brasañ droug graet deomp stourmerien ar yezh abaoe dek vloaz zo deuet gant seurt emsaverien. Aes eo merzhout pegement eo en em silet soutil menoz didalvoudgezh ar yezh e-touez an dud. Un den evel Alan Heussaif da skouer a c'hell skrivañ ken sioul ha tra ne vo ket ret da renerien Breizh dieubet gouzout ar yezh diouzhtu ! (Ar Bed Keltiek, c'hwevrer 64). Spontet on gant seurt emzalc'h a-berzh un den hag a seblant bezañ ken taer evit difenn an Iwerzhoneg. Nemet emichañs eo trec'het spered hor c'henvroad gant ar pilpous-erezh a servij deomp hiziv "renerien vras" ar MOB.

Pell 'zo dija pa oa kaoz da sevel ar POB hon eus bet aze ur rannvroelour kozh distro eus Iwerzhon ha didamallet eus e vloavezhioù galeoù o frammañ dirazomp ar MOB da zont. Da bep hini eus an dud bodet eno oa fiziet ur garg nemet da unan eus ar baotred. Ha pa'z eo bet goulennet perak e

chome hennezh hep labour, mar plij klevit ar respont : "Ne c'hell ket an den-mañ kemer perzh er strollad nevez o sevel. Re "gomprometet" eo e Breizh. Sellet e vez outañ evel kannad Roparz Hemon amañ. Dajjerus eo. An den-mañ ne antreo ket er MOB." An den yaouank-mañ n'en doa ket bet amzer da vezañ kondaonet d'ar galeoù nemet gwallvrudet e oa dre stourm evit ar brezhoneg unvan ! En deiz-se, a gredan, am eus komprenet ar c'hoari.

Goude ar brezel diwezhañ hag a zo bet ivez ur rev-eulzi vras, rak d'e heul eo dihunet an holl bobloù-suj, e Breizh evel er broioù all, ez eus en em gavet un dormadig paotred yaouank flamm, paour raz, evit kregiñ er banniel diframmlaeret. Leun a feiz e oant, leun a fiziañs. Savet o deus war an dismantrou ur gazetenn bolitikel, un emsav zoken o deus bet ar galon da ziskleriañ. Diouzhtu kerkent avat e voe gwelet "tud varrek" o tont da ginnig kemer ar penn, rak ar re yaouank-se emezo n'int ket gouest da zont a-benn, dianav dezho ar politikerezh. Hag evel-se eo bet laeret labour kalonek ar bagadig paotred yaouank kar o bro hag o yezh o devoa savet "An Avel" hag "Avel an Trec'h". Rak er mare-se e oa stag-mat, stok ha stok kudenn ar yezh ouzh ar c'hudennoù politikel. Petra hon eus gounezet avat gant al laeroñsi-mañ ? Ha piv oar petra vije bet emsav Breizh hiziv an deiz bleniet gant seurt paotred ? E pep lec'h er bed a-vremañ, an holl emsaviou brogar o deus bet renerien yaouank dianav dezho sur-mat doareoù pilpous ar bolitikerien gozh, met uhel en o c'halonoù tan ar broadelerezh. Kontet e vo emichañs un deiz gant ar re o deus bevet an tamm-se eus istor hor bro penaos eo bet diskaret gant tud c'hoant dezho kaout ur garg hag arc'hant labour kalet ar rummad yaouank.

Ha koulskoude ma prederier war an diforc'h deuet e Breizh da heul an darvoudoù e komprenet diouzhtu c'hwitadenn ar MOB, rak, perak en em douellañ, ur c'hwitadenn eo hag unan vras. Ha kaer o deus ar renerien anezhañ klask krouiñ rannoù nevez dezho anvioù-badez disheñvel n'eo nemet un touell ouzhpenn. Rannet ha dirannet, ar MOB n'eo ket deuet a-benn da dizhout na kalon ar re gozh na spered ar re yaouank. Uhelvennad ebet. Ne gredan ket e vefe prest hini ebet eus e izili da vervel evitañ. Paotred B.A. zo marv evit o uhelvennad. Arabat disoñjal biken pal tud 'zo er MOB, kaout o digoll diouz an darvoudoù.

Ne oant ket broadelourien, met da heul ar freuzh hag ar reuz int ivez zo bet kemeret er stroñs. Kollet o deus pep tra. Ti, micher, arc'hant. Ret eo bet dezho en em guzhat, bevañ en harlu, gouzañv ya sur ! nemet evito an darvoudoù-se oa direizh a-grenn, peogwir ne oant ket emrenerien, tra ma voent evit ar gwir vrogarourien tre hervez lezenn ar c'hoari : kollet hon eus, paeañ a reomp. Hiziv avat e welomp deuet en-dro amañ ar rannvroelourien gozh-se o c'halon leun-tenn a c'hoant d'an digoll ...

Deuet int en-dro d'ar mare mat ma oa adframmet pep tra, adsavet kazetennoù da reifi' brud dezho, skoulmet darmpredoù e-leizh gant ar broioù bihan estren ha suj evel-domp; deuet int en-dro, hag adalek neuze hon eus gwelet pep tra o vont e bruzun.

Rak ganet oa e Breizh evel m'en deus skrivet Abanna en ur pennad dispar ha sklaer-tre, ganet oa er vro un den yaouank breizhat nevez. Ha petra oa c'hoazh boutin etre politikerien ar mare radikalour hag an den nevez breizhat ? Netra ! Perak neuze rediañ tud yaouank graet ganto o rev-eulzi diabarzh da sentiñ ouzh tudigoù deuet en-dro gant ur gurunenn n'eo ket dezho ? Mistri' ar Vrezhonez nevez zo Sohier pe Perrot, broadelourien marv, lazhet e feson pe feson evit ar vro, unan dindan ar bolodoù, egile evel un ejen-labour dinerzhet war an erv. Ha daoust hag an daoust-se o deus morse goulenmet bezañ gopret evit kas war-raok ar pezh a felle dezho seveniñ ? Daoust ha Sohier hag eñ Breizhuhelad en dije kredet chom hep komz hor yezh ha deskiñ anezhi d'e dud ? Petra 'ta eo ar garantezvro-se, ma n'eo ket gouest un den da aberzhañ dezhi un disterig eus e amzer hep bezañ paeet evit kement a ra ? Breizh a zo hor bro. Ni a zle pep tra d'hor bro. Breizh ne zle netra deomp.

Evit gwir d'ar mare m'eo bet savet ar MOB (dre labour, stourm evit ar brezhoneg. Peseurt skritur dibab evit bezañ sur da chom hep faziañ gant piv ez afe an trec'h ? Aze oa mañ ne oa gwall chalet gant ar paour kaezh brezhoneg, unvan pe skolveurek, o deus graet o soñj. Pilat gwechall ivez en doa graet e zibab. Chalet oant, lod anezho memes tra gant ar gor-se stok outo. A vare da vare pa zeue al lesk er gor da vezañ re boanius dezho e vije lennet kuzulioù fur da

zistanañ ar gouli. Evel-se hon eus bet "Un Evian qui doit réussir". Evit aozer ar pennad-mañ e oa aes-tre an diskoulm. N'en deus ket an aotrou-se gouzañvet kalet na bevet eurvezhioù kriz, n'eo ket bet stlapet e anv d'ar pevar avel na torret eus kargoù evit bezañ chomet feal d'un emglev sinet gant tud bet abaoe disleal d'o sinatarioù. Ha piv mar plij, ma n'eo ket renerien ar "Brezhoneg er Skol" a c'houlenne groñs unvanañ ar yezh ? Hag e pelec'h emaint bremañ lavarit din ar renerien-se nemet lod anezho e penn ar MOB ? Eus piv e reer goap ma n'eo ket eus stourmerien ar brezhoneg ? Hag evel-just, paotr an dour Evian war am eus komprenet goude en deus roet un anv brav ha brezhon kenan d'unan eus e vugale. Corrine eo bet anvet. Lennet hon eus avat war ar gelaouenn "Breiz" un dra konfortus-tre. Korentin krennet e vefe ar c'horrine-se ! Paour kaezh brezhoneg.

Ha setu ni bremañ gant strolladoù bihan, bruzunet a-ratozh kaer. Soñjit atav e kement-mañ : ar Radikaled gall, mistri gwirion hor rannvroelourion o deus kaset da benn ger stur ar Rouanez saoz Viktoria "Bruzunañ evit ren". Goulenne a ran avat, da biv e kas an doare-se an digoll ? Ha gortoz a ran e vefe prouet din en deus gounezet hor bro un draig bennak abaoe dek vloaz gant seurt oberiezh. Zoken war dachenn an arboellerezh e c'hortozan ur raktres ha pa na vefe nemet se. Paotr ar Rhône-Languedoc n'eo ket chomet da dreiñ mein da sec'hañ. Philippe Lamour a zo o sevel eus an dezerzh ur vro binvidik. Daoust hag-eñ e vo fazi ar Bloukistaned ivez mar deo aet ar maout gant an den-se.

Ar Bloukistaned-se, hag int un dornadig tud paour nac'het outo pep gwir, pep skoazell, o deus savet e dek vloaz ul labour a rafe enor d'ur Skol-Veur vras. Pep tra kaset ganto a-benn a zo deuet da vat. Ken mat avat ken e weler an dud "barrek-tre" o c'hoari o c'hokouged, o kemer an neizh tomm hag o teurel er-maez ar saverien. Gwir dud varrek. Nemet e soñjan en amzer foranet hag er boan evit adsevel, adarre, dizehan, a-lazh-korf. Hag ar goukouged, gant o milionoù (ar gest !), goude bezañ laeret labour ha menozioù, petra int gouest d'ober, nemet kas ar stal da get.

Dont a ra soñj din a-daol eus ar pennad euzhus bet embannet war "Breiz" da vare brezel "bras" an doare-skrivañ.

Goulennet hor boa ul lodennig eus an arc'hant evit reiñ levrioù d'hor bugale. Nac'het e voe ouzhomp arc'hant ar bobl vrezhon roet evit skoazellañ ar brezhoneg. Ha piv 'ta a nac'he se ouzhimp ? Piv ? Unan eus renerien ar Bleun-Brug mar plij. "N'o deus, emezañ dichek ha dichastre, nemet moulañ o levrioù o-unan evit an nebeud bugale a zo ganto. Ni n'hon eus ket arc'hant da deurel dre ar prenistri. Ni zo tud hag a gred en traoù efedus. Netra ! An dud-se n'ho devo ket ur gwenneg toull diganeomp". Mat ! Neuze hon eus klasket e-touez mignoned. Kavet hon eus tud vat o reiñ deomp arc'hant e fiziañs. Deuet omp a-benn da reiñ d'hor bugale levrioù dudius par d'al levrioù moulet er yezhoù all. Gwellet am eus avat an den dichek-se o tont da'm zi. Lavaret em eus dezhañ trugarez evit kement en doa skrivet. En anv ar vugale nemeto savet hiziv e Breizh e yezh hor bro, ar re nemeto na oant ket efedus. Ha mar en em lakfemp holl ni ar Bloukistaned da sevel roll ar vilonioù sot, an troioù-kamm, an heskinerezh lous hon eus gouzañvet e vefe graet ur pikol levr na gredfe den ar pezh a vefe displeget ennañ.

Huñvreet em eus alies en nerzh e vijemp bet holl a-gevret n'o dije an holl ac'hanomp kredet bevañ hervez o c'hredennoù. Penaos e fell deoc'h reiñ da grediñ d'ar bobloù bihan all, Flandreziz, Euskariz, Kembreiz, hon eus a-gevret ganto ur yezh da saveteiñ pa welont hor renerien (sañset) o genou leun gant ar galleg. Beajet em eus alies er broioù bihan. Kejet em eus ouzh renerien ar broioù-hont. An holl anezho a zouge testeni evit yezh o bro. Mezh, rostet em eus gant ar vezh o selaou frazennoù evel houmañ : "Va digarezit, ne gomzan ket brezhoneg". Nann, sur. Da betra en dije talvezet dezho deskiñ an trefod-se ? Hon tud varrek du-mañ n'o deus ket amzer da foraniñ gant seurt mibiliachoù diamzeret, kia ? Pe c'hounid 'ta va Doue a vefe evito ? O sur-mat, lod anezho o deus strivet da zeskiñ yezhoù estren peogwir o doa ezhomm gounit o buhez materiel adarre. Evit an arc'hant petra ne rafe ket mab-den ?

Skouer Flandreziz a gemeran. Heñvel eo bet o stad ouzh hini Breizh gant darvoudoù ar brezel. Int ivez o deus bet un emsav distrujet, rivinet, kaset da get. Adsavet int avat kreñvoc'h eget biskoazh. O, evel-just n'o deus ket bet a gudenn doare-skrivañ... Met zoken ma vije bet krouet dezho ar gouli flaerius-se gant o enebourien, biken n'o dije

asantet renerien ar Volksunie tevel war ar stourm da saveteiñ an izelvroeg. Lenn a reer en devezhioù-mañ war rak-tresoù ar strollad Embata, er penn kentañ-holl : "Hor yezh, an euskareg a zo yezh vroadel hor pobl". E pelec'h emañ e raktres ar MOB lec'h ar yezh vroadel ? Klaskit mat ... Kavet hoc'h eus ?... Ploukistan eo. Gant ar vezh !

C'hwi emsaverien vras ar bobloù kelt mar plij, troit ho selloù goapaus pell diouzhimp. Padraig Pearse, Saunders Lewis, c'hwi holl blenerien nevez ar strolladoù europat, na varmit ket ac'hanomp ouzh an dud paour-se a gomz hiziv e anv hor bro. Touellerien int. E Breizh hiziv ivez ez eus tud yaouank estreget er strolladoù a zo sañset, hervezo, "ar re bouezusañ er vro". E Breizh e vez kavet c'hoazh a drugarez Doue poadred ha merc'hed gouest da zeskiñ komz hor yezh disprizet. E Breizh warc'hoazh gant ar re yaouank mañ e vo skubet kuit an dud varrek war an diplomaterezh, war ar politikerezh, war an arboellerezh, war an dialektikerezh, war bep tra nemet war ar vroadelouriezh klok.

Skubet e vint evel delioù marv, c'hwez put hag un ac'henn greñv o sevel diouto.

Skubet e vint gant nerzhoù yac'h a welomp bemez dir-azomp. Tud yaouank dezho ur vro gant ur yezh c'hlan, ur spered nerzhiek.

Skubet e vint gant ar Breizhad Nevez. An den nevez o vale balc'h war an hent kazel-ha-kazel gant e vreurdeur "eus broioù all Europa". Ha trec'h ar broioù bihan-se a vo ivez trec'h ar Breizhad.

x

RIGAKOS

Y E Z H H A R E Z I O

"Al lavar a zo ar spered oc'h en em genaoc'h e-unan" a lavare Wilhelm von Humboldt. E gwirionez, hep arouezioù hag arouezioù arzel ne c'hell bezañ kealioù gwirion nag oberiantiz poelladel ebet. Anat eo. O lakaat al "Logik" e derou e genreizh, e tisplegas brassa usvedoniour ar Gornog, G.W.F. Hegel an hevelep pennwirionez hag ar yuzev aleksandrinat a skrivas "en derou edo al Logos" (daoust da hemañ da reñ d'ar ger-mañ un doare resisadur ha ne oa ket e-barzh ar menoziad platonadek). Kentelius meurbet eo ivez al lec'h dalc'het gant an Anv en oberiantiz speredel hen-bobloù donezonet-dreist war dachenn ar reiz evel Sumeriz hag Egiptiz : an Anv a dalvez kement hag anatadur tremen an Dra eus an Distummel d'ar Spisadurel, an Anv a zo dafar da gerzh al Logik.

Dirak an Diskouezataet e tle ar spered tennañ eus ar pezh a wel menoziadoù implijus evitañ, stummañ, urzhiañ ar bed diabarzh ma labouro warnañ peogwir e chomo stas diziraezus evitañ ar gwirvoud peuvoudek. Ac'halese talvoudegezh dispar ar stummidigezh arouezioù-se : rak pep strollad denel a c'hovelio hag a frammo e venvegiezh hervez luskoù donañ e askra.

An doare teolennañ roud an Diskouezataet a gaver e Sina a zo ar striv al loqikelañ evit plegañ anezhañ da lezennoù-framm ar spered; an

eeunañ eo eus ar c'henreizhadurioù : ur c'heal, ur soniad, un arouez. Da bep keal un anv, da lavarout eo ur ger, da bep ger un arouez. A-dra-sur e teuas d'en em ziskouez kenstrobadoù soniadouriel, arouezioù fonetikel, dre red natur an traoù denel ha n'int ket peurvoudel. Ne vezn, ar pennziavez a chom.

Bremañ, ur gwiriadur all a zo da ober : hervez ma lavare ivez Hegel, ar c'heal en hent, da lavarout eo ar Spered o tont er maez eus e stad logikel evit en em anavezout e unan a-dreuz fetisadur an Natur, a laka da ziwanañ, evit pezh a sell ouzh an danelezh meur a strollad en amzer hag en ec'honder. Pep sevenadur a zo ivez, hervez Hegel, an usvedoniour, un diskouezatadur eus ar c'heal, un dremm anezhañ hag hervez Antoine Meillet, ar yezhoniour, ez eo stag ouzh frammadur ar c'henelioù. Pep unanded yezhonial a zo un unanded a sevenadurezh da ziaser dezhi, a lavare Meillet : Hag anat eo ha prouet a-walc'h. Piv da skouer ne veiz ket an diforc'h etre an helleneg hag al latin, an hini kentañ adsked spered prederourien hag arzourien, en eil o kenglotañ ennañ ken splann santadur ar saverezh yezhadurel (nag ur marzh ar c'hevreadur latin !) hag hini a reas eus ar Romaned ar bobl-se a disavourien, soezien hentoù, lezennoù ha doareoù kabestraf ar re all.

Ur genel a zo evel un den : pep hini he deus he doare d'en em ziavaez-ñ hag aas eo gwelout petra a c'hoarvez pa gemer ur bobl yezh unan all : dalc'hmat e tistumm muioc'h pe nebutoc'h ar benveg n'eo ket bet goveliet ganti : reiñ e ra he merk dezhañ evel ma aoz unan ur boued estren hervez e c'hiz evit kavout anezhañ mat da vezañ debret. Hag an hevelep yezh amprestet gant kenelioù dishefvel, strolladoù sevenadurel dishefvel a gemero kel lies dremm ha ma'z eus amprestourien. Un darvoudenn hollek eo end-eeun : hefvel a c'hoarvez gant ar c'hevrezioù da skouer, daoust ma'z eo alies dalc'hmat start war ar re nevez kemmet o c'hredenn.

Ar speredoù sklav, ar re war o diskar a amprest avat en ur reiñ nebutoc'h-nebutañ a verk personal d'ar pezh a gemeront.

Gwelit pegen tuet a oa ar c'hallaoued e mare o galloudegezh brasaf ha skedusañ da zistresañ an anvioù estren evit reiñ dezho ar stumm hepken degemeret d'o blaz. E gre Louis XIV da skouer e vije bet komzet eus Mussolin ha n'eo ket Mussolini evel ma komzet eus Mazarin ha n'eo ket Mazarini. Er spered-se e roe ivez dalc'hmat Mevan Mordiern d'an anvioù estren an neuz ar geltiekaf. Ne lavaran ket avat e vije se en hon amzer eskemmoù etrevroadel founnusoc'h-founnusañ doareoù-ober da zerc'hel strizh ha mont a re, a gav din, M.M., re bell gant e hini. Hogen, ar gentel a dalv atav. Pelloc'h e lavarin petra a c'hellan soñjal diwar-benn emzalc'h ar speredoù sklaved a saotr ar yezh hep an disterañ ezhomm gant gerioù estren.

Dalc'homp c'hoazh dirak hon daoulagad penaos e kerzh ar yezh evel an hengoun e-doug ar c'hantvedoù, istor ar c'hevredad oc'h en em adskedif enno, penaos e van-klodus, haal ha klok ur yezh, dalc'hmat war ar c'hrouif, bleuñvidigezh fonnus evit ar strollad keit ha ma chom dizalc'h ha balc'h

ar politikerezh renet gant tud war hent mat ar ouenn, penaos ez a ar bobl mezhus ha dismegus evit he yezh en doare ma tiskouez ne c'hell padout houmañ nemet er stad buhezsuner ur yezh all pa ren politikerezh gwellhentadurel ar re a zo dezho speredoù lakizien kentoc'h eget speredoù pennoù dieub. Stad yezh ur genel a ziskouez tamz ha spered evel ar gwerezverker stad yec'hed un den : petra evit anataat splannoc'h displeberiezh ur vroad eget an dilez eus he yezh : er mare ma raed eus sultan Turkia "an Dan Klafv", e impaleriezh o vont a-dre e zaouarn tamm ha tamm, e oa aloubet muioc'h-mui an turkeg gant gerioù arabek ha persak ha ne oa brud ha bri nemet evit ar re a skrive ur yezh enni ar muiañ ma c'helled eus ar gerioù-se.

Gwelit an diforc'h etre annezidi ur vro aloubet hag a zalc'h d'o yezh dindan ar mac'homerezh hag ar re a gemer hini o mistri : ar re-mañ a ya a-berzh savadur speredel hollek o alouberien, ar re all a chomo dalc'hmat er-maez, staget ouzh an nor, marteze, hogen dirak an nor.

Ur strollad denel aroueziet mat a aoz, evit displegañ diavaezadur e veiz en ober dihan, ur benveg hag a zo eta "un droadenn istorel war d-tema bras denel al lavar".

N'eo ket hepken ar pennrummadoù logikel hag a c'hell gwiskañ un neuz dishefvel hervez ar yezhoù, meleziour speredoù ar gouennoù. Ur yezh a zo stummet evit un darn vat gant trivliadoù, fromoù, ha muioc'h c'hoazh marteze oc'h en em ziskouez en diforc'hioù etre luskoù pennañ ar strolladoù denel a tu santimantel o yezhoù.

Ar yezh a zo ivez eta evel un arz : ar maiz hag ar from o kenlabourat evit diavaezañ un dremm nevez d'ar rann-geal a zo eus ur ouenn : spered ken uhel hag haal an Helleniz a fonnas ur yezh, benveg evit displegañ dreist menozioù donañ ha kaerañ mab den, koulz hag un doare azeulva e zo tu all bleuniadur o spered dirak arvest an natur. Diouzh ar siell nemetañ roet gant ar c'heal meur e kerzh hag e krouidigezh treamzerel d'o spered ez eo neuz o nevedoù koulz hag hini o yezh, an tisavouriezh o vezañ splannañ arouez arzel ur ouenn. Zoken ez gwiskamantoù oc'h en em ziskouez hent anienel ur genel da genedusaat kinnig ar c'horfoù a kor an natur evel ma ra an evnad hag ar plant, ar pesked hag an dourioù. Koantoc'h ur Japanedez en he dilhad broadel eget e re ar standard hollvedel ha meurdezusoc'h e oa ur samouraï eget ur soudard e battledress ken hollvedel. Ewel-se ivez e klot goveliadur ur yezh gant ar c'han arzel liesdoare o seval e yaouankiz ur ouenn hag ur sevenadur. Arabat avelato chom hep ober an diforc'h o dalvoudegezhioù ! Mil gwec'h talvoudusoc'h eo ar yezh evel arouez eget an diskouezatadurioù all.

Ar yezh a zo benveg ha diazez ar sevenadur; gwalus eo ivez dre he stabilder, kemmef a ra kalz muioc'h yezhoù ar c'henelioù gouez pe zamc'houez; re ar vorianed da skouer a zeu alies da vezañ diveizus e daou rummad; koun a zalc'h an eus un diviz tenn ha poanuis etre an Dli Lilius Hornburger hag ur morian yaouank e ne ouezan ket pe c'hoazh desket en he yaouankiz

gant an dimezell vat, misionerezh protestant d'ar mare-se, ha na oa anavezet ken ar stumm se a lavare ar paotr nemet gant tud kerañ ar meuriad. Tra n'eo chomet an helleneg bremañ tost kenaf c'hoazh d'an henhelleneg, kalz muio'h zoken eget ar yezhoù romanek d'al latin.

Darnoù talvoudusaf ar C'heal (fatisadegezh al Logik e, stumm an Natur -speredel ha speredel - en doare diavaezadur Hegel), ar re binvidikaf ha sklerijennusaf a zo ivez ar padusaf. An nerzh a bad hag ar gened. Ur ouenn e dle kaout an nerzh hag ar gened hag he sevenadur a bado neuze. Dilez ar yezh a sko dalc'hmat ur gwall daol gant ar vroadelezh. N'eus forzh penaos ur gonnad tud o komz ur yezh disheñvel diouzh hini o alouberien a sant e doare pe zoara ez eus un diforc'h etrezañ hag int. Komz a rin e lec'h all eus politikerezh reuzeudik a-walc'h duged hag uhelidi Breizh. Gant gwall nebeut a ezevedoù, na c'hellant ken an em santout ken pell diouzh ar C'hallaouad ha diouzh ar Saozon dre ma vagant o spered gant kultur ar re gentañ, ar galleg o vezaf ar benveg e stok ouzh displegadoù ar vuhez. Gouzout a ran ervat ez eus bet brogarourien entanet a-touez kenelioù kollet ganto o yezh, n'eo ket dav menegif skouerioù, mouezh ar ouenn a zalc'h e lod a-anep an holl zairvoudoù kontrol; hogen gouzout a ran denoc'h c'hoazh ez eo gwir ar pezh emeon o paouez lavarout. Ne welan ket, ne welan tamm ebet ur Verking-etorix, ur Hermann romanekaat endro. Dilez an doueed gouennel zoken na ra vat ebet da gandalc'h ur yezh : ar re a zalc'has penn betek an diwobh e Galia a oa an drouizet hag evit ar re a zo ken tuat da chom astennet o genou dirak ar Yuzevien, e venegin - daoust din da vezaf hep an disterf c'hoant da gemerout ar re-mañ da skouer e nep doare - eo chomet start divrall ha unmaenek enno, e pevar avel an Diaspora, spered ar ouenn, hini o galvidigezh gant o doue ha, da vihanañ e-touez o beleien, implij ar yezh; e-touez an holl ivez, implij an anvioù hebrek (dindan ar raganvioù kristen kemeret dre ret) hag ar padennoù hebrek. Stag ha peg un dra ouzh ar re all ken ma'z eo bet adkroget en un taol gant ar yezh gant pep hini pa o deus en em gavet ar Yuzevien en o rezid en Israel, en un taol ken aes ha tra. Keit ha ma talc'h ur bobl aloubet d'an doareoù aozet, a-gevret gant ar yezh, gant spered ar ouenn, e talc'h d'he yezh; dilezet avat doare anienel ar ouenn da reiñ un dremm denel da Rin meur an Tu-hont, ez a goustad pe vuan an doare d'en em zlavoezañ ganet gantañ, ar yezh da get dirak an doareoù estren. Ha n'eo ket ar strivoù, ranngalonus a-walc'h, graet bremañ ma ren ul lusk krefv davet ar vroadalouriezh, a c'hello dislavarout ac'hanon. Aet eo yezh ar C'halianed gant o doueed, arouezioù nerzhioù ha kaerderioù ar Vuhez a gaver e krevezioù an holl c'hronnadoù denel e krefvder balc'h o yaouankiz, arouezioù ivez perzhioù anienel ar ouenn, o vleniañ uhel he bale war-du ar Galloud.

An traoù o vezaf forzh penaos ar pezh a vezont, e ranker sellout ouzh stad hor brezhoneg hon eus holl da zifenn er-maez eus an emzalc'hioù disheñvel war dachenn ar brodarouriezh, ar politikerezh pe ar gravez, a-hend-all n'eus

nemet an dioded, an demokrated, an Amerikaned, o klask lakaat an holl da gaout an hevellep menozioù hag int. Ra venegin Antisthenes ar C'hunik o lavarout pa gleve war-lerc'h un tamm prezegann an holl o kavout dreist e zieplegadenn : "Petra bennak sot a-walc'h em eus gallet lavarout ?" Ha diouzh an tu all nend eus da c'harval nemet ar re emskiantek a-walc'h, enno mouezh o gouenn hag o gwad, a venn komz brezhoneg peogwir int tonket d'hen ober gant an diskuliadur savet er c'henstrollad speredel a zo hini o buhez bremañ.

Ur wech c'hoazh ar gudenn pennañ eo houmañ : arabat eo klask oberiañ dindan levezon ar pezh a anver "brezhoneg ar bobl". Daoust hag ez eus da heuliañ tud a re foutre kaer war ar yezh a gomzont c'hoazh pa ne c'hellont ket ober a-hend-all ? Hag ouzhpenn n'eo ket ur yezh ken a zeu ganto, hogen diouzh un tu, teodyezhoù ma ne chom enno nemet ar gerioù a re ar worin, ar gouerien dreist-holl ganto (ac'halese pleg an dud desketoc'h en o skridoù, da glokaat gant gerioù gallek, hag int ken digas hag ar re all) ha diouzh an tu all, ur mestarac'h gallekaat, disleberet, pleget ken aes ha tra - pet gwec'h em eus merzet an dra-se - da vostarachoù gwashoc'h c'hoazh ! Rak pa ziviz daou zen etrezo n'eo ket an hini a re gant gerioù gallek e-lec'h gerioù brezhonek a gemero skouer digant an hini a zalc'h c'hoazh d'ar gerioù brezhonek hogen, haos atav, an eneb eo a vo. Ha n'eus ket da souezhif : dalc'hmat an hevellep abeg : ar c'henbleg izelder, ar c'handreac'h don ez eo ar galleg ar yezh a sevenadurezh, a gultur, an dazont hag an tu d'en em ran ha d'en em zibab ar vuhez. Emzalc'h an dud trec'het, ar bobloù faezhet, ar gouennoù klavv. Kiriak ha kiriak bras eo bet dalc'herien naturel ar yezh, an hengoun hag holl vadoù hon herozh speredel ha danvezel, an uhelidi, ar re a zloc bezañ an existekatalezh, tud arallouenn hag arallyezh re abred, siwazh, ar gloer ivez, estron pe estrenekaat o spered, a gemaras lec'h an drouizet, ha da haul ar vourc'hizien hag ar rankadoù etre. Ne fieier ket buhez ha dazont ar yezh er werin. Arabat bezañ dall pe glask en em douellañ : ne dalv ket ker-ker hon herozh lennegel : levrion a "zevosion" muio'h e c'halleget eget a vrezhoneg enno, hep tra divoutin, dravezadurioù obarennoù gall, pennoberenn ebet a-hed ar c'hantvedoù, hep zoken, merk splann an distervez, ur romant a garantez talvoudek, hep an disterf dastumad prederidennnoù a-bouez. Daoust hag an hon hanvrezhoneg ez eus bet doareoù Meuzvojen Kouv'houlin pa hini Siegfried pe un Tristan hag Izold all, aet da goll ? Testannoù rezid hor c'heltegezh, flammer kalon hor gouenn ha krefvder diaez hor spered ? Hol lizhiri a uhelder ? Kredomp ez eus bet hag e c'halle bezañ d'ar mare tra ma ne c'halle ket ken goude dre ma troe kein muio'h-mui frammatarioù naturel hor c'hanel d'o orin ha da c'halvidigezh o gwad.

Neuze, tizhet gant ar re chomet feal e-pad keit-all d'o yezh an derez diwezhañ an disleber hag an distres n'eus ken da ober nemet ober a

dra sur hor mad eus ar pezh a zo da gemerout c'hoazh e yezh ar bobl ha bez' ez eus ha kalz zoken. Hogen ar pezh a savan a-enep eo ar follentez da glask skrivañ evit an dud a gomz ar mastarzh bremañ. Ne gaver den, e-touez ar vrezhonegerien dizek war o yezh, gouest da lenn ur peñnad lennegel boutin, gouest zoken da zougen un diviz en hevelep doare yezh.

Ar rann a zo klok endeo etre dilerc'hioù ar brezhoneg dibennet e-pad kantvedoù hag an hini nemetañ a dalv en anv a yezh, hini ar re a venn en diwezh talvezout d'ar pennoù ganas dilezidigezh o banveg naturel ha stummañ bremañ un dibab-tud nevez gouest pa vo deuet ar mare, da adlakaat ar worin da gomz ur brezhoneg hag a vo unan gwirion.

Ar re-se ne reont ket da gredif ne c'hell ar brezhoneg bezañ nemet gant herp ar geriadur gallek. Ar re-se a dro kein da roudoù ha dilerc'hioù ar sklavelezh, ar foran, an dic'houzvezded, al levezon estren hag ar gwander dirazi, hag ivez trubarderezh darn eus ar vlenierien. Fallout a ra dezho glanaet an aergelc'h, krouiñ an hini nevez a adstago Breizh speredel ouzh hini ar marvioù emledañ ma c'helled gortoz ur vluavvidigezh lennegel paot, fonnus, hael ha kaer, avel hini ur genel dioub, balc'h, taer ha dibleg, al lennegezh c'hlan ha dic'hallekaat a-greñn na zeu nemet bremañ hogen a zeu bremañ, graet hec'h hent gant glanaerien ar yezh ar c'hantved diwezhañ, deroù ar c'hantved-mañ hag o heulierien.

Mibiliusoc'h emzalc'h eget hini ar re a gav dezho e sachint tud war-du ar brezhoneg dre ma saotrint anezhañ o tostaat ouzh trefodachoù ha mastarchoù an dud dizek ha digas a-grunn, ne c'haller ket, ne c'haller ket kavout.

Ne zedennint ket un den e-touez ar re-mañ hag heugif a reont ar vrogarourien a venn bezañ muic'h-mui Kelted ha Breizhiz penn-kil-ha-troad. Mar ne deo ket gwir an dra-mañ, perak mar plij eo aet da netra an holl gazetennouigoù hag embannadurioù skrivet en ur brezhoneg hogos ken lennus d'ur Gall ha ma vije d'ur bugel desket hepken o brezhoneg mat ha glan hag a oa gwerzhzet puilh war ar maer e-pad keit-all ? Hag ar prezegennoù ? Hag ar c'hatekiz ? Piv ha petra a vir ouzh ar gerent da zerc'hel o bugale feal d'ar boaz lenn ha komz ar yezh-se ? Petra ? Ur wach c'hoazh : digastad an dud abafet ha diamskiantek na reont gant o yezh nemet dre ma ne c'hallent ket ober a-hend-all ha na hetont nemet un dra : lakaat o bugale da sevel dra zeskif anezho e galleg. Atav, atav : ar spered sklav, ar spered tud trec'het ha dreist-holl tud dibennet speredel dre zilez o dibaboù, o sterna-ataerien. Ar werin a heuilh, a heuilh gant dala. Heuilhañ a raio c'hoazh pa vo adsavet stad hor yezh Vreizh gant tud hep treuzvarc'had.

* * *
*

Echu oa ar pennañ-mañ p'am eus lennet hini Roparz Hemon "Ur yezh c'hlan" er Bed Keltiek, niv. 64. Danevell resis ha start un den hag a anavez dre ar munud an danvez ma komz diwar e benn. Ne rin emañ eta nemet un evezhiadenn pe gentoc'h ne rin nemet tennañ an heulioù eus ur c'hefver-iadur a ra, e stumm ur vertezadenn darnel etre ar pezh a c'hoarvezas e Bro-Saoz gant ar yezhoù war lorc'h alcubadeg an enezenn gant an Normaned c'hallegerien hag ar pezh a c'hellje bazañ c'hoarvezet an ur Vreizh dieub ma "vije bet degemeret ar brezhoneg da yezh ar stad er 16vet pe 17vet kantved", ar yezh o vezañ endeo leuniet a c'helioù gallek. Ha Roparz Hemon a lavar : "Hep arvar ebet ne vije bet graet netra da argas an elfonnoù romanek kennebeut" (kennebeut hag e Bro-Saoz pa voe stummet da vat ar meskañ saoz-norman - romanek eta - daat da vezañ ar saozneg). Siwazh, siwazh bras, ken diarvar eo da bep den fur ar varnadenn-se, ken nabeut lorc'hekaus evid-omp. Rak un dra a zo, hag un dra a bouez bras, da lavarout ouzhpenn hag a laka ac'hanomp da chom mantret ha mezhek : daou dezmen er c'hefveriadur a ya a-enep an sil d'egile : ar c'hallegerien alouber ne zadjont ket a-benn da lakaat o yezh da vougañ ar saozneg en-dro dezho, kamm bras avat e tigasjont e geriadur ar Saozon dre leuniañ anezhañ gant ur barn eus o gerioù romanek. Ar muiañ a oa ar gwellañ avito, an drec'herien. E Breizh ar goulekadur avat, ar renerien o chom hep stoum ouzh al levezon estren a vije chomet - ha chomet e vijent, avel ma anavezet anezho - dall ouzh ar wirionez esun-mañ : ar muiañ a c'helioù romanek a oa ar fallañ. Atav emacomp eta direk an hevelep merzedur : emzalc'h trec'hidi. Pa heulier an drec'hidi a vezer trec'het ivez. Hag an dra-mañ en deus santet o donañ neudennoù o askre keltiek adsaverien ar yezh an XIXvet hag an XXvet kantved : e oa tremen poent reif d'ar brezhoneg an dremm en dija dleat derc'hel evel m'en deus graet ar c'hembraeg da skouer, miret gant an dibaboù-tud; ar stoum diwezhañ eo, ha pa weler e striv dibabuez ar c'hremadegourien e'hall da zifenn glander o geriadur, ha dezho ur yezh ken diazozet mat e pep kefver, n'eo ket deomp moarvat gant hor brezhoneg ken gwallgasat e-pad kantvedoù, hogos kallet gant ar bobl hini, da gemerout un emzalc'h dishefvel diouzh o hini. Evidon, pa welin ar C'halleoued oc'h ober en o vevh gant gerioù brezhonek e rin em hini gant gerioù gallek. Mar n'en deus ket ar C'halleoued emzalc'h kleskerien bara pe glaskerien gerioù, n'eo ket deomp da gacout muic'h.

Ha, pezh a zo gwashoc'h, n'eo ket, pe ken nabeut, hol lennegezh ul lennegezh vroadel : ne gaver enni meurzanaveall ebet o kanañ kurioù harozed, ar ouenn hag ar vroad. Zoken an hevelep yezh, ken gallekaat ha d'ar boaz, mar bije bet savet c'hoazh un obezenn dibar gant danvez Breizh a lec'h kenglotadurioù gouler evel "Ar pevar mab Hemon" oc'h anataat dalc'hmat an dalc'h kulturel hag an hevelep hini, mar bije an em gavet c'hoazh tud da dravezañ mat pe fall oberennoù lennegezhioù estreget an hini c'hallek !

D a n v e z s t u d i

War ur c'hraf a c'heriadurezh eo savet ar studienn-mañ. Diuzet un nebeut ezhommou-yezhañ, - envel ar pevar jedadur, - ez imboure'her penaos ez emdroas ar c'heriadurezh en o c'heñver. Diwar vont, e striver da zigejañ un dornadig reolennou a c'helle talvezout da-c'houde war dachenn an ober.

Daouzek geriadur pe c'heriaoueg a zo bet kemeret da ziazezañ anaoudegezh ar stummoù istorel. Setu ar roll anezho hag ar berradurioù boaziet evit o menegiñ :

Dictionnaire François-Breton (...) par Monsieur l'A***, Leide, 1744	L'Arm-
Dictionnaire Français-Celtique (...) par le P. F. Grégoire de Rostrenen (embannadur kentañ e 1732), adembannadur Guingamp, 1834	GREg.
Dictionnaire Français-Breton de Le Gonidec, Saint-Brieuc, 1847	GON.FB.
Nouveau Dictionnaire pratique Français et Breton (...) par A.Troude, Brest, 1869	TDE.FB69.
Supplément (...) au Dictionnaire (...) du Colonel A.Troude par J.Moal, Landerneau, 1890	MOA.
Roll-giriou ar Jabadao, Breuniez Deskedourien-Vrezonkerien Paris, Paris, 1903	JABA.
Vocabulaire Français-Breton de Le Gonidec, nouvelle édition (...) par Fr.Vallée, Saint-Brieuc, 1919	VALL.19.
Grand Dictionnaire Français-Breton, par François Vallée, Rennes, 1931	VALL.31.
Mentoniez, C.L.Kerjean, Gwalarn, Brest, 1934	CLKJ.
Supplément au Grand Dictionnaire Français-Breton, F.Vallée, La Baule, 1948	VALL.SUP.
Dictionnaire Français-Breton, Roparz Hemon, La Baule, 1950	ROHE.FB.50.
Dafar 63 evit ar Geriadur Broadel, Châteaulin, 1964	DAGB.63.

Testenioù a zo aze war emdroadur ar yezh e-doug ouzhpenn daou c'hant vloaz. Testenioù diglok hag untuek. Diglok, rak neb a sav geriadur pe c'heriaoueg a lez bapred er-maez da heul dibab pe

dic'houzout un toullad mat a dermenoù. Untuek : gwar-disgwar melezourioù ar c'heriadurezh, ha mui pe vui sturvezhour e vez atav pep geriadurour. Dav 'vo deomp asantif da hevelep sioù, hep o ankouaat evit-se.

H e n t e n n o ù s t u d i

Kentañ tra a reomp eo dastum ar gerioù diwanet da geñver un ezhomm-yezhañ resis, lakaomp an ezhomm bastet dezhañ e galleg gant ar ger ADDITION.

Ur gudennig a dermenadurezh a zo da gomezañ kent kregiñ. Dec'heriañ a vo graet eus hevelep diwanañ gerioù da geñver un ezhomm-yezhañ. Ar ger, ha dre vras ar stumm geriel diwanet evel-se a zo un dec'heriad. Daou c'her, ha dre vras daou stumm geriel diwanet da geñver un hevelep ezhomm-yezhañ a zo enta kendec'heriat (en anv-gwan), kendec'heriadoù (en anv-kadarn). Mat eo merkañ an diforc'h etre ger, ster diouz un tu, ezhomm-yezhañ, dec'heriad diouz an tu all ? Dougen ster a ra ar gerioù; an ezhomm-yezhañ avat a lak ar yezh "dougeres", un dougen gerioù eo an dec'heriañ. Gant ar pezh a zo dec'heriet, gant an dec'heried en deus koulskoude da welout ar ster : lakaomp ur bugel o verzout al liv ruz evit ar wezh kentañ; an ezhomm-yezhañ en gwask neuze a gavo e zisoc'h gant ezteurel ar ger "ruz"; adalek ar mare-se en em gavo an dec'heried (merzadur ar ruz) hag ar ster (eus ar ger "ruz") un heñveltra, e keñverioù 'zo da nebeutañ.

Kemeromp enta roll kendec'heriadoù brezhonek ar galleg ADDITION.

L'Arm-	crissance.
GREg.	cresqanz, laquidiguez a nevez.
GON.FB.	strôbad, stroll, strollad.
TDE.FB69.	kresk.
MOA.	-
JABA.	strobad.
VALL.19.	strolladur.
VALL.31.	daspugnadur.
CLKJ.	kenstroll.
VALL.SUP.	holladur, kontadur.
ROHE.FB.50.	daspugnadur, kendaspugn.
DAGB.63.	sammadur.

Kentañ evezhiadenn eo ez eus trizek stumm brezhonek kendec'heriat d'ar galleg ADDITION. Perak kement-all a stummoù implijet, - kinniget da nebeutañ, - e korf daou c'hant vloaz ? Perak ne

dizhas ket stumm pe stumm da wriziennañ da vat ?

Moarvat ne oa ket un ezhomm-yezhañ gwaskus o rediañ ar yezherion d'ober o dibab. Tu a zo da grediañ zoken e voe divizet war an taol gant oberourion ar geriadurioù gallek-brezhonek lakaat ar gerioù crisscance, h.a., dirak ar ger ADDITION, anez-se e vije manet goullou ar plas. N'eo ket e vije bet dianav ar sammañ niveroù e Breizh, nemet netra n'hon laka da grediañ e oa lakaet un anv war ar jedadur-se : er skol e vez desket seurt anvioù, ha diskol e veze an dud en o yezh. Pa jedent e raent moarvat gant troioù-lavar e-giz-mañ : tri skoed, lakaet gant pemp skoed, a zo eizh skoed. Graet an taol-jediñ, n'o devoa ket ezhomm lakaat un anv warnañ. An oberoù nann-yezhele eo o devez ar muiañ chañs da vezañ dec'heriet bepred : debriñ, dihaniñ, sevel; an oberoù yezhele dre natur, jediñ, soñjal, a vez ar muiañ en arvar da chom dizec'her, da goll o dec'heriadur pa goll ar yezherion an tu hag an dro da brederiañ, pa baoura ar yezh, - hag e gwir, n'eus nemet sellout ouzh ar gerioù jediñ, soñjal, h.a., end-eeun evit merzout e voe kollet o c'hendeo'heriadoù breizhek-rik da vare diskar hor yezh. Lavarout a c'heller enta e kaver ar ger ADDITION er geriadurioù brezhonek betek an 20vet kantved, hepken dre an abeg ma voe diskrivet ar geriadurioù-se diwar geriadurioù gallek : ne oa dezho par ebet e teod-yezh ar werin, o vezañ ma n'he devoa ket ar werin ezhomm anezho. Ar gerioù brezhonek a gaver enta en hor geriadurioù evel kendeo'heriadoù ar galleg ADDITION a dle bezañ an holl anezho krouidigezhioù geriadurourion. Alese o diseurtiezh.

N'eo ket a-walc'h evelkent lakaat e penn-kont o orin geriadur-urel evit displegañ o diseurtiezh. Pa reer ur geriadur e tiskriver peurliesañ an darnvuiañ eus ar gerioù, boas pe divoas, azas pe diazas, a gaver er geriadurioù kent. Evit dilezel ur ger e ranker bezañ e gavet fall-put, pe c'hoazh bezañ diskoachet unan mat ur bam da lakaat en e lec'h. Daoust dezhañ pe a-youl-kaer e vez rediet ar savour geriadurioù da varn ha da briziañ talvoudegezh gerioù ar yezh emañ o taolennañ. Er c'heñver-se ec'h en em gav dirak ar gerioù gant un emzalc'h heñvel ouzh hini ar yezher boutin, marteze gant brasoc'h gourdonerezh eget ar yezher boutin, hogen o klask

diazezañ an dibab gerioù war abegoù heñvel-mik ouzh ar re a c'hoari, gant rat pe get, en empenn ar yezher boutin. Petra a ra neuze e vez "mat" pe "fall" ur ger ? Pe abegoù a c'hell lakaat ur yezher, - hag ur geriadurour, - da zegemerout pe da argas ur ger ?

Abeg ar boziadur eo moarvat an hini kreñvañ. Ur ger boaziet abaoe kantvedoù a vo boaziet c'hoazh, goude bezañ en e enep meur a dech hag a rebech. Ar ger muzul, hag eñ estren a orin, a zo bremañ gwriziennet mat en hor yezh.

Padal, termenoù a greded broelet da vat a vez a-greiz-holl lakaat an hu warno hag o argaser en anv ar c'hlan-yezhgezh. Ar ger liberte, evitañ da vezañ bet en hor geriadurioù e-pad 500 vloaz, ne gredfe mui den ober gantañ en e skridoù hiziv an deiz.

An daou rumm abegoù-mañ, o tennañ a eil da voziadur ar gerioù, egile d'o orin istorel, a reer anezho an abegoù tonkadel.

Mar kemerer an eil gerien roet gant GREg : laquidiguez a nevez, e weler ez eo hir, liesgeriek, diaes da embreger ha da zeverañ. Anat ne oa ket ganti chañs vras da vevañ.

Ouzhpenn bezañ aes da embreger ha da zistagañ e tle ur ger bezañ aes da ziforc'hañ dre e son; un aridennad stummoù heñvelson ha damheñvelson evel gwez (struzh), gwez (neuz), gouez (gouzout), gouez (dizoñv), a zo hegasus d'ar yezherion, gwazh a-se d'an eil elfenn anezhi, aet divoas.

An eil abegoù-se, o tennañ da embregadusted ar gerioù ha d'o diheñvelsonded a renker e-touezh an abegoù stummadel.

Mar ne dle ket bezañ forc'hellek ar ger evel stummad, ez eo heñvel gont gant ar ger evel dec'heriad; da lavarout eo, ne dle ket dec'heriañ daou dra o deus da chom diforc'h. Da skouer, ez eus daou zec'heried d'ar ger creggancez gant GREg., pa en laka da gendec'heriad d'ar galleg ADDITION ha MULTIPLICATION war un dro.

Abegoù da gavout mat pe fall-ur ger a zo ivez en doare ma tec'her e zec'heried. Seul welloc'h e vo ar ger ma arouezio klokoc'h e zec'heried, ma eztaolo dre e framm hag e "livioù" framm ha "livioù" e zec'heried; mat eo da skouer er c'heñver-se ar ger

treuzvegenn pan deo an dreuzvegenn ar regenn o treuziñ ul liestueg eus ur beg d'un all. Klotadur an dec'heriad gant e zec'heried, pe resisoc'h, kevazaster an dec'heriad ouzh e zec'heried a reer ungerel pa lakaer e penn-kont ur ger hepken.

Anv a reer eus kevazaster kengerel pa ziskouez gerioù kenetrezo keñverioù heñvel ouzh ar c'heñverioù a zo etre o dec'heriedoù, pe resisoc'h, pa zec'har ar c'heñverioù-stumm etrezo ar c'heñverioù-ster a zo etre o dec'heriedoù. Kemeromp da skouer ar reizhiad o tennañ d'an egor : regenn, regad, h.a., gorreenn, gorread, h.a., ec'honenn, ec'honad, h.a. Pep hini eus an tri c'houblad a ziskouez klotadurioù gant an daou all diwar-bouez ar gourfenoù -enn, -ad; pep elfenn eus pep koulblad a glot ivez gant eben dre he bonad : reg-, orre-, ec'hon-. Mar studier ar c'hwec'h dec'heried eus ar c'hwec'h ger-mañ, e stader emañ ar c'heñverioù-anien etrezo dres evel ma'z int aroueziet gant ar c'hwec'h ger, pep keñver-stumm o tec'heriañ ur c'heñver-anien hag eñ bepred hag eñ hepken.

Ar skouer emamp o paouez menegiñ a laka war-wel ur c'hevazaster kengerel diazezet war ar gerdarzhadur, ar c'hlotadurioù etre ar gerioù o vezañ skoulmet diwar-bouez elfennoù-yezh dija hiniennast, dija strizhkefridiet evel dec'heriadoù : unvezioù gerdarzhel ez eo ar reg- a gaver e regenn hag e regad, an -enn a gaver e regenn hag e gorreenn. Setu perak e reer eus seurt kevazaster ar c'hevazaster kengerel gerdarzhel. E enebiiñ a reer ouzh un doaread all a glotadurioù etre ar stummoù na deo dleour eus netra d'ar gerdarzhadur ha koulskoude en devez ur roll pouezus en emdroadur ar yezhoù. Meneg a reer emañ eus ar c'heñverioù-stumm diazezet war framdamadur ar sonioù a ya d'ober ur ger; n'eo ket hep abeg o tennañ d'ar sonframdamadur mar deo diwanet an eilstumm a-us d'an adverb a-uc'h, o klokaat e-se ez-stummadel ar reizhiad dec'heried-dec'heriad a-is, a-us. Hevelep kevazaster kengerel sonframnel a c'hell ivez pleustriiñ, ken dichastre ha tra, hentoù ar gerdarzhadur, evel ma weler gant an daouad diabarzh, diavaez. Ken e vez tu da sellout ar c'hevazaster gerdarzhel evel un degouezh eus ar c'hevazaster sonframnel.

Amañ dindan e tastumer en un daolenn an abegoù diseurt a c'hell levezonañ priziadur sturvezhoural ur ger (e penn al linenn, ar berradurioù boaziet d'o menegiñ) :

ABEGOU TONKADEL	{ boaziadur	Tbo
	{ glanyezhegzh	Tgl
ABEGOU STUMMADEL	{ embregadusted	Sem
	{ diheñvelsonded	Sds
ABEGOU DEC'HERIADEL	{ diforc'hellegezh	Ddd
	{ kevazaster ungerel	Dku
	{ kevazaster kengerel gerdarzhel	Dkdd
	{ kevazaster kengerel sonframnel	Dkks

Divizet ez eus bet ober gant ar berradurioù-mañ dre lakaat war o lerc'h an arouez + da venegiñ bezañs ar perzh aroueziet, an arouez 0 da venegiñ an ezvezañs anezhañ pe an douetañs warnañ, an arouez - da venegiñ bezañs ar perzh kontrol. Da skouer, e vo aroueziet crisscance evel-henn : Ddd - o vezañ ma ro dezhañ L'Arm-an daou zec'heriad : ADDITION ha MULTIPLICATION war un dro; laquidiguez a nevez a arouezior Sem - en abeg d'e zembregadusted; kendaspuam a arouezior Dku - en abeg d'an elfennoù dreistezhomm ken- d- as- hag ivez Dkdd 0 o vezañ ma ne gaver klotadur ebet dre ar ster etre kendaspuam hag anv ar jedadur keñverek kinniget gant ROHE.FB.50., diskontadur, ha kennebeut-all a glotadur sonframnel, alese ivez an arouez Dkks 0.

Anat eo e vez rouez-kenan ar gerioù aroueziet + e pep keñver. Alies ne gaver nemet daou pe dri + en holl, en o zouezh Tbo +. A-hend-all, diaes-bras e vez dezranñ an abegoù aroueziet Dkks, dre an abeg ma vez ar reizhiad sonframnel e pep yezh ken ledan hag ar yezh en he fezh. "Mar gellfed lemel diouzh ar geriadur

kement a ziwanas dre wikefre ar soniadelezh, dre gontammadur ar yezhoù estren, dre relikeaat ar yezhadurourion, dre emzivreziañ ar yezh, e tizolofed moarvat e diazez pep yezh ur reizhiad-erzteurel berr a-walc'h, padal hevelap na vefe ket tidel envel gouloù ar gouloù mar anver noz an noz" (Merleau-Ponty).

D e d a l v e z a d u r i o ù

Kemeromp bremañ rolloù kenderc'her-
iadoù ar pevar ger gallek ADDITION, SOUSTRACTION, MULTIPLICATION, DIVISION, evel m'hon eus o savet bennoz d'an daouzek geriadur ha geriaoueg, ha studiomp anezho dre an hentenn hon eus diferet.

I. ADDITION.

L'Arm- (1) crisscance Ddd -;
GREg. (1) cresgancz; (2) laquidiguez a nevez Sem -;
GON.FB. (3) strôbad, (4) stroll, (5) strollad Ddd -, Dku -;
TDE.FB69.(6) kresk Ddd -;
MOA. -
JABA. (3) strobad;
VALL.19. (7) strolladur Ddd -, Dku -;
VALL.31. (8) daspugnadur Dku -;
CLKJ. (9) kenstroll Ddd -, Dku -;
VALL.SUP. (10) holladur Ddd -; kontadur Ddd -, Dkkd +;
ROHE.FB.50. (8) daspugnadur, (12) kendaspugn Dku -;
DAGB.63. (13) sammadur Tbo 0, Tgl 0, Sem +, Sds +, Ddd +, Dku +,
Dkkd +, Dkks +;

(1) crisscance, cresgancz, (2) laquidiguez a nevez hon eus
bet tro c'hoazh da bledif ganto e-giz skouerioù uheloc'h; (3)
strôbad, (4) stroll, (5) strollad, (7) strolladur a zec'her kealioù
a liamm, era, hual, digevazas amañ, a zo adkavet avat e kevranoù
all ar jedoniezh, setu perak e teu Ddd - da heul Dku -; (8) daspugn-
adur a zo aroueziet evel (12) kendaspugn a gaver studiet uheloc'h;
(9) kenstroll, evel (3,4,...); (10) holladur a zo forc'hellek o
vezañ ma na vez ket bepred un hollad eus ur sammad; (11) kontadur
a zo forc'hellekoc'h c'hoazh, hag en stummet dre Dkkd, enebet ouzh
diskontadur II(4); (13) sammadur, o vezañ ma'z eo bet degemeret
gant SADED, a dalvez ar boan bezañ studiet pizh : Tbo 0, eleze, mar

ne deo ket bet boaziet c'hoazh, da nebeutañ ne zistroad ger hir-
voaziet ebet; Tgl 0, rak a orin latin (sagma) eo ar ger, unan
eus "ar vevelien gozh bet keit amzer en ti ma seller outo evel
kerent", gouez da Roparz Hemon; Sem +, Sds +, rak aes da embreg-
er ha da ziforc'hañ eo stumm ar ger; Ddd +, rak ar ster nevez
roet amañ d'ar ger a ziwan war un dachenn ken pell diouzh tach-
enn ar ster kozh ma n'eus ket riskl a forc'hellegezh; Dku @ a
zo da gompren evel-henn : divoas eo ar ster roet amañ d'ar verb
"sammañ" (Dku 0), nemet e c'hell evelkent ar ster nevez bezañ
deveret aes eus ar ster kentañ : sammañ → lakaat war → lakaat
ouzhpenn (Dku +); Dkkd +, rak lodek eo ar ger er reizhiad samm-
adur, sammad, h.a., liesadur, liesad, h.a.; Dkks + a arouez
amañ ar c'hlotadur sonframmel etre ar ger sammadur hag e geñver-
eg lamadur; merket ivez, a-fet kevazaster sonframmel, e "sammer"
war ar brezhoneg samm (latin sagma, galleg somme) ster al latin
summa (galleg somme); buhez ar yezhoù, ha d'he heul ar Sturvezh-
ouriezh, ne gilont ket rak seurt hironadurioù sellet a-dreuz
gant ar glanyezhour.

II. SOUSTRACTION.

L'Arm- (1) teenn ur som bihan ag ur brass, devoutt pétra chomou
GREg. - ne e ar er brass Sem -;
GON.FB.(2) soustraire, tenna eunn niver euz a eunn niver all Sem -;
TDE.FB69. -
MOA. -
JABA. (3) distrobad Ddd -, (Dkkd +);
VALL.19. (4) diskontadur Ddd -;
VALL.31. (4) diskontadur;
CLKJ. (5) diforc'h Ddd -;
VALL.SUP. -
ROHE.FB.50.(4) diskontadur;
DAGB.63. (6) lamadur Tbo 0, Tgl +, Sem +, Sds +, Ddd +, Dku +,
Dkkd +, Dkks +;

(1), (2) a zo anat o diembregadusted; (3) distrobad, evitañ
da vont e reizhiad gant e geñvereg strobad I(3) (Dkkd +), a zo

Ddd - d'e heul; (4) diskontadur a zo Ddd - o vezañ ma'z eus dija gant diskontañ ur ster kenwerzhel, eleze en un domani re dost d'ar jedoniezh; (5) diforc'h a zo ivez Ddd - o vezañ ma'z eo lakaet gant CLKJ da zoc'heriañ war un dro ar jedadur hag e zis-oc'h; (6) lamadur a zo Tbo O, o vezañ ma ne gaver ket ar stumm er geriadurioù, evit d'ar verb lemel bezañ a-henvoaz gant ar ster roet da lamadur; Tgl +; Sem +; Sds +, daoust da vezañs ur verb lammat, n'eus forc'hellegezh-stumm ebet da zoujañ evit bremañ; Ddd +; Dku +; Dkdd + ha Dkks +, gwelout sammadur I(13).

III. MULTIPLICATION.

L'Arm- (1) crisscance, (2) crisscadurr, Ddd -;
 GREg. (3) oresa, (1) oresquanez, (4) cresquadurez, Ddd -;
 GON.FB. (5) kresk, Ddd -; (6) muiédigez, Ddd +, Dku -;
 TDE.FB69. voy. augmentation.
 MOA. -
 JABA. (7) liezkementadur, Sem O, Sds +, Ddd +, Dku +;
 VALL.19.(8) muadur, sl. (6); lieskementadur, sl.(7);
 VALL.31.(9) liesa, Sem O, Sds +, Ddd +, Dku +, Dkdd O; (11) liesadur,
 CLKJ. (13) lieskementadenn, sl.(7); sl.:DAGB.63; (12)
 VALL.SUP. - lieserez, sl. (9);
 ROHE.FB.50. (11) liesadur, (7) lieskementadur;
 DAGB.63. (11) liesadur, Tbo O, Tgl +, Sem +, Sds +, Ddd +, Dku +,
Dkdd +, Dkks O;

(1), (2), (3), (4), (5) a zo anat o forc'hellegezh, sellout I(1); (6) muiédigez, Ddd +, Dku -, muiañ n'eo ket dre ret liesañ;
 (7) liezkementadur a zo Ddd +, Dku +, Sds +, nemet Sem O; (8) evel (6); (9) liesa a zo Ddd +, Dku +, Sds +, Sem +, nemet Dkdd O o vezañ ma venk dezhañ ar gouffenn -adur o venegiñ jedadur; (10), (13) evel (7); (11) liesadur evel (9) nemet Dkdd +; (12) lieserez evel (9).

IV. DIVISION.

L'Arm- (1) rann, Ddd -; (2) difforh Ddd -; (3) disparti Ddd -;
 GREg. (1) rann; (3) disparty; (4) diforc'hted Dku -;
 GON.FB.(1) rann; (5) darn, (6) skalf, (7) lodenn, Dku -;
 TDE.FB69. voy. partage, discorde, désunion.

MOA. -
 JABA. (1) rann;
 VALL.19.(8) rannadur Tbo O, Tgl +, Sem +, Sds +, Ddd +, Dku +,
 VALL.31.(8) rannadur; Dkdd +, Dkks O;
 CLKJ. (9) petvedennadenn Tbo O, Tgl +, Sem O, Sds +, Ddd +,
 VALL.SUP. - Dku +, Dkdd @, Dkks O;
 ROHE.FB.50. (8) rannadur; (10) keitrannadur evel (8) nemet Sem @,
 DAGB.63. (8) rannadur; Dkdd @;

(1), (2), (3), (4), (5), (6), (7) a ra sovel an aters hag-eñ ez eo ar ster a lakaomp-ni e penn-kont, hini ar pevarejedadur, a lakae ar c'heriadurourion war an termenol-se. Evit reoù'zo evel skalf, lodenn eo aes atehiñ; evit reoù all, evel rann, e c'heller menel en entremar. Forzh penaos, n'eo ket emell ar Sturvezhouriezh respont hevelep aters : ur ger kinniget war un amboaz reizh a c'hell bezañ fall, pa zegouezh bezañ mat d'ur ger bet kinniget war ur c'hammster. Ar sturvezhour a varn ar pezh a wel hep derc'hel kont eus ratozhioù ar geriadurour. Tri ger er roll-mañ a zo dec'heriadoù mat : rannadur, petvedennadenn, keitrannadur. A-fet abegoù tonkadel ez int o-zri Tbo O, Tgl +; a-fet diforc'h-ellegezh ha kevazaster ungerel ez int c'hoazh o-zri Ddd +, Dku +; rampe ez int ivez e-keñver diheñvelsoded, nemet unan a zo embregadus-mat (8) rannadur Sem +, unan a zo embregadus a-walc'h (10) keitrannadur Sem @, an trede a zo diaesoc'h da embreger (9) petvedennadenn Sem O. Heñveldra evit ar c'hevazaster kengerel gerdarzhel, muioe'h kevastag eo ar reizhiad sammadur-lamadur-liesadur-rannadur eget ar reizhiad kenstroll-diforc'h-lieskementadenn-petvedennadenn, pe c'hoazh ar reizhiad daspuzadur-diskontadur-liesadur-keitrannadur; alese an aroueziadur : (8) rannadur Dkdd +, (9) petvedennadenn Dkdd @, (10) keitrannadur Dkdd @.

T A O L E N N

DAZONT AR BREZHONEG gant Youenn Olier	P. 5
KUDENNOU AR YEZH GANT AR YAQUERION gant Abenez	21
KEVELEREZH PREDENEK gant Kervorc'h	25
AKADEMIEZH VREIZH gant Jil Ewan	27
GERIDU KOZH EVIT EZHOMMOU NEVEZ gant Goulven Pennaad	35
PERAK DIBAB AR BREZHONEG EVEL YEZH-STAD ? gant Gweltaz Bodmean	41
EVEZHIADENNOU WAR YEZH AR QUIZIEGEZH gant Abanna	51
MESKAJ gant Alan Toravel	59
AR STOURM POLITIKEL HAG AR YEZH gant Erwan Gwegen	65
AN EMSAV HAG AR YEZH gant Brac'hed Kerne	73
YEZH HA REZID gant Rigakos	81
STUDIENN E SIGUR ANVIDU AR PEVAR JEDADUR gant Kreizenn Imbourc'h Sturvezhouriezh S.A.D.E.D.	89



Komanant 12 niverenn 45 F.
Komanant d'ar Geriadur Istorel
hepken (4 niverenn) 15 F.
Komanant hep ar Geriadur Istorel (8 niverenn) 30 F.

Sekretour : M.P. CALVEZ, Bréhec, FLOUHA, Côtes-du-Nord, BRETAGNE

Komanantoù : Dr ETIENNE, CCP 16 093-13 Paris

Liesskrivet o ti
Herve ar MEE, 32 Plasenn al Lisoù, Roazhon
CPPP N° 35.709
Diskleriet hervez lezonn, Eil trimiziad 1964

Priz ar c'haier-mañ : 7,50 F.

AR BED KELTIEK KELAOUENN VIZIEK

AR BED KELTIEK a zo bet savet e 1951. Adalek 1959 eo aet da gelaouenn viziek.

Etre 1951 ha 1958, AR BED KELTIEK en deus embannet 560 pajenn vras (well-wazh 70 pajenn bep bloaz).

Embannet en deus :

144 a bajennoù e 1959		
148	—	1960
192	—	1961
202	—	1962
216	—	1963

Betek an 31 a viz Kerzu 1963 en doa embannet eta 1462 a bajennoù bras, peadra d'ober 8 levr a 300 pajenn ment ordinal.

Petra a gavit da lenn war *Ar Bed Keltiek*

AR BED KELTIEK a ro deoc'h bep miz KELEIER EUS AR BED-HOLL.

Keleier a ro deoc'h ivez eus kement tra a sell ouzh BUHEZ AR BREZHO-NEG : levrioù nevez, bodadegoù, skolioù, h. a.

Neuze ez eus pennadoù-skrid niverus diwar-benn traoù a bep seurt : Istor, ARZ, SKIANTOU, LENNEGEZH, h. a.

Darn eus ar pennadoù-se a gomz eus AR BROIOU KELTIEK.

Bez' ez eus alies KONTADENNOU, BARZHONIGOUGOU ha KANAOUENNOU.

Kenlabourerien *Ar Bed Keltiek*

AR BED KELTIEK a zo renet, evit pezh a sell ouzh ar skridoù, gant Roparz HEMON, a oa gwechall rener GWALARN.

An dud-mañ o deus kenlabouret betek-hen :

Vefa de Bellaing, J.-B. Boucher, P. Denez, Anjela Duval, Arzel Even, Jili Ewan, Erwan Galbrun, A. Heussaff, Kerlann, Ewan Konan, R. Laouenan, L. Loarer, Ivona Martin, Gw. Ar Menn, F. Ters, A. Toravel.

Evit ar re a gar lenn brezhoneg, hag ivez ar re a zesk brezhoneg, n'eus ket gwelloc'h eget kaout AR BED KELTIEK kaset BEP MIZ betek o zi.

AR BED KELTIEK ne goust nemet 10 LUR AR BLOAZ. An 10 lur-se a dleer kas da :

AR BED KELTIEK
21, rue Dixmude, Saint-Marc, BREST (Nord-Finistère).
C.C.P. Rennes 1907-07.

PAPERENN-GOUMANANT

Anv

Chomlec'h

.....

.....

Kas a ran deoc'h 10 lur (dek lur) da gaout AR BED KELTIEK e-pad ur bloaz.

Deiziad : 19....

Sin :

Bez'e c'hellit kas ar baperenn-mañ da AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, Saint-Marc, BREST (Nord-Finistère). A-walc'h eo koulskoude kas ur chekennbost d'ar gont-red C.C.P. Rennes 1907-07, skrivet warni : « koumanant-bloaz da AR BED KELTIEK ».

